

BRUD

Niv. 5

HANŮV 1958

BRUD

ar Yez hag ar Vro

Kelaouenn lennegel drimizieg **Emgleo Breiz**

EIL BLOAVEZ - Niverenn 5

HANV 1958

Komananchou :

Komanant-bloaz : 1.000 lur
Komanant-skoazell : 1.500 lur
An Niverenn 300 lur

Kas ar skridou, al liziri hag an arhant da :

« **BRUD** »

Revue littéraire d' « **Emgleo Breiz** »

B. P. 17, Brest

C. C. P. 1921-04 Rennes

Niv. 5



Ar Yez hag ar Vro

TAOLENN

◆ F. FALC'HUN :	
Diwar-benn amzer da zond ar brezoneg	5
◆ Per HELIAS :	
Bed	9
◆ MAB AN DIG :	
War-dro d'am zour	25
◆ Padrig HELLEN :	
Hañv	48
◆ C'HOARIVA BREZONEG.	
Per HELIAS :	
Eun den maro ha ne goll ket e benn	55
◆ BREHONEG BRO-WENED.	
R. En DUIGOU, G. Er MARHOLLEC, N. CAIGNEC :	
Pennadeu (El Loned kollet)	69
◆ BREZONEG BEO AR BOBL.	
FEST-NOZ E GRONVEL	74
Kanaouenn-pobl dastumet gand « Fiseled Groñvel »	
R. GARGADENNEC :	
An neiz labous; Fañch Boned Gwenn; Ar Stripou . .	96
Itron Y. COSQUER :	
Kollet ar Haolig	99
◆ LODENN AR RE YAOUANK.	
Per VELLY :	
Eun dro pesketa	101

R. BILLIEC :	
Gouleier oh enaoui, goanagou o vervel; Gouleier o vervel, goanagou oh enaoui	102
◆ NOTENNOU AR FURCHERIEN :	
LOK :	
Diellou; Rollou-Madou	108
◆ AMAN HAG AHONT :	
Pladennoù ha Leoriou; Notennoù	110
Pemped Kenstrivadeg Yann Sohier	112
Kelennadurez ar Brezoneg: eur Mennad-Lezenn nevez	114
◆ EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ	115



Diwar-benn amzer da zond ar brezoneg

gand F. FALC'HUN

Ar bed a dro ken buan en deiz hirio ma vezom o hedal gweled epad eur vuhez den, ha ma welom e gwirionez, kement a gemmou eged gwechall epad milbloaveziou. Petra vo buhez ar rummadou a deuo war on lerh? Disheñvelloù hoaz, moarvad, diouz on hini eged m'eo bet on hini diouz hini on tudou koz.

Setu ar pezh na dleom ket dizonjal pa gomzom d'ar re yaouank euz plas ar brezoneg e Breiz-Izel en amzer da zond. Na glaskom ket rei dezo da gredi ar pezh na vem ket sur anezañ on unan. N'eus ket gwasoh fazi en o heñver eged kinnig dezo evid o buhez eun diazez ha na dalvezfe ket evidom da genta. Ken lemm ha digor eo o daoulagad eged on re, hag e welont ne dro ket ar bed warzu ledannaad tachenn ar brezoneg er vuhez hag er vro. E keñver ar poent-se, petra hellom da ober evid cheñch penn d'ar vaz, ha petra na hellom ket?

Ar pezh a dleom da glask ober, hag a zo tu da ober, a gredan, eo kemma al lezennou a berz stad a labour a eneb ar brezoneg. Ha da genta ar re a zah anezañ er-mêz euz ar skol hag an arnodennou.

Ar pezh na hellom ket ober eo cheñch natur an den, cheñch penn da lezennou ar bed naturel, lezennou hag a dalv ive evid ar yeziou, traou kemmiz ha marvel evel kement a vev war an douar-mañ.

Al lezennou bet savet, adaleg ar bloavezh 1794, evid mouga an oll yeziou all er Frañs nemed ar galleg, ne glaskent nemed kas buannoh d'ar vered yeziou hag a greded e tlient mervel dizale, n'eus forz penaoz. Souezet braz e vije bet saverien al lezennou-ze ma vije bet lavaret dezo e vije bet hoaz beo mad an oll yeziou-ze eiz ugent vloaz war o lerh.

Beo int, med klañv braz evelato. Daoust ha parañs a hell beza evito, ma ve tennet diwarno an ereou bet skoulmet en dro dezo evid o gwaska? Daoust ha taloud a ra ar boan klask ar parañs-se? Setu ar goulennou a zo e don kalz kalonou ha sperejou e Breiz. Goulennou hag a reseo respontou disheñvel hervez an dud. Eur respont dezo eo a ginniger amañ.

N'eus ket pell, Wladimir d'Ormesson, a anavez mad e genvroiz, hag e-neus bet tro meur a wech da zellout outo gand daoulagad an estren, a gomze euz o « impalaeriez kulturel ». Dindan kalz pluennou nebeutoh brudet e heller lenn menozioù heñvel. Setu eul « lavarenn » ha ne vije ket bet klevet hanter kant vloaz pe zoken tregont vloaz a zo p' edo hoaz an « dra » e barr he nerz.

P'emei war he diskar e weler ez eur bet eet re lark ganti. Ha dre ma 'z eur bet eet re lark ganti e gwirionez eo emei war he diskar.

Anzao a reer hirio evel eun doare pehed, evel eur si da vihanna, ar pez a veze meulet gwechall evel eur vertuz, pa gomzed a vouga yeziou ha sevenadureziou poblou all dindan yez ha sevenadurez Bro-Hall. Evid o mad hag o eürsted oa, evel just, rag techet om oll da gredi ne hell ar re all beza eüruz nemed diouz on patrom.

Hogen, nevezenti a zo er Frañs war ar poent-se abaoe eun nebeud bloaveziou: koustiañs eun niver brasoh brasa a dud desket n'emei mui a du gand ar vougerien yeziou bihan. Anzao a reer bremañ e tleer o lezel da veva. Beh am-eus o kredi e ve kavet hiviziken eur Ministr an Deskadurez da embann e rank ar brezoneg mervel evid ma vo peurunvanet ar Frañs.

E gwirionez, ma 'z eus cheñchamant, eo ive dre ma 'z eus bet ranket, dindan sellou ar bed a-bez o para war ar holoniou koz, diskouez muih a zoujañs evid yeziou ha sevenadureziou ar poblou tra-mor. Hag eo diëz nah ouz Frañsien ar gwiriou a anavezet da boblou du pe velen.

Ouspenn, ar galleg e unan a zo hirio aliez o kila er-mêz euz ar Frañs. Ar Hallaoued ne esafe ket dezo e zivenn en diavêz ma ve gellet rebech dezo e klaskont mouga dindannañ en diabarz yeziou all bian-noh. War diabarz ar Frañs ive ema daoulagad ar bed oll o para. Setu perag eo èset kefridi ar gannaded a glask lakaad da goueza al lezennou pe reolennou a berz stad bet savet evid mouga ar yeziou rannvroel.

Daoust ha lavaret a heller, en abeg da ze, eo kouezet an oll skoilhout? Pell ahano. Ne greder mui anzao e klasker mouga ar brezoneg. Med goulenn a reer hoaz ma vezo lezet da vervel. Perag?

Eun abeg politikel a zo da genta. Euz ar Frañs eo bet skignet, gand ar Revolution, « aviel nevez an amzeriou modern », evel a lavare Ferdinand Brunot, hag ennañ ar reolenn-mañ e touez re all: « eur vro, eur yez ». Setu perag ez eur bet staget, adaleg 1794, da ober brezell d'ar yeziou bihan, rag harzou ar vro o-doa lammet, e meur e leh, dreist harzou ar yez, harzou ar galleg.

An « aviel nevez » a zo bet digemeret, dre vraz, en Europ a-bez en 19^{vet} kantved, hag en on amzer er bed a-bez. E meur a leh avad ez eus bet cheñchet penn d'ar geriou en unan euz ar reolennou stur, ha lavaret, n'eo ket « eur vro, eur yez », med « eur yez, eur vro ». War an diazez-se ez eus bet stummet broiou nevez, evel an Almagn, an Itali, ha distammet broiou koz, evel an Aotrich-Hongri. Broiou all a ve gellet da zistamma hoaz: kement hini ne glot ket e harzou politikel gand e harzou yezel. Daoust hag ar Frañs n'eo ket unan anezo?

E Pariz e lavaret: « eur vro, eur yez ». Hag e Breiz, skuiz gand ar brezell ouz ar brezoneg, lod o-deus respontet erfin: « eur yez, eur vro ». Gand pere edo ar gwir?

Ar gwir n'edo e tu ebed. Rag war ar poent-se « aviel nevez an amzeriou modern » a oa eun aviel a vrezell, da lavaret eo ar hontrol beo d'an Aviel.

En on amzer eo deuet kement-se da veza frêsoh. Ar Frañs he unan n'he-deus ken muih a bouez er bed eged Breiz on duked en Europ gwechall. En em gleved a rank gand he amezien evid sevel Stadou-Unanet an Europ, anez beza flastret abred pe ziwezad etre

ar Rusi hag an Amerik. Petra vezo yez stad ar Stadou-Unanet-se? Daoust ha komzet e vezo hoaz euz « eur vro, eur yez » evid an Europ nevez emaez o klask sevel dirag on daoulagad? Ne gredan ket. Re vraz stokad e-neus bet an « impalaeriez kulturel » koulz hag an impalaerieziou all. Deuet eo an amzer ma ranko kalz poblou gouzoud kenveva en eur vro en eur ziskouez doujañs an eil evid yez ha sevenadurez egile. Ha ne weler ket penaoz e hellfe ar Frañsien kendelher pell da nah ober kenetrezo ar pez a rankint da ober evel Europeaned.

« Aviel nevez an amzeriou modern », « eur vro, eur yez » koulz hag « eur yez, eur vro », a zo deuet da veza kozig evid on amzer-ni, en eur bed unanet en despet dezañ gand an aon rag ar bombezennoù atomik.

Daoust ha tud a zo hoaz o kredi e heller sevel eur vro disparti war ziazez ar brezoneg? Ar re a houlenñ maro ar brezoneg evid na vo mui na digarez na diazez evid eur seurt disparti a zoñj martreze e darvoudou c'hoarvezet e Breiz n'eus ket ugent vloaz. Bretoned o-deus bet roet digareziou kaer dezo, a heller anzao. Digareziou toull n'int ken, avad. An unvaniez, er bed a vremañ, a rank beza greet gand liammou startoh eged yeziou. Hag an unanded a yez, er hontrol, n'eo ket gouest da deuzi en unan ar poblou a gomz saozneg, pe spagnoleg, pe bortugaleg, pe zoken galleg.

E gwirionez, enebourien wasa ar yeziou bihan n'emaint mui el lezennoù nag er gouarnamanchou, n'eus forz pegen direiz ha kaled e vent, med e natur an den, hag e stad ar bed evel ma tro dirazom.

Euz yez koz, na anavezom ket kalz a dra anezi, hag a anvom indo-europeanez, a zo bet en em rannet hag eil-rannet a hed ar hant-vejou, dre ma ranke an dud choñ en o hornig bro, ha m'oa awalh dezo kompren yez ar re a hellent da zarempredi. Evelse e kemmas ar yez en eun doare disheñvel e peb leh. Evelse eo bet rannet an Europ hag ar bed a-bez e kant ha mil yez. Evelse eo bet ganet ar brezoneg, koulz hag ar galleg.

Hogen ma vije bet, abaoe milbloaveziou evel ma 'z eus en on amzer, èzamant da vond da beb leh gand treñiou, kirri dre dan, listri, kirri-nij, da brena leoriou a beb bro, da zelaou en T.S.F. keleier euz pevar horn ar bed, biskoaz ne vije bet kemmet ar yez koz en eun doare ken disheñvel e peb leh, ha sur eo ne vije bet hirio na brezoneg na galleg. Ouz stad reuzeudig an denelezh, bremañ ez eus mil bloaz, pe zaou pe dri mil, eo e tere e gwirionez ar stad yezel ma vevom ennañ, rag diwar-nañ eo bet ganet.

Diwar stad ar bed en deiz hirio e tle sevel eur yez voutin, ma hello peb den desket komz gand tud euz e gendere n'eus forz e pe gorn euz ar bed, evel ma hell o darempredi, ha pa ne ve nemed dre lizer. Komz netra nemed eur yez vihan a zo evel beza dalhet chadennet en eur prizon, bremañ pa weler eun den a gomz eur yez vraz evel ar saozneg o redeg ganti dre ar bed a-bez, ha pa n'e-nije ket muih a zeskadurez eged eur Yannig a Blousiseurt. Ha Yannig ebed a Blousiseurt ne houzañvo mui a galon vad beza chadennet, pa rank aliez redeg da bell warlerh e dammig bara.

Setu petra ' zoñj an dud vunud e Breiz-Izel en deiz hirio, koulz hag e Bro-Gembre, e Bro-Skos ne en Iwerzon. N'eo ket int-i eo a zo

hiviziken o tivenn yez koz o bro, med « an dud abil », tud hag a oar mad, kalz gwelloc'h aliez, eur yez vraz evel ar galleg pe ar zaonneg, ha n'o-deus morse desket diwar o houst petra eo en em zantoud strobet pe jadennet gand eur yez vihan, a greiz poania da hounid o bara hag hini o bugale.

Daoust ha barnet eo eta ar yezioù bihan d'ar maro, ma vezont dilezet gand ar re a zo bet beteg henn o gwella divennourien? Med perag e teu d'en em staga outo an dud desket hag a oa gwechall a eneb dezo? Daoust ha saveteet e hellfent beza ma stankaje buan awalh, etouez ar re o homz, an deskadurez, an êzant, hag an nerz kalon?

Ero ema, d'am zoñj, ar zilvidigez nemetañ. Nemed euz broiou diwarlerh e ve komzet, n'eus amzer da zond, hiviziken, evid yezioù bihan evel ar brezoneg, nemed e poblou diou-yezeg, da lavared eo e-touez poblou desket awalh, pinvidig awalh, ha kaloneg awalh evid delher beo eur yez war ar marhad, eur yez hag o dalho stag ouz o zadou koz heb o dispartia diouz o henamzeriz, eun delenn da eila o mouez dezo hebken pa gemerint perz e kaniri ar bed, eur wiskamant speredel ha ne vezo mui truilhou ar paour na hell ket prena gwelloc'h, med eun dilhad gouel ken kaer hag hini n'eus forz peseurt pobl all, ha disheñvel evelato, evel merk a bersonelez.

Daoust ha ne welit ket ho kenvroiz re gaer, a vezo goulennet ouzin, o kredi e hellont kerzed ganeoh warzu eur pal ken uhel? Ha kaoud a ra deoh e kemerint, evid delher diou yez beo en o zouez, eur boan na vezo ket goulennet digand ar re a gomz eur yez vraz? Perag samma anezo gand eur beh ouspenn? Ha n'eo ket awalh goulenn diganto beza ken kaloneg hag ar poblou all?

Nann, n'eo ket awalh, da vihanna d'ar re a 'fell dezo savetei ar brezoneg. Ar vrezonegerien a zo koulz tud hag ar hallegerien pe ar zaonnegerien. Med ar brezoneg, kaer on-eus, a zo eur yez gwan ha dister e keñver ar galleg pe ar zaonneg, ha pa ne ve nemed dre niver an dud a gomz anezañ. Hag evel euz an dud a yehed dister, e ranker kemer muioc'h a zoursi anezañ, anez e lezer da vervel abretoh. Kement hini a labour evid ar brezoneg a oar peseurt beh ouspenn e-neus kemeret war e jouk.

Rebechet e vez deom awechou klask kas an traou war o hiz, pe mired outo a vond war araog, en eur labourad evid ar brezoneg. Doare ha doare a zo da ober eur seurt labour, gwir eo. Piou avad a rebecho deom klask ober euz on henvroiz tud pinvidikoh e peb giz, desketoh ha kalonekoh? Hogen, ma teuom a-benn euz on taol, piou a rebecho deom beza saveteet ar brezoneg war ar marhad? E giz ebed, on poan ne hell beza eur boan gollet.

F. FALC'HUN.

BED

gand

Per HELIAS

*Te vo goapêt gand braz an dud,
Te zavo ti war drêzenn yud,
Te livo 'n oabl heb vad ebed.*

Pierre DE RONSARD.

*Tu seras fait du vulgaire la fable,
Tu bâtiras sur l'incertain du sable,
Et vainement tu peindras dans les cieux.*

SKLEURENN

Eiz eur an diskar-amzer glaz,
Eiz eur ar himiad mud etre noz ha deiz!
An treñ en em ziuuz,
War bouezig ha war bouez,
Er-mêz euz rouestl an henchou dir a-raog an tiz,
A gerz etre daou gleuz fetiz
An tier troet o zu kuz
Ouz harz ar 'foz.

Digor prenestrî sklêr war an teñval a werz
Tiegez goude tiegez,
Ma ne weler nemed gwrazez
O ren e-barz.
Eiz eur, mare kaer ar vaouez!
Aze n'emañ ket ken ar gwaz,
Lonket gand labour diavêz;
Ar vugale n'emaint ket hoaz,
Ar housked difiñv en o breiz.

Ha darn euz ar methedou kêz,
Dieg warlerh an noz,
Pe skuiz a-raog an deiz demdost,
A-dreuz o bleo melen a gas,
War-bouezig ha war bouez,
Broust pe grib didruez;
A-dreuz pennadou bleo fuilhuz,
Gwriet brao gand kirzier an noz,
An diacul a oar penaoz.

Ar re-ze a ginnig o horo d'an avel mouest,
O dioulez harpet-tre ouz barlenn ar prenestr,
Treset o skeudenn hanter-noaz
Gand sklerijenn lampeier seiz,
Lampeier seiz eur gambr direiz
Goloet a hloan hag a voulouz
Ken flour ha neiz.

Med sklêrder kriz
Eur goulou noaz
'Leh-all a veuz
Eun tiegez
Kempennet piz
Gand e vestrez.
Hag i a reiz,
Dilhadet striz,
He bleo ivez,
A-diz, a-diz,
He bleo kompez
Goude an noz.

Hag an treñ en em zil en diskar-amzer glaz,
Dalhmad, dalhmad!
An tier, war ar ribl, a deu da veza rouez,
A-herr, a-herr!
Et da get bleo melen ha bleo du ar gwrazez;
Eom 'ta, eom 'ta!
War plênenn ar mêziou e sav skeudenn ar gwez.
Kuit.

Pell, pell!
Dirag lagad ar beajour
Luskellet gand an treñ,
Sioul, sioul!
E chomo 'vel eun arvest plên:
Merhed, divreh d'al lae, a gendalho da ren,
Dieguz, travellour;
E kendalho da drei kuchennadou bleo flour,
Beteg ma vefent, sil-ha-sil,
Dispennet er zav-heol.

1949.

TEIR NOZVEZ

I. - EUZ A VARO DA VEO

Stank ha skañv war vatlenn an noz
E kouez eur vrumenn hlao,
Ganti blaz c'hwero ar tanngalon.
Troet ar bed da voged briz
Ha teuzet e alan peb tra, peb tra,
Na hent dirazañ na roud a-dreñv,
Dall e valean er vro vud.

Skoazell ebed na pell na kichen,
Netra da harpa dorn na lagad,
Beteg va horv a ya da zispenn,
Treuzet e gig, siwaz, taget e vel.
Da vrumenn ez an a-bez oll,
Kil-ha-troad, kil-ha-troad,
Ha pouez va ene a honez va horv.
N'eus hirio ebed mui etre deh ha warhoaz.

Distaget, distaget on, distaget!
C'hwez ar gozni ne drenko ket va yaouankiz.
Na gouli em hig, na glahar em spered,
Nag ar seiz trubuilh all.
Diwisket am-eus kabestr va horv,
Petra ta!
Evid kas va ene baour d'ar housk,
Noaz ha glan.
Ha ma n'eo mervel netra gwasoh,
Ra vo beniget ar maro-mañ.

Krenn,
E gwirizienn va buhez, eun doan a darz:
LAERET ON BET!

Piou a lavaro pinvidigez ar bed em horv?
Kelhig va lagad a lonke dremm an douar.
Dre roued va zell o silad mor an neñv,
Pesked ar stered a luzie o skant.

Alas, alas!
Va malvenn digor-braz
A furch dirazi o klask an heol,
Kaerder ha kened hag-all,
En aner.
Bremañ, p'eo bouzar va 'fenn.
Hekleo ebed ouz kanou an eost

Distrujet e goueleh divent ar peoh.
Kemend a hwez ma zoug an avel
Daoust hag e vefe kollet oll
Pa n'emon ket d'e 'frona?

Blaz ar frouez aho heb va zeod
Da betra dalvez?
Petra vern yen pe domm
Heb skrij va hrohenn veo?
Heb lazig va dorn perag eo ken flour kein ar haz?
Ha hoaz e kuzan traou a zo.

Nann, nann!
Tehom ahann d'adkaved va horv
Araog ma varvo gand an naon
Va ene intañv!

A!!
Roeñv ha breh war eun taol a diz
Eur roh er vrumenn gwag,
Ha n'eo ket honnez roh lemm ar peñse.
Ledan ha plên dindan va 'falv
E kavan eur voger vên.
You!
Paket adarre ar bed ganin
Dre va bizied.
Eur skoulm tano am stag adarre
Ouz aot ar vuhez

Kerkent, disterig hoaz, eur bann-heol taer
A doull hent e kalon ar vogedenn
Beteg va dorn astennet ouz ar mên
Hag e welan,
Hag e welan,
Ya, gand va daoulagad
O lintra va ivinou
Ha va horv, peb a nebeud, o sevel penn-da-benn
Euz a varo da veo.

II. - AR MARH

Uhel e kov an noz,
N'oun ped toull ruz entanet
A skarz war hed ar strêd,
Penn-da-benn,
Eun heol teuzet en o 'ferniel bero;
Eur ster a houlou, dre gorv ar gêr,
A gerz war-du pe mor?
Da vaga pe loar
Dislivet en neñv
E kas he lanc ar wazienn dan?

Netra ne weler war he riblou dall
Eleh m'eo savet, stag-ha-stag,
Tier an dud, m'hen goar mad,
Lammet beteg warhoaz,
Beteg ma tarzo warhoaz an deiz
Da galedi ar vein
Dre berz eur sklêrijenn
Ken koz hag ar bed
Ha bemdez, bemdez nevez badezet.

Med kein ar ster ne zoug netra,
Na bag na plouzenn en he red,
Ne zoug nemed he lint
Evid netra.

Trouz er goueleh!
Eun troad, eun troad ha daou droad all,
Pounner ha skuiz o tond dre ruz,
Sklint eur jadenn en o mesk!
Da biou an treid?

Da biou eur beh ken stard da stleja?
Da biou eur boan da derri daoulin,
Eur boan da leunia sah an noz,
Da biou an trouz?

Beteg pa welis, oh en em astenn,
War vroz ar strêd aour-teuz,
Treset e dua tamm an teñval,
Skeud eur marh,
Eul loen dilezet gantañ mestr ha karr,
E-unan kaer evel me va-unan
Dirag ar hannder kriz,
Ler e harnez war e lerh,

Torret e jadenn evel va hini,
Paour ha brevet koulz ha me,
O klask, alas, o klask e goll.

Glaod pilh ar goulou war e grohenn,
Ar marh a heulie hent e skeud
Strisa ma helle,
E benn d'an traoñ,
O peuri an dachenn melen-mel.
Ha setu emañ harzet boud
War eun taol
Da deurel eur houirnadenn hir
A gaso nerz e spont beteg harzou ar bed.

AR GOULEIER A ZO MOUGET.

Teñvalijenn, teñvalijenn,
Rouantelez ar peoh!
Klavet am-eus ar marh o sevel,
Eur pao, eur pao ha daou bao-all
A skarzas kuit, na pegen skañv,
D'an daoulamm brao,
Pevar bao, pevar bao, pevar bao,
Ken dineh
Ha me.

III. - KEMENER AN TENVAL

Eur wech e oan azezet en eul liorz
O sellet ouz an neñv o tua,
Ha pa guzas ar gwez a-dreñv an noz,
En em gavis e bartlenn ar bed.

Ar bed am douge, en e bez,
Dastumet endro din, gwele beo,
Gwele c'hweg ar housk pemdezieg,
Gand eul lamm-kalon en e greiz,
Am luskelle beteg ar vezventi
Hag ar 'falladenn.

Moredet, tostig d'ar get,
Eur wech hoaz, eur wech
Pa zellis ouz an neñv,
Gwilhadenn ebed
Na kann al loar,

Nemed ar pallenn zu,
Divent.
Ha va spont a yudas:

« Eur sterenn, eur sterenn, unan hebken,
Da zerhel pouez liñsel an oabl
Ouz eun tach aour!
Pe gwele ar bed a dalvezo da varuskoañ
Evid va horv sebeliet dre domm
Dindan pok ar mezer-kañv
O vond da goueza! »

« Aon ebed, aon ebed rag an teñval! »
Eur vouez em hichen a 'floure din
Hag eun dremm glaz leun a vousec'hoarz
(Marteze mouch al loar marvet bremaig!)
A skleure tost d'am hini.

« Aon ebed rag ar peur-nouz,
Va breur ken tuet d'ar vez!
Or gwir enebour eo an heol
Pa daol or horv dizolo
Da voueta debron hudur an nesa,
Kalc'h hag ene hag-all;
Pa diz or mel dre an daoulagad,
Laer gwall ma 'z eo war peb tra guz;
Pa dreuz or hrohhenn da glask hentou ar gwad,
Ha pa ra gwerz ganeom e-kreiz ar marhallah.

Med an teñval a ziwall ahanom
Deom on unan.
An teñval eo moger on domani kloz
Hag or harnez ereb d'an oll. »

« Piou oh, c'hwil hag a brezeg marz ha bam? »

« Me zo kemener war an teñval,
Kemener dall, dre stad ha micher.
Me a gempennno deoh eur vantell
Heb nadoz na neud,
Rag va danvez eo gwriad an oabl
Da greiz-nouz.
Ha setu emañ ar mare mad
Da vedi ar mezer du.
Dre hortoz te, tarz goulou-deiz
A gaso e steuenn da rouez.
Poent eo! »

Neuze e klevis, uhel ha pell,
Strakadenn eur gurun seh.
Liñsel an oabl a rogas dre an hanter
Hag a gouezas, tamm-ha-tamm,
A blegou pounner war va divreh,
Va daoulin ha va hein.
« Emoh gwisket da virviken! »
A zilas din eur vouez wan
Epad ma pigne dremm ar hemener
Beteg kalon digor an neñvou,
D'ober al loar.

A-uz d'am 'fenn, en noz dizolo,
An oll stered war enaou.

A VOUEZ IZEL

I

A vouez izel e vouskanen
Va hoant da veza dour, da veza pri,
Da veza mèn er hleuz,
Beb tro ma tarze bleuniou tan
Diwar greunenn ar hirri-nij
O hada stank eun ant a vrezel.

Noaz ha dizolo, preñvig-douar,
Me a hortoze an taol marr
D'am zroha etre daou.

Ha setu ma wadas va horv, eur wech,
Heb droug ebed, ma wadas er geot druz,
Nemed e poueze va hig pounneroh
Evid diskenn ez veo er bez.

Padal, on troet war va hein
Gand skouarn eun alar beo,
E gwir, divreh eun nesa
Ma tregern dre va 'fenn gurun e youh:
« Hemañ e-neus paket e stal! »

War lein an neñv, eur goumoulenn a zav,
Re-bar da zremm disliv eun Ankou,
Hag a ziskenn da bokad din
Em liorz an Olived.
« Boulhet eo va zalar diweza! »
E klemm, pell ouzon, va mouez izel.
Ha pôtr-ar-falh a dreuz e veg:
« Me oar va micher, n'ouzon ket? »

II

A vouez izel e vouskanen
Va hoant da veza bod, da veza ki,
Da veza mèn er voger,
Pa oen bahet gand ar Re Zu
A daole komzou berz bolejou
Evid gonid ar gaoz heb dale.

Va hein d'ar speurenn, daoulin brevet,
E oan o hedal eun taol trumm
D'am has da dañva blaz ar get.

Ha setu ma klevis ar peoh o verada,
Louzou kuzmuz, e gwazienn va halon,
Kaer em-oa sanko va dent em hig
Evid derhel va horv ganin.

Padal, on bet leusket en toull
Epad eun noz a zivarvelez
Ken hir m'em-eus desket, evid mad,
Ne ouien ket petra eo nehi.
Morailhet e oa bet an nor
Goude distaget ken eur gomz: « Warhoaz! »

Dre eur roued-orjal e spian ar hann.
Strink eun dourenn a veuz va lagad
Dre zelled re biz ouz an ehonder
N'am-eus gwelet ken brao biskoaz.
Al loar a gresk da leunia pez ar bah,
Patrom an Ankou treset warni.
« Warhoaz am-bo va heol diweza! »
E klemm, pell ouzon, va mouez izel.
Ha pôtr-ar-falh a dreuz e veg:
« Me oar va micher, n'ouzon ket? »

III

A vouez izel e vouskanen
Va hoant da veza toaz, da veza koad,
Da veza mèn en treuzou,
Pa hourvezas va horv er harr
Hag a oa tuilhet diwar diz
Dirag pôtr-ed ar vezegiez.

Ken bresk va buhez em zah noaz,
Sebeliet en araog el liñsel,
Ma oa-hi prest da derri krenn.

Ha setu va izili o tistaga brao,
Dastumet va oll nerz da skei eul lammig gwad,
Ken e kredan ez eus em hreiz eur biz e mall
O houlen digor da vond kuit.

Padal, emon beuzet a houloù kriz.
Trouz ar binviou dir a sklintin endro din
Dre ma hournij an teuzed gwenn
Evid menel difiñv ha stoui war an talm:
« Kerzit ganti, mad eo! »

Dall ha sebezet a sklêrijenn,
E verzan eur vreh din o tistrei
Pa wan ar strinkell pleg va ilin.
Kerkent e tarz brizennou teñval
O vond tro-dro war al lenn skeduz
Beteg stumm eun Ankou adarre:
« Poent eo lavared kenavo! »
E klemm, pell ouzon, va mouez izel.
Ha pôtr-ar-talh a dreuz e veg:
« Me oar va micher, n'ouzon ket! »

IV

A vouez izel e vouskanin, eur wech,
Va hoant da veza maro.
GAND MA OAR AN ANKOU E VICHER!

BIRVIKEN MUI

N'am-bo ket dudi mui
Da hedall trid ar bed o virvi
Pa lintr an heol e gliz ar mintin,
D'astenn va horv a-hed an irvi
El liorz briz a-dreñv va zi,
Silet ar hellid em izili,
Troet va hig da zouar-pri
Hag eur houil war va biz,
Na da ziwall ar zaout o peuri
Birviken mui.

Da hwitellad gand ar mouilhi
N'am-bo ket dudi mui,
Na da bignad da neiz ar big
Evid plomma bouedenn ar vi
Gand spi da ziskenn diwar-nij
Ma tisplegfe va hein iskilli.
Divennet c'hoari patati
Gand ar hoz termaji
Birviken mui.

Eur pistig kriz, ha petra ri!

24-6-56.

BRALL

1

Glazig va lagad
A zastum pezh ar mor e brall,
Gwagennou dre vagad,
Tarz an eon hag all;
Trid va levez
A ra heñvel ouz brall ar mor,
Va dousig, va enez,
Em lagad digor.

2

Mor, te a hoari,
Kerkent war gil, kerkent erru,
Etre goap hag avi,
N'ouzout war pe du;
Broud eun hirnezig,
Leun va 'fenn a gas brall eun doan,
Dirazout, karedig,
Va zouell, va 'foan.

3

Blaz an dour c'hwero,
E-mesk an avel a luskell,
Em halon re vero
Eur glahar a-bell;
A-hed va buhez,
Em lagad koulz hag er mor dall,
E kavin, pe truez,
Brall, koroll ha brall.

Servoz, 4 eost 1954.

SORHENNOU

Beb tro pa leuskan hent an oll
Gand eul lamm dreist ar hleuz.
Sorhenn, sorhenn, va buhez!
E kavan bedou all o hortoz,
War ribl ar bed nemetañ,
(Gevier, gevier, marteze!)
Mall ganto, alas, dond da wir,
Pa n'eo mad ar wirionez pemdez
Nemed da gorrvou beo.

Savit euz kalon an netra
Gand dremmou glaz ar re zilezet,
Bedou, bedou, va hoant!
C'hwi hag a spi va 'froudenn krouer
Evid pad eul luhedenn,
(Touell, touell hebken!)
C'hwi hag a jom a-dreñv ar gouel,
O hedal koulz an donedigez
Da leur an termaji!

C'hwi hag a skuilh eun hadenn werh
A zavo bleunioù war al loar,
Huñvre, huñvre, va gwad!
Ma kren ho skeud e dour va lagad,
Em spered emoh sounn,
(Moged, moged, moarvad!)
C'hwi hag a liv, gand bleudenn aour,
E steuenn vriz va gwiaherez,

DARVOUDOÙ AN DAOL-GRENN!

Gwerz a-viskoaz ha da virviken

*Korv an den
N'eo ket kalz a dra vad eneb d'ar bed
Hag a gren
Keit ha ma pad ar vuhez red
Araog mervel abred
Ha mond da netra
Er bez yen
Da larda douar piou oar evid petra.*

*Med ar bed
A dalvez leun dre berz buhez mabden
Hag eo red
Ar hrouadur berr-bad 'medken
D'ober e briz d'ar mên
A dro, krenn distag
A-vepred
En e lamm dall-gamm heb gouzoud tamm perag.*

1954.

MAB AN DIG

War-dro d'am zour

War-dro d'am zour dantelezet, e pardaeziou alaouret va bugaleaj, me a wele o nijal a gantchou ar brini du. Koagal a rênt en eur drei, evel an dud war al leur-gêr, goude eun eured. « Petra 'ganont, ar brini? Lavarit din Nen goz... »

— « Gwel pegen kaer an oabl glaz, pegen dudiuz ahont, etrezeg ti Zezig, ar mor braz. Gwel pegen kaer an tour melenet. Ar brini a gan meuleudi da Zoue, araog mond d'o gwele dantelez. »

— « Setu re all o tond. Euz a beleh e teuont, Nen goz? »

— « Euz a zebri o hoan, e Leztremeur, pe e Kerreter, va mabig. »

Hag i d'ober ive tro an tour, buan-buan, en eur youhal o levenez!

War-dro d'am zour dantelezet, saout Lanbaol a gerze d'o braou, leun o hov gand peuri dous ar glizennou, en eur vralla o zeiziou. Ar hirri a storloke, leun a velchenn.

— « Erru ar pardaez, Bi. » — « Ya, Job, eun devez brao a zo bet. »

C'hwez ar farz hag al lipig a zirede a-flao, euz an noriou digor, e-pad ma sourre an dienezrou, an draillerezou-lann. Ar gloherez, d'ar pilpazig, a gerze d'an iliz da zeni an Anjeluz. An eur a oa tremenet, aliez e sone re ziwezad. N'ez eer ket da zeni kleier e-pad ma horoer ar zaout! An orolaj a verke atao teir eur. Eun orolaj gaer... neimed ne valee ket. Tud a oa bet digaset euz a Bariz d'he dresa. Den ne hellas dond a-benn, ken e teuas d'ober eur zell outi ar Boudier. An ano-ze e-noa dalhet abaoe ma veze beb sul, ez-yaouank, gand eur horn-boud, o lakaad an dud da gana en iliz. Labourer-douar euz e vicher, eur spered lemm a zen, edo desketoh eged an oll ijinerien war ar mekanikou. Heñ eo a zresas orolaj Lanbaol, hag abaoe ar hleier a zon atao d'an eur.

Nag eo tener, em 'farrezig, son an Anjeluz! Ar brini, em bugaleaj, a dave o-unan d'e zelaou. Ar gwez braz wardro ar vered, me o gwele o soubla o 'fenn wardu ar beziou, hag en tiez ar wreg a leze er pod he loa-gog, evid lavared ar bedenn. An taoliou kloh a yê beteg

ar halonou da houlenn aluzenn evid an Anaon. Ar zioulder goude en em lede eur pennad, evel ar vogidell war an tiegeziou. Kleuzeuriou a weled dre ar prenezier o tridal, evel preñved-gwer e toull ar haeiou. Dizale war an henchou ar bouteier koad a strake, gand an dud o vond da veilha.

Peb ti a oa digor d'an oll, kenta veze gwelet oh en em gaoud tud euz ar penn all, pe zoken euz Sant-Pabu, euz Porsall. War-dro d'am zour nag a blijadur, nag a hoarz!

Ped gwech em-eus soñjet ennoh, pardaeziou dudiuz va 'farre-zig! Med n'eo ket hebken ar pardaez a zo dudiuz ennout. Ar vuhez a-bez a goroll, en eur mor alaouret, war-dro d'am zour dantelezet.

Ar had hag ar Person

— « Me n'ez in ket da lein ar miz da Dreouërgat, Soaz. Ar rabez ruz a zo mall o hwennad; goude merenn e stagin ganto. »

— « Evel a gerot. Aotrou Person » eme Zoaz. Ha kerkent edo Soaz e klud ar yer o klask viou. Hañ! Yer mad a oa er presbital, liou o tenna d'ar ruz warno, melladou traou hag a zozve viou melen diou wech brasoh eged viou all ar barrez. An dud oll a glaske kaoud ar ouenn euz yer ar presbital, med ne deue ket diwarno kalz a laboused bihan. Perag? Daoust ha me oar perag! Ar hihog koulskoude a oa eur gwall hini. Sez ar Vorel a lavare: « Ar yer-ze a zo yer grêt evid ar presbitaliou. O viou a zo traou da zibri ha nann traou da *viri*. » Lanbaoliz a gredas Sez ar Vorel, ha den ne glaskas pellob. Ha n'eo ket gwellob, a gav deoh? Lod euz an dud a ya e belbi o klask kompren re a draou. Ar presbital zo tost d'an iliz, hag an iliz zo leun a vis-teriou. Lezom 'ta ar misteriou, evel m'emaint emaint.

Soaz gand daou vi he-doa trawalh d'ober fritozen d'he 'Person. Eun tamm kig-moh a oa nevez digaset euz a Gerazal. Stripou a jome abaoe an deiz warlerh. Stripou euz a di Janig Koant! C'hwi, paour-kêz tudou, a zo en em gavet re ziwezad war an tamm douar-mañ! Ne ouezoh dare! Stripou a gavoh mad, med ar stripou en deiz a birio? Lorgnaja e-kichen a re a yê plah ar presbital da gerhad gand he 'fodig, gwechall da Witalmeze deiz ar 'foar. Ar re-ze a deuze evel mel er genou. N'eus ket bet ha ne vo morse er bed-mañ par da stripou Janig Koant.

**

Ar Person e-noa debret er zal vihan. An hini vraz ne veze digoret nemed da lein ar miz, ha kaer oa he digeri, da rei êr, en deiz araog, e chome enni c'hwez al loued. Ar zal vihan a oa koantoh, hag enni êr fresk. Breugeudi a rê ar person koz o sevel diouz taol, hag e keme-ras e gorn butun. Eur horniad, eun dro pe ziou d'al liorz araog staga d'al labour.

Nag eo dudiuz al liorz! Ar mogeriou uhel a droh an avel-vor hag an avel-gornog. Er hlouar e tispak ar gwez per hag avalou o bleuniou gwenn. An douar a zo leiz eun tammig, rag Lanbaol a zo savet war eur bern eienennou. Ma sellit piz ouz an iliz, c'hwi a welo evel prenezier digor dindanni, dreist-oll e korn ar zekreteri. On tud koz a oa ken gouizieg ha ni, hag a vire evelse ouz ar hoad da vreina. Evid sevel ti an Aotrou Doue, hag on tour dantelez, ar haerra tro-war-dro, ar veneh, eme ar skridou, a renkas el lebid karradou ha karradou gwez pin.

N'eo ket souezuz eta e ve eun tammig re hleb an douar e liorz ar presbital. A beb tu dezañ ez eus foenneier. Er penn an traoñ emañ poull Kerzivout, e klevet ennañ taoliou golvez, taoliou teod ive, êz deoh gouzoud. Er penn war-laez eur ouerennig a deu, dre eun toull er voger, euz feunteun Sant-Paol, da vaga eur poull all, poull ar Person. Ennañ, eur wech ar zizun, e teue an Douz da walhi dilhad fank ar presbital. Ar paour-kêz Douz, ken distagellet he golvez, a vije bet inouet-marzo m'he-divije ranket chom eno he-unan dindan ar gwrial. Soaz a deve eta ganti, ha pa dremenem, ni ar vousetaj, a-dreñv kein an iliz, e klevem kement a jaogell eged en eur hohi. Awechou e kemerem poulladennoù douar, ha boum! e-kreiz ar poull. Ni a rede ahano d'an daoulammou, e-pad ma tirolle en tu all an trompillhou. D'ar yaou warlerh avad e kouste ker d'on diskouarniou, pa 'z em d'ar hatekiz.

N'edo ket Soaz hirio oh ober ar houaj. Diou voualh a gane er gwial. Ar person koz o dichuas: « Mouilhi, emezañ, nag a vouilhi! Adarre e yelo ganto va 'fer ha va avalou. Eur 'fuzuilh a zlefe din kaoud. Med ne ouzon ket kalz tenna! P'edon oh ober va zervij e Montroulez em-oa unan, sanailheteurvuia. Ha pegeid a zo abaoe! La! D'al labour eur pennad, beteg poent ar rouzig! »

El lab vihan e kavas eur broch. Merglet oa, med an douar ne oa ket kalet. War benn e zaoulin, gantañ eun tavañcher koz leun a doulou, bet e kalanna da Zoaz pa zimezas (bremañ oa intañvez abaoe eun ugent vloaz bennag) eh en em lakeas war e zresig da denna roz-aer, dibennatuz, askol, a beb seurt louzeier o-dije mouget dizale e veterabez ruz: « Nag a boan, nag a boan, a zoñje, o-deus an traoù mad o sevel! An traoù fall, ar re-ze avad a deu buan. E va 'farrez eo heñvel! » Ha spered ar Person a nije euz ar vourh da Gerzengar, euz ar Strêjou da Boulledan. En eur huñvreal, en dommder, e teuas dezañ c'hoant kousked. Serra a reas e zaoulagad, ha goustadig e benn en em lakeas da hoari binta-banta.

**

Dadaouf! Dadaouf! Ha dreist e gein e lammas eun aneval, a zihunas krenn gand e diz ar Person koz. Eur had! Biskoaz! Outi a benn-herr e taolas e vroch, a dorras e daou damm en eur steki ouz ar voger. En eul lamm edo en e zav, dizroet en e zivesker eul lodenn euz nerz e yaouankiz, ha gand eur 'forh, dao d'ar had kuzet en eun rachad kaol. Ne hellas ket he 'faka. D'an daoulammou eh en em lakeas d'ober tro al liorz, ar Person koz dianalet war he lerb, atao gand e 'forh.

Epad an amzer-ze, d'ar red-tan ive, eh en em gave dirag liorz ar presbital, dre 'foenneg Jan an Douz, daou jaseour, martoloded e retred, gand o daou gi, a yeas war-eeun d'an toull ma rede drezañ dour ar 'feunteun e liorz ar presbital. Eno an daou gi, o lost besk oh hija, en em lakeas da harzal, ha da vont a evelse ouz ar had hent an dizro. O 'fuzuilhou prest da denna an daou henaoueg a hede. Ar

had a gavas eun nor zigor, dor ar guzun. Ha plaouf! Eur gador a fardigleo a gouezas. Soaz a oa ganti eur pladad chifretez. Spontet e taolas a-benn-herr ar plad ouz penn an aneval, en eur youhal. Ar haz morgousket a zistagas eur pechad lamm war eur girin a yeas ive d'an douar d'ober braoigou, epad m'en em gave, digor e hinou, ar 'forh en araog, ar Person koz: « Ar had, ar had! » emezañ.

Prest oe strobet gand ar gador, med evel eur paotr yaouank ugent vloaz ez eas dreist. Ar had, dre ar prenestr a oa lammet er porz. « Serrit an nor, ar prenezier, Soaz! Emañ deom! » En eur horn-tro ar Person koz a zailhas warni. Ebiou! Ha troad ar 'forh e daou damm! « Soaz, Soaz, eun oustilh! » Eur valaenn a gavas. « Te, kemer 'ta eur pilprenn! Deom dezi! » O-daou e lammont.

Siwaz! N'o-doa ket soñjet en toull a oa er voger, evid ar yer da vond da beuri e prad ar Hopi. Ouf! Edo er vered, ar had!

**

O-daou edont oh ober boz, Per Vig ha Glaoda Rouz. Beb a jopinad o-doa ever e ti Per ar Fourn, ha bremañ edont o vond da gemered beb a hini all, e ti Jobig Fañchig. Amzer o-doa forz pegement, ha dirag al letonenn e rejont eun tard: « Mad, n'eo ket lavared, eun tour kaer on-eus! Hini Gwitalmeze, netra en e gichenn. » — « Me 'm-eus soñj beza gwelet unan eun deiz en e veg, e benn en traoñ hag e zivesker war-laez. » — « Oh huñvreal emaut, Per, pe mezo edos! » — « Pa lavaran dit », eme Ber, eun den bihan, eun tammig tort, strobet gantañ bepred e zaouarn en e vruched. « Pa lavaran dit. » Ne yeas ket pelloh. Eun aneval spontuz a oa etre e zivesker, hag o veza ma ne oa ket mui, douetuz, gwall blomm warno, e yeas da steki e 'fri ouz hini Glaoda hag o-daou, mesk ha mesk, ez ejont da rodella er ouerenn, en eur behi. Koulskoude ne oant ket badi-nellet, ha petra 'weljont? Ar had er porched, hag o tond d'ar red war he lerb ar person koz gand eur valaenn, ha Soaz e blah gand eur pilprenn!

Kerkent edont en o zav, hag i d'ar red ive. An nor-dal a oa digor. Den ne zoñjas he zerra. An eil goude eben ar hadoriou en em lakeas da zañsal. Euz an eil tu d'egile, euz eur skabell d'eun all, ar had a lamme evel eun diaoul, war he lerb ar person gand e davañcher toull hag e valaenn, ar plah digoefet gand he 'filprenn, Per Vig ha Glaoda Rouz o boutou ganto en o daouarn, a reas diou pe deir zrollamm penn-dibenn dreist ar skabell.

— « Emañ deom! » a youhent beb an amzer. « Dizouezenn! » Ar had a yeas er-mêz dre an hent m'edo deut. Med e-leh mond wardu ar prad e troaz a gleiz. Daou denn strafuilhuz a lakeas da dregerni an iliz, an tiez ha kalonou an dud a rede war-lerb ar had. A zav-krenn e chomjont seizet evid selauo diling gwer ar sekreteri o koueza. Hag ar chas da harzal.

**

Daou gi o ficha o lost besk dirag eun toull prenestr a zindañ ar sekreteri, daou jaseour kropet o skrabad o 'fenn, pevar all sounnet, digor o genou war al letonenn! Ha gad ebed mui! « Deom da eva beb a vanne d'ar presbital », eme ar person koz, o tiroll da hoarzin.

Ne pebez person mad! Atao ez eus bet personed mad e Lanbaol. Hag an hini a zo bremañ a zo heñvel-poch ouz ar re a zo bet en e-raog.

Loan du Kerazal

Hizio ez eus c'hoant deski hebken traou gwirion d'ar vugale. Mad pe fall? Eun dra re ziêz da zibuna! Evidon-me a lavar bennoz da Zoue da veza deut er bed-mañ abred awalh evid selaou ha kredi istoriou o-deus lakêt va halon da dridal, o-deus digoret va spered war draou kalz kaeroh eged an taolennou divalo, doñjeruz, he-deus lakêt ar vuhez ken aliez dirag va daoulagad.

Ar Brun koz, en eur zarevi ar podad, a gonte deom edo eun deiz o tond euz a Zant-Pabu gand e wetur. Dirag Kroaz an Aber eh en em gavas gantañ eun dañvad brasoh eged e loan. Al louaj a jomas a-zav. An dañvad braz a deuas d'e hwesa. Krena a rê ar paour-kêz kazeg. Hag ar Brun 'ta, nag e krene! D'an daoulammou an aneval sebezuz a yeas kuit en eur vlejal dre hent Roservo.

Kroaz an Aber! Nag a draou souezuz a hoarveze dre eno! E mêzou ar Haier an dud a veze kollet. Ya! Kenta ma veze klevet: « An neb-mañ-neb a zo bet kilbet en noz-mañ. » Epad an noz pad e redent tro-war-dro d'ar mêzou heb en em weled, ha d'ar beure, p'en em gave tud d'o hlask e veze ranket youhal dezo, evel ma vijent bet kousket o vale! Me a zo bet o chom e Kerivinog, ar gêriadenn e-kichenn, harp e ti Yann Derle gwechall. O sikour freuza an ti on bet hag em-eus soñj hoaz euz an treuziou du-pod hag euz ar zoul mogedet, eun teil burzuduz evid al liorz, a roas deom patatez brasoh eged bouteier. E ti ar Huistog edon o chom, ha me 'm-eus soñj ive beza klevet Saig ar Holin, Soaz ar Biog, ar Penneg koz, oh ober litanioù gand anoioù ar re a oa bet kollet e mêzou ar Haier.

Eur zulvez va mamm, (ya! An Dig! Eur vaouez a benn ma oa unan, ha ne grede ket er morilhoned!) a yê d'an orvintin da Witalmeze gand va zad. Gwitalmeze a oa pell, an amzer goloet. Da bemp eur e ranked sevel evid paka eun tammig overenn da zeiz eur. Gwechall an dud a oa nerzuz. Bremañ! Bremañ! A-veh ma ne boulennot ket gand o 'ferson dond da overenna e-tal o gwele! En em gavet harp e ti Jakez, va mamm a welas he-doa ankounahêt he chapeled. Hag hi en-dro, rag ne oa eviti overenn ebed heb chapeled. Epad an orvintin diou goz euz an ospital (unan anezo a ragache, heñvel ouz eur big), a lavare uhel pateriou hag aveou. Heb chapeled, peseurt talvoudegez o-dije bet ar pedennou-ze?

Va mamm a redas warlerh va zad... Siwaz, Siwaz! E mêzou ar Haier e oe kavet gantañ en eur zizrei! Hag e troe, e troe, va 'faour-kêz mamm, evel ar re all!

Teir zizun goude, eur paotr yaouank, eur hanfard dispont ma oa unan, a oe pedet d'eun eured e Lokornan. Abred e savas hag e

lakeas e zilhad-sul nevez. Da bemp eur edo e-kichenn ar Haier, ha da nav eur Fañch an Tourh e gavas, astennet, e poull-lagenn Kroaz an Aber, war e hinou, eun druez e weled, kignet e benn. Fañch a rankas ober dezañ eun hija, evid e zibuna.

Me ' gavas din ive edo grêt ar stal ouzin, eur wech e Mêzou an Traoñ, harp ouz Mêzou ar Haier. O vond d'ar skol edon da Lanbaol gand eur podig gwenn, ennañ soubenn evid va merenn. Ne oa ket deuet hoaz mad awalh an deiz ha me a huñvree en eur vond dre ar wenojenn. Kenta glevis e-kreiz eun tachad gwiniz eur youhadenn, hag e welis eur penn, eur penn Boch, a zoñjen. Ha va 'fod en êr, va boutou gantañ, ha d'an daoulammou ruz en-dro da Gerivinog!

N'on ket boaz da gonta krakou, ha biskoaz, dre hras Doue, n'am-eus bet ar voazamant fall-ze. Koulskoude e oa gwall zouezuz va istor. Va mamm a deuas ganin betek ar mêzou. Ne weljom netra. Me a ziskoueze dezi peleh edo ar Boch. Moned a reas e-touez an ed: « N'emañ ket mui aze, amezi, med ar gwiniz a zo pladet tro-war-dro. »

Ar Poti, va eontr, eur chaseour ha ne oa ket dezañ, a bakas an deiz-se eur pemoh-gouez, eno e-kichenn: « Boch, Bielig! », emezañ en eur hoarzin.

Savet din eun nebeud blevennou dindan va 'fri, desket ganin skiantchou dispar on amzer, a skub pell diouzom evel lostennachou, kreañsou diboell an azenned gornog a wechall, me a hoarze o selaou istoriou ar Haier. Eun deiz e teuas d'am gweled ha Gergengar pemp paotr yaouank euz a Gastell-Paol. Ha ni, goude ar veilhadenn, embann da dud an ti edom o vond d'ober eun dro da Vêzou ar Strobinellou.

A-veh m'edom ennañ ma teuas wardu ennom eur sklêrijenn zalluz: « Eur harr dre-dan », eme unan. — « Neuze e klevjem trouz », eme eun all. Dond a rê buan, skedusoh-skedusa ar sklêrijenn. Eun tamm anezi a zistagas, a bignas a-rêz d'or penn, en eur zutal. — « Buan abalenn! » eme an disponta ahanom. « pe bremaig ne welim mui eur siseurt! » Hag an oll dipadapa.

**

Eur groaz a zo bet savet e-kichenn Kroaz an Aber. Evid diarbenn ar 'fals kreañsou, pe evid goulenn ar peoh? N'ouzon dare. Er bloavez 1917 edo. Me n'em-eus dalhet soñj em spered nemed euz eun dra: ar beleg a brezege a oa pignet war ar haer, eur joupiliz gwenn war e gein. Fourradennou avel a deue da zavel e zoutanenn zu. Eul lavreg melen a oa gantañ, peñseliet gand tammou gwer, toull war ar marhad, hag e weled e zivesker. Tamm eñvor ebed euz e gomzou, euz e lavreg hebken, a jom e va spered, a-istribilh ouz kaeadou lann ar Haier, o skedi en nozveziou teñval ouz tan lugernuz ar goulou-

red, dre ma nij warno gand o hanaouennou mezvuz ar strobinnellou, ar viltañsou.

**

En eur ziskenn euz a Groaz an Aber da vourh Lanbaol, eh en em gaver e Kroaz Wenn. Eno n'eo ket eur groaz hebken a zo, med teir, unan vraz e kreiz, unan vihan a beb tu. Perag teir? Eur skeudenn euz ar Halvar? Eur beleg bet merzeriet, eur hurust a beb tu dezañ? Douarou druz Lanbaol a zoug frouez a beb liou. Spered Lanbaoliz a zo ken druz all, ha peb hini a zav e istor hervez e faltazi.

Sklêr deoh, em-eus paket ar hleñved-se ive. Evidon-me, kalonnenn Lanbaol a dlee beza gwechall wardro Kroaz Wenn. Ar hastell a anved d'an ampoent « Ar Zal » a oa e Kerazal. E Kroaz Wenn, koulz hag e Kergwengar, e kavom ano ar 'fals douez « Gwenn », gand he zeir bronn, a gomz kement anezi an Tad Jolleg en e levriou. Pa deuas ar 'feiz kristen er vro, el leh m'edo enoret Gwenn, e oe sanket teir groaz evid enori an Dreinded Santel.

« Na pebez alvaon! » a lavaro din an dud. « E peleh emaut gand da istor, bidaneller! »

**

Job ar Marichal a oa bet o houjennad, eul lerou ruz gantañ, evel m'edo ar hiz, o houlen merh Kerognan da baotr Kerreter. Deuet oa a-benn euz e daol, hag e tizroe d'ar gêr en eur gana: « Julivertont, Julivertont, daoulagad ar c'hwil-dero! » Ne ouie ken nemed honnez a ganaouenn. Job ar Marichal, ha p'en-deveze bet eur banne, her hane, hen diskane... Eur ganaouenn en noz a ra nerz kalon. Ne glever ket ar raned o koagal, al laboused noz o viaoui. Ha nag a draou all hoaz a heller kleved, pa jomer mud d'o zelaoui!

Job en em gave e Kroaz Wenn, tost eta d'e di, e penn ar vourh, kenta ma welas, etre ar hroaziou, o skedi daoulagad braz. Krena ' reas war an taol, ha c'hwil ho-pije grêt eveltañ. Ar han a davas kreñn. Med Job a oa eun den dispont, dreist-oll pa veze hanter-êt. — « Daoulagad! Daoulagad! emezañ. N'int ket re eur hwil-dero! Mond a ran da weled. »

Eul loan! Gweled a reas skleur eur bailh gwenn war e dal. Job ar Marichal a anaveze oll gezeg Lanbaol, evel ma anavezen-me, ez-vihan, an oll zaout dre o ano. — « Bailh! emezañ. Kazeg zu Kerazal! Kabestr ebed ganti! Dirollet, douetuz! Deus. Bailh! Me da gaso d'ar gêr. » Hag e kerzas Job dre ar straed. Ne oa ket a hent braz evel bremañ, med lagenn ha toullou kirin. Krog e moue al loan e teuas Job ar Marichal bouilh ha bouilh gand ar gazeg.

E Kerazal e lopus war an nor hag ar Habon koz a deuas da zigeri dezañ? « Te eo, Job! » emezañ. — « Ya! eme Job. Da loan du am-eus kavet ahont e Kroaz Wenn, hag on deuet d'hen digas d'ar gêr. » — « Paour-kêz Job, ma ouefes! Amañ ez a an traou war o hemend-all, evel ma ve an diaoul-kamm oh ober e baotr ga-

neom. Diou pe deir buoh a ro deom léz tourgouilhet. Ar moh a zo tri anezo gand ar vreh, daou all ne deuont ket war vraz, kaer a zo fourra savon en e diadreñv. Hag ar hezeg. Job, ar hezeg, va 'faotr-me! Bemdez e kaver rostet o moue. Gwasoh hoaz, kaer a zo staga Bailh, prenna an nor, kenta ' vez klevet wardro nav eur o hourrichal en eun doare ken estlammuz ma ve lavaret e ve o c'hoarzin. Neuze e tiroll trouz chadennou o steki an eil ouz eben, eun nor o tigeri, ha Bailh d'an daoulammou da redeg noz evel eur bambocher! » — « Deus ganin d'he staga, eme Job. Klaoustre e chomo da gousked evel ar re all. Digas ar morzol ganez. » Ar Habon koz a enaouas eul letern. Ar hezeg all a droas o 'fenn gand o daoulagad morgousket ouz an nor o tigeri. Job ar Marichal a zellas piz ouz stag al loan du, a lopus war eun nebeud ruilhennou, hag a stagas Bailh. « Evid bremañ, emezañ, na den na diaoul n'hen distago. Dell! Eur skoulm war ar marhad! »

*
**

— « Deus en ti, Job. Ar wreg a zo kousket, med ar voutailh a gavin. Eur banne a yelo ganez goude eur seurt kefridi. Nag a vaoz az-peus paket! » — « Ne hellen ket evelato lezel da loan e Kroaz Wenn. E 'fall e-nije gellet paka, o chom eno da dorta epad an noz. » — « Ar zouezusa, Job, eo a ra an dra-ze bemdez! Hag e tizro d'ar gêr e-unan. Da houlou deiz e vez kavet stag, hag an nor a vez prennet. »

Job ar Marichal a reas eun dro d'e benn-adreñv war an askomb, evel ma ne vije ket bet re war e êz, hag a evas e vanne. — « Alo! Eun all a yelo ganez. Arabad bale war eun troad! » eme ar Habon koz. Na war unan na war zaou. Ar voutailh a oe riñset. Tud Kerazal a zo bet mad atao da zigemer, ha ne vez damantet da netra evid ober plijadur d'ar re a dremen en ti.

— « Jabel a vo nehet bremaig ouz va gortoz, eme Job. Kenavo ar henta, kamalad! » Hag e kerzas e-unan en noz teñval-zah.

*Julivertonti, Julivertonto,
Daoulagad ar c'hwil-dero!*

Setu ma tregernas ar mêzeier gand e ganaouenn, a lakê da barzal chas Kergengar ha re Kergonan. Bouilh ha bouilh adarre. N'edo ket re blomm mui war e gilborou, ar paour-kêz Job. Re garget oa ar harr ha diou pe deir gwech e jaras. Buan awalh koulskoude edo adarre harp e Kroaz Wenn.

Evid harlui an oll zoñjou enkreuz e tibagnas uheloh eged biskoaz:

*Julivertonti, Julivertonto,
Daoulagad...*

Ne yeas ket pelloh. Ar rest a jomas sahet en e gornailhenn. Daoulagad dirag e 'fri a lugerne, hag etrezo skleur bailh gwenn loan du Kerazal!

Evel ma vije bet krog an tan en e dreid, e strinkas Job dioutañ e voutou, e voned, e pignas ken buan hag eur haz, dre an drez, ar spern, war ar hae uhel a oa eno, ha d'an daoulammou e skampas dre zouarou nevez palaret, gand e lerou ruz. Euz ar penn d'an traoñ e krene hag e zent a skrije.

Eur hae all, hop! eul lamm dreistañ! Ne helle mui. « Bremañ, a zoñjas, eo koller diouzin hag e hellin mond goustadikoh. » Kerkent e tiollas, harp en e rer, evel eur hoarzedenn skiltruz, gourrij loan du Kerazal! Hag e tistagas eul lamm, evel eur had a-dre skilfou eur hi. Eul loer ruz a jomas stag ouz eun torgoz. Ne zaleas ket d'he hlask. Gaol a roe dre ma helle. Nao pe zeg gwech e roudellas. D'ar red-tan e save, hag endro e nije.

Er straed zon e kouezas er poull dour a oa e-kichen park Saig an Neinj, trempet beteg e eskern. Hag adarre dao da begad ouz ar haead lann en tu all. Eur pechad lamm!

Mañ...

E ti Fañch an Touz e oa savet fachiri etre ar wreg hag an ozab. Evel ma veze aliez, an ozab a oa mezo, hag ar wreg a oa kazed, ar pez en em gave ken aliez all. Ar zaout a oa lezet er park, ar pez ne oa ket rouez.

Ar vuoh pennfollet a oa en he zav kerkent, hag hi d'an daoulammou, he lost en êr, en eur vlejal, o winta he rer, Job ar Marichal war he hein. Strinket a oe a-benn-herr war al letonenn, hanter abafet. Med sevel a reas buan, hag heñ adarre, dipadapa, dre dachennou ar mêzou. War e lerh e hourriche, ken a zaone, loan du Kerazal, hag a vleje ken a ziaoule peb hini d'he zro teir buoh Fañch an Touz.

En e liorz e lammas ar paour-kêz Job. Ne helle mui. — « Jabel! Jabel! » emezañ, en eur lopa gand e zaou zorn, e zivreh, war an nor. Jabel, ar wreg vad, n'oa ket êt da gousked, evel m'o-dije grêt kemend a verbed all, didruez ouz o gwazed. Chomet oa da hedal he muia-karet. Kerkent e tigoras. Job a gouezas a-stok-korv war leur an ti en eur youhal: « Buan! Buan! Serr an nor! Serr an nor! »

*
**

Eiz deiz e chomas en e wele Job ar Marichal, eiz deiz etre skilfou ar maro, gand eun derzienn spontuz. En noz koulz hag en deiz e tispake e zivreh, e zaouarn, e vizied, digor e zaoulagad evel brennig, sonn e vleo war e benn, digor braz e hinou.

Jabel, beb tro a halve an amezeien: « E huanad diweza! » eme an oll, an dour en o daoulagad. Nann! E gorr a-bez o krena, gleb-dour-teil e dal gand ar hwezenn, e klaske en em zivehia, en em *zidafa* evel eun dornerez, beteg ma teue euz a strad e houzoug eur youhadenn: « Loan du Kerazal! Loan du Kerazal! » Kerkent, a-benn-herr, e chouche e benn gand al liñser, ha: « Dagadadag! Dagadadag! » evel o taoulammad en e wele, e strinke gand e zivesker ar pallennou ouz pennou ar merhed.

An ti sorset

Na pebez traonienn gaer en em led en traoñ da japelig Kerber beteg Lestremeur! N'em-eus kavet e neb leh par dezi, ha koulskoude me 'm-eus redet gwasoh eged eur Boudedeo.

Tud Gwitalmeze, *ivoulog*, atao o klask teurel o hraban war an oll draou dalvouduz, a ra anezi « Traonienn Kerlorog ». Lanbaoliz, tud dilorh med speredeg o-deus dalhet dezi an ano a-wech-all, eun ano tener, leun a goantiri: Ar Roz.

Pa deu deveziou kenta an nevez-amzer eo eun dudi mond d'azeza e-kichenn dismantrou ar Vilin goz. Peb tu a zo glaz, ar peuri koulz hag ar gwez. N'eus nemed al lann hag a dennfe d'an du, med eun du plijuz ha laouen. C'hwez vad al lorvez, ar balan, en em vesk gand hini ar 'foenn hag ar bleuniou. Eun êzennig avel flour a laka da grena dindan bannou an heol deliou ar gwez uhel, ha ne glever, en traoñ, gand an dour war vein goz ar vilin, nemed eur ganiri sebezuz, diskuizuz, gand laboused a beb liou.

Ped gwech on chomet dirag ar Roz, e penn straed Kergounan!

Kergounan! Nag e trid hoaz va halon gand ar ger-ze! Ma plije din tiig Kergengar, ez-yaouank, eun ti all a oa er barrez edon ennañ evel er gêr, eun ti all a huñvreen ennañ aliez, pa vezen e deizioù kaer an hañv, kraouiet en eur skolaj.

War-dro dezañ ar mêziou en em lede beteg Kervizen ha beteg Kerzivoret. Larkob, war ar mor glaz o lintra en em zistage, melen, va zour dantelezet. Nag e plije din labourad war-dro d'an ti-ze, gand Job, e vab, e verh. Eno, dorna, rimia lin, peb tra a yê din. Na pebez maouez e oa Soaz, gwreg an ti! Atao, beteg he maro eo bet laouen. Ha d'an oll war he zro e prezege al levenez. C'hoarzin a rê uhel, ken a helle, ouspenn kant gwech bemdez, rag e peb tra e kave eun tu fentuz. Ar vuhez eviti a oa eun draomienn, heñvel ouz hini ar Roz, atao koant, atao dudiuz. Soaz a zeske d'ar re all tañva he haerder.

Tiez all a blijas din e Lanbaol. Kelou Mad! Pa 'z een di gand va 'fodig da glask lêz, Jan a zareve din kerkent eur banne kafe, a drobe din eun tamm bara du, hag a lede warnañ amann teo. Jan, atao laouen ive he halon madelezuz. Er gwele ouz an daol edo ar vamm-goz, ken laouen all. Pell zo ne zave ket mui. P'en em gave ar paour en ti, e veze hoaz sederrob ar vamm-goz. War an askomb en he hichenn e ranke azeza. Ne ehane ket da gonta dezañ leun a varvailhou, hag ar paour a deue da veza laouen evel di.

Er Harpont an digemer a oa heñvel, ken tomm. En desped d'he

oad, Marivon a red atao, a lamm dreist ar hêiou, a endramm hag a bal, buan-buan, evel m'he-dije ugent vloaz, hag atao gand eur moushoarz a zo evel bleunienn eur galon n'he-deus grêt morse fae war den, n'he-deus klasket ha ne glask nemed eun dra, ober plijadur.

Bennoz d'an tiez-se, a daolas sklêrijenn ha tommder war va bloaveziou kenta! Re all a zleean anaoud da-houde, evel ar Strêjou, hag e rouanez zispar, Soazig, karet evel eur vamm ganeom-ni Lanbaoliz.

Paotr yaouank em-eus tremenet muiob a amzer eged e leh all e Kergounan. Me a gomze ouz Soaz evel ma rên ouz va mamm, a lavare dezi e studien evid mond da veleg. Eun eontr koz am-oa, hag a oa eur foug warnañ ouz her gouzoud. Diou pe deir gwech er bloaz e ranken mond d'e weled. Gwellob em-be karet mond da denna eur hildant! Atao e paken nebeud a galanna hag eur mellad *respudadenn*:

— « Penaoz! Penaoz! E pardon Gwitalmeze war ar bezeg-koad gand merhed yaouank! E pardon Porsal emañ ar gaoz e oa teir ganez en eur vag! Eur vez, eur vez eo! Teir! Teir! Unan hag a ya da veleg na dle ket kaozeal gand ar merhed yaouank. Pedi! Pedi! Va 'faotr-me! Kroaza an daouarn! Kroaza an daouarn! Ha serra an daoulagad! Arabad selled ouz ar merhed! »

Soaz, hi, a oa eur vaouez a benn. C'hoarzin ne vir ket barn gand furnez: — « Mad a rez, Biel, emezi. Ezomm ez eus beleien evid ma chomo kaer ar bed. Bez eur beleg gwirion evid ar paour koulz hag evid ar pinvidig. E peb leh ez eus tud vad, Biel. Te o zikouro da veza hoaz gwellob. Bez laouen ouz an oll. Da vuhez a vo kaer, Biel! »

Soaz Kergounan, euz liorz al levenez pedit stard evid ar beleg a oa en ho ti evel er gêr, evid e hœar leanez ho kare eveldeñ, ma raint o-daou euz o gwella war dachenn an eneou, bepred laouen evel m'edoh, Soaz!

Dre eur straed ganti kalz diribin e tiskenner euz a Gergounan da Vilin goz ar Roz. Kouezet eo bet en he 'foull, eun ti all a zo bet savet abaoue. Hirio eo goull. Nag e tlee beza brao beva eno!

Eun tachad goude maro ar miliner diweza e teuas da jom en ti eur zoudard koz hag e bried, den ne ouie euz a beleh. Ar zoudard koz a bakas buan eun ano hag a ziskoueze frêz ar pez a dalveze: ar Bambocher a veze grêt anezañ. Tavarn a neb tu, hag e kave koulskoude an dro da veza mezo ken aliez ha bemdez. Ne veze war-dro iliz ebed. Eun deiz en em gavas gantañ evel gand ar re all, e kouezas klañv, hag e varvas. An Aotrou Person a oe galvet. En em gaud a reas eun tammig re ziwezad. Dre an iliz koulskoude e tremenas ar horv, hag e oe lakêt gantañ pedennou evel gand ar re all. E-pad m'edo ar beleg o lenn ar zervichou, eur houlaouenn euz ar helar a lammas en eur zutal, harp en e benn er gador. An dud a reas eur skrijadenn, hag Annaig Fistoul a lavaras d'he amezegez: — « Sin fall! An diaoul! An diaoul! »

Eiz deiz goude e save ar gaouz er poullou: « Ti ar Roz a zo sorset! Beb noz e klevet trouz er halatrez. Ar wreg ne gred ket mui chom eno da loja. » An dud a gar kenañ an traou-ze, ha peb hini a lak e damm da gaerraad an istor. Eur zulvez da noz, pemp pe hweb paotr yaouank, c'hoant dezo diskouez edont paotred houest ha dispont, ha ne gredent ket e seurt sorbennou, a houlennas digand Mari, intañvez ar Bambocher, mond da veilha d'he hêr.

Mari n'he-doa ket a hoant da goll he brud vad, hag a houlennas digand diou goz euz a Gerlanou, a gave dreist o banne, dond da zerhel dezi kompagnunez. An diou goz a lakeas meur a veutad butun en o 'fri araog rei o asant. Med pegwir e ve gwin hag hini kreñv evid netra, ha tud barreg d'o divenn, e leverjont ya, abalamour da renta servij war o meno.

Nag a jolori en ti koz pa oe enaouet an daou gleuzer, evid gwe-loud sklêrro, c'hwî gompren! Peb hini a reas euz e wella an neuz da veza ken dizoursi hag eur had en he ched. Ar gwin a rede, evel e ti Per ar Fourn goude ar gousperou. Unan a zistagas eur ganaouenn. Unan goz a gontas eun istor. Med en he hreiz, eben, kouezet, doue-tuz, butun-priza en he hornailhenn, a zistagas eur strechadenn spon-tuz a lakeas al lakepoted da skrija, ha da zevel kerkent plomm en o zav, evel soudarded dirag eur habiten. Netra! Ne oa netra. An istor a gendalhas.

Rourou... rou... rourourou!... Eul labous, eur haz-noz gwenn-kann, o nijal a-uz d'an treuziou! Ou... ou... ou!... En eur grena, an oll dud dispont a zoubl o 'fenn. Togtog... togtog... eme têt o halon. Netra! An oll a ziroll da hoarzin. « Dichuom ar haz-noz, emezo, hag her hlaskom a beb tu! » N'her gwelont mui. « Er halatrez eo êt da guzad, eme unan. Piou a deuo ganin d'e glask? » — « Me avad », eme daou ganfard, a lamm kerkent war ar skeul, a strak hag a dorr e daou damm, o teurel an tri leue war o 'fri.

Marharid Gerlanou he-deus distaget eur youhadenn, hag an oll adarre eur skrijadenn, araog diroll a-nevez da hoarzin.

— « Evom, evom da gaoud nerz-kalon », eme unan. Hag an oll, merhed hag all, beh d'an hini ruz, ha d'an hini melen.

Daouñ!

Evel ma vije bet an diaoul en he horv, Nouna Gerlanou a zavas a-benn-herr en he zav, elfennou tan o sinkla euz he daoulagad diskor-bellet, gwin, odivi, ha butun o hlaourenni a beb korn d'he ginou, he bizied hir dispak, o teurel o skeud divuzul war ar voger, ha gand eur vouez pounner, a zeblante dond euz strad an iverniou, eh en em lakeas da embann goustad gand an orolaj taoliou hanter-noz: unan... daou... tri... An oll a jomas digor o ginou, seizet, sonnet, gwenn-kann.

Daouzeg!... eme Nouna, o tiroll da hoarzin, med he hoarz n'oa ket mui euz ar bed-mañ. Heñvel edo ouz gwigour rojou karigell an

Ankou. Kerkent er zolier: boudoudoum... boudoudoum... trouz ar gurun o krozal.

M'ho-pije gwelet ar jabadao! Ar bouteier o sutal, ar baotred dispont o lammad an eil dreist penn egile da glask an nor, an daol o jara gand ar boutailhou, ar hleuzeuriou, ar gwer, youhadennou tud daonet, hag e-kreiz ar zafar diaouleg, c'hoaradenn peurbaduz, skil-truz, strafuilhuz Nouna Gerlanou!

Mevrez? Kollet ganti he 'fenn? Den ne ouezas morse. D'an deiz warlerh e oe kavet, sklaset, maro-mik, war leur an ti sorset.

Neuze avad e savas kaoz diwar-benn ar Roz er hanton a-bez. — « N'ho-peus ket klevet? Ar Bambocher a deñ bemdez endro d'ober tolompi, hag a ra taol ar maro da gement hini a vez war e hent en noz. Spontuz eo e glevet o youbal gand an diaoulou. Boulou-tan a weler o lammad er 'foenneier. Tra veo ebed ne gred mui chom war-dro eno. »

**

E Gwitalmeze e oa nevez en em gavet eur hure yaouank, eun tammig teileg ha brabañser, a embanne gand dismegañs: — « Po! Paour-kêz gouezidi Lanbaol a gemer aon evel ar brini ouz ar spon-tailhou! Diotachou! »

Ha c'hoant dezañ fourra e 'fri el leh ma n'e-noa ket ezomm, e teuas eun abardaeg d'ar Roz gand pemp paotr yaouank leun a spe-red eveldañ, pegwir ne gomzent nemed galleg. Ar skeul n'oa ket bet dreset, hag e pignjont war-laez gand eur gordenn: — « Ger ebed bre-mañ, eme ar hure. Gedom en deñvalijenn. » N'o-doe ket pell da hed-al ar vrabañserien. Kenta glevjont eun dra bennag o vanea en eur horn-tro, ha kerkent skeur eur pechad boul o rodella war ar hoad gand eur zafar mantruz.

En eul lamm ar hure a oa en traoñ, er mêz, ha war e lerb e hallegerien. Person koz Lanbaol a oa rannet e galon. Karoud a rê ar Roz. P'e-neveze eun tamm amzer e plije dezañ mond di da besketa, d'ober eun azez e disheol ar gwez dero en eur lenn e vrevier. Poan a rê dezañ kenañ gweloud labeza eun draonienn leun a hened. Euz ar baradozig teodou an dud a rê bremañ eun ivern divalo. Tud Gwi-talmeze, en eur gomz euz an darvoudou, ne lavarent mui « traonienn Kerlorog », med « traonienn ar Roz e Lanbaol ». An tamm kaerra euz e barrez muia-karet a oa labezet.

N'oa ket eur glabouser an Aotrou Person. Beteg henn n'e-noa lavaret grik, nag er gador nag e leh all. Lezel a rê an dud da vond gand o haoziou hag eh heje e ziouskoaz, evel ma n'e-nije ket grêt a van. Eur zadornvez da noz e lavaras d'ar hloher, tad ar Bi-Louiz, bet o seni an Añjeluz: — « Kerz dioustu da Gerivinog, ha lavar da 'Fañch al Lokez dond ganez d'ar presbital. Grik da zen! »

— « Petra an diaoul a zo a-nevez? » a zoñje tad-koz ar Bi-

Louiz, Bi-gamm a rêd anezañ, eun den a galon hag eur haner dispar, gwella kloher a zo bet morse e Lanbaol.

Fañch al Lokez, heñ, a oa eur mellad den, gouest da deurel war o 'fri el leton deg den kreñva ar hanton, an eil warlerh egile. D'an ampoent e veze gwelet boaz er vro bleizi — (n'oant ket heñvel ouz ar re vremañ) — hag e-noa lazet tri en e vubez. Fañch al Lokez! Kar oa din-me, breur-kaer d'am mamm-guñv, hag abalamour da ze leun a dud e Lanbaol a ra ahanon Biel al Lokez. Eun den speredet oa Fañch. Diouz ma leverer, beb tro ma 'z ê d'eul lein-freskad e save eur ganaouenn. Pa deuas er vro an hiñvizou kenta, grêt gand dañvez spilher, e savas unan a zo chomet evel eun teñzor er familh. Va mamm-goz her hane din. N'em-eus soñj nemed euz an diskan:

« Pim-paon! Hag he rer er zah. »

**

— « D'ar presbital d'an eur-mañ! » eme Fañch al Lokez da Vi Gamm. « Biskoaz! Mond a ran. »

Ar plah a oa êt da gousked hag an Aotrou Person o gede er zal vihan. Beb a vanne a ziskargas dezo hag e komzas: — « Skuiz on gand istoriou ar Roz, a ro brud fall da Lanbaol e pevar horn ar vro. Poent tardal! Deom on tri gand beb a benn-baz da weled petra a hoari gand an ti-ze. » — « Evel a gerot, avad, Aotrou Person », eme Fañch al Lokez ha Bi Gamm, a vije êt en tan evid ober plijadur d'ar person mad a lakee enno e 'fiziañs. — « Kemerom beb a houlaouenn », eme ar Person. — « Ha dour benniget », eme ar hloher. — « O, n'eus ket ezomm a draou benniget », eme an Aotrou Person. « An diaoul ne gredfe morse teurel e bao war an disterra tamm douar euz parrez santel Lanbaol. »

Noz teñval oa, ha ne oent gwelet gand den en hentchou bihan a gas dre ar mêzeier d'ar Roz. Evel kure Gwitalmeze e pignjont d'ar halatrez gand ar gordenn. Enaoui a rejont o goulou. Gwiad-kevnid ledan a lugernas war an treuziou. Eur maread traou, restell koz, rouejou, dilhad soudard, pallennou drailhet gand an tartouzed, hern merglet, kastolorennoù, podou-kambr, digor o genou, a oa o stroba ar zolier.

— « Lazom or goulou ha gedom didrouz en deñvalijenn », eme ar person. Kenta oa klevet, a-benn eun tachad, eun dra bennag o wikal. — « Gedom hoaz », eme ar Person. Eun nebeudig goude e weljont skleur eur mellad boul o rodella. — « Enaouom or goulou », a lavaras ar Person. Ha mui trouz ebed. Diou pe deir gwech e rejont heñvel. Beb tro ma teue sklêrijenn e tave an trouz.

Ar voul a stokas, douetuz, ouz skudellou. — « Enaouom ar goulou », eme ar Person. O zri e tostojont ouz eur mell boutailh, a ugent litrad da vihanna, gwriet kolo war he zro. — « Homañ eo a roull », eme ar Person. « Petra zo a nevez ganez, va merh? » Dívane e chome, leun a boultrenn. — « Deuit tostoh, bugale, gand

ho koulou. Divont out? Med ar boutailhou divont n'int ket oll goulo. »

Hag heñ, eun heja dezi. Trouz greun. Hel lakaad a reas war he ginou. Kerh a gouezas. — « Kerh! Nag e peleh! Setu amañ, avad, eur hoari! Ma kemerin va lunedou. »

Fañch al Lokez ha Bi-Gamm a zavas ar voutailh, hag ar Person, goude beza diframmet eun dornad kolo, a reas ar zell-aviz. — « Ho! Ho! Ho! » emezañ, en eur ziroll da hoarzin. « Razed, nao pe zeg a zo enni. Sellit hob-unan. » — « Souezus eo ne deufent ket er-mêz », eme Vi-Gamm. — « Ne hellont ket, eme Fañch, re deo int! »

— « Ar pez a dle beza en em gavet, eme ar Person, eo o-deus ar re goz grêt o neiz harp er voutailh. Kerhent ha m'o-deus gwelet kerh, lakêt enni gand ar Bambocher evid louzaoui, pe evid bragezi, piou oar? int êt d'e lonka. N'o-doa ket c'hoant dond er-mêz keit ha m'edont war al lipebao. Korv a zavas outo, ha p'o-deus bet c'hoant sevel diouz taol evid mond eun tammig da heolia, kaer oa dezo bounta an eil war rer eben, edo re deo o hov evid tremen dre an nor, gouzoug striz ar voutailh. Klask a reont atao dond er-mêz. Arabad en deiz! N'int ket ken diskiant ha ma zoñjer, ar razed! Ar voutailh a ra trouz pa lammont enni, leun a gounnar. Rodella a ra. Gwelloh gedal an noz, an deñvalijenn. Setu istor sabad ar Roz, istor an ti sorset! Ha! Ha! Ha! »

— « Nag a ebad a vo warhoaz e Lanbaol! eme Vi-Gamm. An oll a deuio d'ar Roz da weled ar razed o-deus spontet ped pabor. » — « Evid amañ ne welint ket ar razed, eme ar Person. Ha nann avad, pennad! Deom-ni int, pegwir ni on-eus o 'faket. Ar voutailh a baen da wreg ar Bambocher. Deg gwenneg a dalv din. Goude e vo gwelet. »

Hag o-zri d'ar gêr dre straed Kergounan. Bi-Gamm a zouge ar voutailh. Ar marvailhou, ar hoarz a yê endro. Oh en em gaoud dirag ar bern teil kenta. Fañch al Lokez a jomas eun tammig warleh. Kenta oe klevet o tistaga a-bouez-penn:

*Ni zo bet o veilha er Roz,
Er halatrez epad an noz.
Ni on-eus paket ar spontailh,
Ganeom emañ en eur voutailh.*

*Evid gweloud or mestr-taol,
Diredit 'ta tud Lanbaol,
Paotred dispont Gwitalmeze,
Diredit 'ta gand ho kure!*

*Deuit da gerhad ho poutou
Jaret er pri dre ar strajou.
Diredit 'ta, paotred barreg,
Flêr ar haka gand ho lareg!*

*Diredit 'ta, Tintin Mari,
Da gempenn an arrebeuri,
Da lakaad urz er halatrez,
Da blanta pour ha chalotrez.*

*C'hwï a gavo eur pesketer
E-leh ar hoz-tamm Bambocher.
Pa vo skrivet an embannou,
Ni vrallo klohig Kerlanou.*

*C'hwï a raio lamm Sant-Alar
Hag a yelo da glask mouar,
Gand ho tousig er gwaremou,
Da zul goude ar gousperou.*

*C'hwï a gano en deiz, en noz,
E manerig Milin ar Roz,
Ha Tintin Mari, dizale,
Ho-pezo deg a vugale.*

Ar Person ne helle mui mond araog, e zaouarn gantañ o terhel e gosteziou, kement e c'hoarze. An dud, gand eur seurt mouez kreñv, a oa dibunet krenn. Pell zo ne oa klevet nikun o kana er straed epad an noz. Re dost edod d'an ti sorsset, war e dro evel eur goumoulenn a spont. — « Petra 'n diaoul a zo a nevez? » eme an dud o tihuna. « Lavaret e ve mouez Fañch al Lokez. N'eo ket eur rouler, Fañch! »

Na pebez c'hoarzedenn d'ar zul, an deiz warlerh, pa oe klevet an istor! Pa oe gwelet ar razed er voutailh! D'al lun edo foar Witalmeze. Tud Lanbaol, m'henn asur deoh, a roe tro d'o gaol. — « Ni on-eus eur Person, avad, emezo. N'eo ket eur glabouser. Grig ebed, med hennez a zo eur reriad traou en e benn! »

An Aotrou Person a anaveze tud e peb korn euz ar vro, tud a beb renk hag a beb micher. Eun deiz, gwraez koz Lanbaol a welas o tond eun Aotrou braz, gand eun tog-faout, en eur wetur ruz. Mond a reas d'ar presbital, ha goude diou eur orolaj e teuas er-mêz, gand boutailh ar razed. D'ar zul warlerh, Person Lanbaol a oa gantañ eur boutou ler nevez-flamm, hag eun tog, eun tog ledan, a lugerne evel voulouz. Lavaret e vije edo grêt gand krohenn razed!

Mari ar Bambocher a oa falvezet ganti paea dezañ eur zoutanenn nevez evid beza dizorset he zi. M'ho-pije gwelet na pebez kañfard a oa neuze ouz person Lanbaol! Skedi a rê euz ar penn d'an traoñ, evel vikel vraz an Aotrou 'n Eskob. Ar veleien all diwardro o-doa, êz deoh gouzoud, eun tammig pistig en o halon ouz e weled. Med heñ a lavare dezo: « N'ho-peus nemed ober evel don: paka razed! »

Aotrou Person Lanbaol a oa eun den re vadelezuz evid derhel gantañ an oll ribotadenn. Den ne ouezas morse priz ar razed. An dra-ze ne zelle nemed ouz ar person. Ne lavaras grig. An aotrou tog-faout, den ne ouie euz ar beleh edo, marteze euz a Bariz, hag e-noa

kaset ar voutailh di da ziskouez, goude paea, d'ar henaouerien a zo eno ken niveruz. Lod a lavar e oe prenet gand arhant ar werzidigez an oll skebell a zo en iliz. Evid lavared gwir, n'em-eus kavet er pape-riou koz meneg ebed a gement-se, med piou oar? Ar razed all marteze, droug enno, o-deus debret oll ar pez a helle noazoud d'o brud vad, hag o lakaad da veza kemeret evid liou!

Eiz deiz goude m'oe bet an aotrou e Lanbaol, eh en em gavas gand Bi-Gamm ha Fañch ar Lokez beb a bakodenn hir. E peb hini e oa eur mouchouer brodet, marellet, euz ar haerra, eun tavañ-cher voulouz du warnañ bleuniou aour, hag eur penn-baz kizellet dreist, warni penn eur maout. M'hel lavar deoh, e oa levenez er halonou! Nag e rode d'ar Zul 'Fask Bela, gwreg Bi-Gamm, ha Katell al Lokez!

Bi a yê beb sul d'an overenn ha d'ar gousperou gand e ganenn. Fañch, heñ, a yê ganti d'ar foariou. D'ar poent-se an dud a oa hoaz gouez, lod a oa laeron euz o micher. Va mamm-goz din-me he-deus anavezet al laer diweza e Lanbaol. Al laeron en em vode nao pe zeg, ha pa zizroe an dud euz ar marhajoù, e stankent an hent abann ma veze roet dezo deg dre gant euz an arhant a zouged. Na pebez gwellaenn a zo deuet er bed-mañ abaoe an amzeriou kriz-se! Bre-mañ n'eus ket mui a dud laeron euz o micher. Re all avad a zo, tud hag a ra eta diou vicher. Gand an hini a laer eo e hounezont ar muia. Emaint bremaig ken niveruz hag ar brini.

Deg dre gant war hoh arhant! Mezuz eo! Hirio e roer ouspenn an hanter, ha ma ne zentit ket e yelot d'ar prizon, epad ma kendalho da nijal ar brini.

Fañch al Lokez, heñ, ne baes mui netra, rag en eur dremen e Traoñ-Ivern hag e leh all, e sponte al laeron en eur youhal: « Evez! Evez ouz penn maout ar Bambocher! »

**

Er Roz e teuas aliez da besketa eur maltouter euz a Zant-Pabu. Pa veze rivet e dreid ez ê en ti da domma. Ne oe ket pell an abadenn, paket ar paotr a-bouez e higenn! Klohig Kerlanou a zonas, hag ar Roz dudiuz a dridas. Mari a eilzimezas, kant gwech gwelloc'h eged an dro genta e kouezas.

Diou goz Kerognan

Gwechall ne oa ket a girri dre-dan, a otojou evel bremañ. Person Lanbaol n'e-neus hini ebed hoaz en deiz a hizio. O! n'eo ket arhant a vank dezañ. Med re goz, douetuz, eh en em gav da hoari gand mekanikou hag o-deus nerz tri pe bevar marh. Gand eur marh-houarn na vale nemed gand taoliou boutou e-neus trawalh d'ober, ar paour-kêz aotrou Person.

Eun all a zo bet en e-raog, hag e-noa eur harr dre-dan nevez-flamm. Friantuz a oa ennañ, m'hen asur deoh, med nag a zarcvou-dou a zigouezas gantañ! Daou gilhog ha teir yar a oe friket eun deiz war al leur-gêr. Den ne lavaras grig gand aon rag ar person. Eur wech all, moger ar prad eo a goustas dezi. Goude-ze, diou vuoh euz ar Ribl eo a oe gwall vountet. Koll a rejont o leue, dond a rejont da veza dilêz, med den ne lavaras grig.

Ha nag a bed all! An dud a deue da gemered aon pa glevont o 'ferson o vlejal. Kerkent e lamment er 'foz pe dreist ar hae. Ar person a oa mad da renta servij evid an disterra tra. Èt e vije zoken da gerhad an amiegez! Med an dud e Lanbaol n'o-deus ket a hoant e ve lakêt re abred douar war o hov, da vired outo gweled o skedi tour dantelezet o 'farrezig. Nikun ne 'felle dezañ mui pignad e karrigell ar Maro. Eun deiz ar person koz a lavaras d'eur hloareg yaouank: « Deus ganin da Witalmeze. » — « O! Aotrou Person, emezañ, me ' gav gweloh mond war vale. » — « Aon az-peus, aon az-peus eme ar person. Va buhez din-me a dalvez bemdez da hini, ne ra ket? » Hag e rankas senti ar hloaregig.

Eun deiz edont tri beleg en oto o vond da lein ar miz da Vrelez. En eur bignad kreh Stang an Heol, den ne hellas morse kompren ar pez a zigouezas. Tri beleg, digor o ginou, a oa azezet e-kreiz an hent braz, o selled ouz o harr o vond en-dro d'ar gêr, e-unan, d'ar red-tan. E-kichen ar pont, a-benn-herr, ez eas a-benn en eur wezenn zero. Nag a dud euz a Witalmeze, euz ar hanton a-bez, a yeas di goude-ze e pelerinaj, evid gweled relegou oto person koz Lanbaol!

Er presbital, p'edon-me bihan, e oa eur wetur gaer, unan velen-aour, warni roudennou glaz. Stern al louaj a oa warno leun a dachou arhant hag outo e oa stag leun a zirlinkou. Nag a fouge a veze er person, pa 'z ê d'an drot dre an hentchou! Ni, bugale, a dostê, hag e taole deom bonbonou. Evid or saludi e tenne e voned kornieg. Eur roue e-kreiz e zujidi a ve bet lavaret.

« Da veleg ez i pa vi braz? » a veze goulennet ouzin. — « O, nann, emeve, me yelo da Berson. » Abalamour d'ar wetur, douetuz.

Ar medisin a deue aliez euz a Witalmeze da weled e gamalad. Staga a rê e wetur ruz ouz dor lab ar presbital, ha war he zro e teue da hournijal ar yer, ar filiped, ar brini. Kerh a goueze euz ar zah stag ouz fri ar marh, hag er penn all, war an douar e kavent ive lipebao a zeblante plijoud muioh hoaz dezo.

En em glevoud kenañ a rênt, ar person hag ar medisin. Beb tro e teue war an daol eur voutailhad goloet a bouldrenn hag a wiad kevnid, evid distagella an teod. Hag ar marvailhou en-dro. Pa veze unan bennag gwall glañv, ar medisin a lavare: « Gweloh eo mond da gerhad ar beleg. » Hag ar person, pa wele en eun ti pe di unan pell zo en e wele, a lavare: « Gweloh eo mond da gerhad ar medisin. »

Gwechall ne yêd ket d'e gaoud evel bremañ, evid an disterra bramm a-dreuz. An dud n'edont ket kizidig, ha ne veze galvet nemed pa yê fall an traou, evel evid kaoud louzou tu pe du. Va mamm-goz din-me her gwelas evid ar wech kenta d'he hweh vloaz ha pevar ugent. Eiz deiz goude e varvas.

Eun nozvez teñval euz ar goañv e oe galvet ar medisin da weled unan goz e Kerognan. Hag heñ dao, avad, kerkent, rag eur medisin dreist e oa. Pa veze ezomm anezañ ne jome ket da varhata. Bez' ez eus tud hag en em gavje da vouga an tan gwall eiz deiz goude m'eo maro! An hini goz he-doa katar, poan en he hov, poan en he divesker hag en he oll izili. Treut gagn edo, o vond en he daouzeg ha pevar ugent: « Kabah, rimiet beteg an neudenn, poazet an oll viñsou, ne jomo ket pell mui da laheria. Buan zoken e hellfe strakal kuit an ibiliou. Gwella zo eo gervel kerkent ar beleg. En eur zizrei d'ar gêr, me yelo, mar kirit, d'e hervel », eme ar medisin d'ar mab kosa ha dimezet er gêr.

Hag e teuas da zihuni ar person: « Gweloh eo deoh, aotrou Person, mond dioustu da weled Marianna Kerognan, rag me gav din ema-hi oh ober he zalarou. » — « Mond a ran, mond a ran! » eme an aotrou Person, trefuet. Eur person mad oa ive. N'e-noa ket a hoant lezel unan euz a Lanbaol d'en em gaoud dirag Sant Per, loundour e voutou. Hag heñ buan gand e wetur en noz yen.

An nor a oa digor. An aotrou Person a ouie edo gwele kloz Marianna an tosta hag a yeas kerkent davetañ. Netra ne vouje, an oll a oa kousket: « Marianna, Marianna! » emezañ, goustadig. Marianna ne rê van. « Poseve n'on ket en em gavet re ziwезд! » eme ar Person koz. « Nann, setu hi o robad. Gwellaenn ar maro! »

Enaoui a reas eur houlaouenn a gavas dre grabanata dindan dilhad an hini goz, a-strob war an askomb. Neuze e savas ar goulou

harp e fri Marianna. Ne rê van ebed hoaz. Ober a reas dezi eun heja: « Petra zo? Petra zo? » emezi, o tigeri he leterniou pikouzet. — « Chttt! Goustad! Arabad dihuna ar re all skuiz o palarad! » — « O, emezi, an aotrou Person! » — « Penaoz ez a ganeoh, Marianna? » — « Me? M'ad, mad, aotrou Person. » — « Tototo! Gwelloh lakaad evez, beza prest atao, Marianna. Me zo deuet amañ d'ho kovez. Klaskit ho pehejou eur pennadig. »

Marianna a govesaas. — « Kement ha m'on deuet, eo kerkoulz d'in ho noui. Tamm falloh! Ar Paotr braz a zo bet nouet c'hweh gwech, hag a vez atao o paka bezin. »

Ha Marianna a oa nouet. — « La! Bremañ kouskit sioul, Marianna, evel ar re all. N'em-eus dihunet den ebed. Gwell a ze! Kenavo, Marianna! »

Hag ar Person er-mêz war beg e voutou.

**

En em zila a reas en eur greua etre e liñseriou, rag ar vogidell yen-skorn he-doa treuzet e zoutanenn. Goude beza lavaret eur beden-nig evid Marianna, eh en em roas da gousked.

Boum! Boum! Morzol dor ar porz. Unan bennag klañv adarre. Set' amañ avad eur c'hoari! Diou wech en eun nozvez!

— « Piou zo aze? » eme ar Person, en eur zigeri e brenestr.

— « Fañch Kerognan. » — « Fañch Kerognan? Me a zo o paouez dond euz a di Job! »

— « M'ad! An hini goz ahont n'emañ ket war he zu, tamm ebed. Fall eo zoken an traou ganti. Ma hellfeh dond dioustu, aotrou Person! »

— « Ya, Fañch, mond a ran. »

Hag heñ sternia en-dro Gell, ha dao gand e wetur en deñ-valijenn. — « Penaoz emañ ar vuhez ganeoh? emezañ, o tostaad ouz ar gwele. War an askomb ne oa netra nemed diou houlaouenn o skedi. Oll dud an ti a oa war zav. »

— « Fall avad, aotrou Person! » eme an hini goz. « Berr ez a warnon. Poan izili, poan e peb leh. Tohor ez an, aotrou Person. Ar medisin a zo bet. Emao o vond d'ar bed all. C'hoant am-eus da govez ha da veza nouet. »

Ar Person kerkent a zentas ouz Marianna.

**

Pa zizroas an aotrou Person da draoñ ar geriadenn, el leh m'enoa lezet e wetur velen gand aon d'he louza re gand teil ha dour-hañvoez, piou a gavas eno ouz e hedal? Ar medisin, va zudou! Ar medisin a zonne o c'hoarzin.

— « Ha! Ha! Ha! Aotrou Person! En em faziet ho-peus a zor ar wech kenta. En em faziet a Varianna! Ha! Ha! Ha! »

— « Aeiñ! » Emañ ar Person lakêt nehet.

— « A-veh m'edon kousket ma teued en-dro d'am hlask, evid Kerognan. Pennad! emeve, set' amañ avad eur hoari! P'en em gavan en ti, ar wreg yaouank a lavar din: « Dihunet om bet gand klem-mou ar vamm-goz. Va Doue! Va Doue! a lavare, nag a boan e va horv, e va hein! En an' Doue n'am lezit ket da vervel va-unan! Den war va zro! Job a zavas da genta. Gwelloh eo dit dond ive. »

— « Pennad, emeve, petra ' hoari ganti? Debret he-deus mad d'he hoan eur pechad pladad kig da fars. Marteze eo chemet war he stomog. » — « Nann, eme Job, terzienn a dle dezi kaoud, rag lavared a ra eo nevez bet ar Person ouz he noui. » — « Nouet on bet, ya », eme an hini goz din-me, en eur zével he 'fenn. — « Peur? », emeve. — « Eun teir eur a zo, gand an aotrou Person. » — « An nor, Mari, a lezit digor epad an noz? » — « Ya, avad, va Doue! eme Vari. D'ober petra koll amzer d'he zerra? E Lanbaol n'ez eus ket a laeron. » — « Ar Person, Marianna a zo en em faziet. D'an ti all eo e tlee mond. » — « Krakou! eme Varianna. Me 'm-eus poan e peb leh, e va gouzoug, e va hov, em hroaz-lez. Klañv on, klañv on da vervel. Alato gal! Pegwir on bet nouet. » — « Poan em-oa da vired ouz a hoarzin. Sellet em-eus piz outi. Netra nemed kleñved ar hirinou koz! »

Ar Person bremañ a hoarze kement hag ar medisin.

*

**

An diou goz a welas hoaz meur a wech ar harotez o poulza. Mond a rejont da gafeta an eil e ti eben, pa veze et ar re all d'ar pardonioù pe d'ar foarioù. Kafe koefet, mar plij! O-diou dorn ha dorn ez ejont hoaz meur a dro, diarhen, da veski al leuriad, da ober eur bale e mêziou dudiuz Kerognan. Kana a rênt gwerziou a wechall, son ar Hrampouez ha son ar Pilhaouer. Eur wech zoken, Fañch, en eur zizrei abretoh eged kustum d'ar gêr, a jomas digor e hinou o weled an diou goz o c'hoari binta-banta!

Ar hatar, ar boan izili! Ne zoñjent mui enno, hag e c'hoarzent evel bugale.

Anaoud a rit ar Porzig? N'eus ket a zour ken klouar nebleh war aochou Breiz-Izel, evel ma klouarfe peb tra, ar mor e-unan, pa dosta ouz Lanbaol. An tarziou a goll o nerz war bont ar Beg, ha bagou Lanbaol, er poull blod ha tomm, a jom da hoariellad, da droidellad dineh, araog divora.

Tud koz va 'farrez a zo heñvel outo. Laouen-meur, en eur hoarzin, eo e tostêr ouz porz an Neñvou, war-dro d'am zour dantelezet.

MAB AN DIG.

HANV

gand

Padrig Hellen

Troiadenn miz Gouere

I

[— v | — v | — v | — v]
[— v | — v | v v — v]

Diouz Ti-Ridou d'ar Feunteunioù
Gouelioù trelluz, troenn ha lidou
Kreiz ar broenneg, flamm tantadou
Gand ar banal dre ar yeunioù.

Ledet lisiou hed ar stêriou,
Douget banniel gand ar bodou:
Diouz Ti-Ridou d'ar Feunteunioù
Eston pardon ar bokedou!

Klod er hleuzioù giz ôterioù,
Spled dirazo gand ar glêdou,
Lañs an heol 'n o gwerzidou.
Gorreou atô hed an euriou
Diouz Ti-Ridou d'ar Feunteunioù!

II

Bodet eno 'n eun ilizad,
Lod daoulinet 'vel o pedi,
Lod azezet o voredi
Vel maouezed war zaouzanad,

Marsigoded ruz o strollad,
Tud a noblañs o saludi,
Hailheboded rog ar boblad,
Tud a iliz o lugudi...

Oll emedont, trell d'or zellad,
Stouet devod, oll o pledi
Ouz gras Doue ha 'n e veli
Or bokedou, klok o gwiskad,
Oh azeuli 'n eun ilizad.

III

[v v — v | — v | — v]

E tilammem par da laeron
E baradoz kaer ar banal
A oa gantañ c'hwez ar jenal. —
O diskourrem rust ha mahom!

Ha ken rankluz mall or halon,
Ha ken sammët beh or manal
Ma foranem — fallad laeron! —
A zornadou, aour ar banal.

A-dôl souden ' save spouron
'N or houstiañs: pud d'on anal
Or briadou; yen ha teñval
Ar baradoz, e zonezon...
Hag e tehem, par da laeron.

IV

[v — | v — | v — | v —]
[— v | — v | — v | — v]

Na rede yen er geun an dour!
Tomm a rede 'n or gwazied
Gwad or halon trevariet
Gand avi rust da vleunioù flour:

Bleuniennou foeon gand delioù pour,
Eonenn wern ha dishiliet
Al lostou-kaz, ha loaioù-dour
Ledet plên er poull margiet.

Na foeske yen al lagenn vourr!
Yenig ivez d'or bizied
Korz ar bleunioù ken aviet...
Ha drammet stard 'n on divreh gour
D'or grubuilh domm na yen o dour!

V

[— v | — v | — v | — v]

War ol lerb-ni, oll int chomet
Bleñ on amzer, lod, on hanwad.
Druz o vera 'n or brusk tanet,
Mel ha dienn gand peb lommad.

Or briadou bleñ mahomet,
Seiz ha lien, blevenn dañvad,
Bet peurgollet gand eun tañvad!
— Tre on divreh bet ken tommet!

Beb an nebeud, 'benn eur momed,
Bod ha bodig, int bet stranet
Heb eun damant, eun huanad,
Goude ganto bet ken fromet!
Kreiz on henchou, oll int chomet...

VI

[v — | v — | v — | v —]

Da 'foenn int aet en henchou braz
Or bleuniou hañv 'oa fresk ha beo,
Da gañv o liou, da hesk o zeo,
Ar brulu bresk, al lostou-kaz.

Tanfoultret rah er poultrenn kraz,
Ar fœonenn vistr, an elestr teo,
Da 'foenn ez a o deliou glaz,
Da reh ez a or fouge dreo.

'N or genou hoaz emañ o blaz,
Emañ o hwez etouez or bleo. —
War-lerh or freuz a-dreuz an treo,
Emañ or soñj e fest ar vaz:
Da get eo aet or hestou braz!

VII

[v — | v — | v — | v —]

A-liou d'al laez, a-liou d'ar gwad,
Emaint a-streo a-hed on hent,
Or bleuniou hañv, or c'hoantou kent:
Er poultrenn skañv e ber o zroad.

A-liou d'an tan, a-liou d'an oabl,
Pe hloanach flour, pe voulouz lenkr,
A-liou d'al laez, a-liou d'ar gwad
Emaint war-led a-hed o ment.

Or joaiou kêz, pe wir pe hoap —
Ha lod oa dous, ha lod oa trenk! —
Or joaiou taer, hor joaiou lent,
Emaint a-dreñv a-hed on oad,
Beradou laez, beradou gwad!

Hañv

[v — | v — | v — | v —]

Eur vodenn veuz e-tal ar porz
Ha gwrez an hañv ha blaz ar plouz...
Na c'hoant na soñj, na fiñv na trouz:
E kreiz an deiz eürusted morz!

Anoued ar beuz war gwrez va horv
Ha pok an heol d'ar boultrenn louz. —
Eur vodenn veuz e-tal ar porz
Ha gwrez an hañv ha blaz ar plouz...

Pellachou kraz e kreiz ar porz,
Eur yarig wenn, eur yarig rouz,
O hlohad groñs el leton touz...
Da greiz an hañv eürusted morz,
Gand gwenan dreo o frañval ouz
Ar vodenn veuz e-tal ar porz...

Ne ouien ket (ne rên ket forz!)
Pe glahar 'm-oa, petramant joa!
Na vije bet na bah na horz
D'am zenna kuit. — Ne rên ket forz:
Eur vodenn veuz e-giz eun dorz
Ha samm va horv an hini oa...
Ne ouien ket (ne rên ket forz!)
Pe glahar 'm-oa petramant joa.

Med siwaz din! siwaz, penoñs
E par ken frêz eun eurvez poud?
E leuh an eur-ze dre va zoñj?
Ha gand pe joa ha gand pe vroud,
Pe geuz zoken, d'ar poent pe zoñj
Deus grêt he merk a-dreuz va roud?...
Ar wech hebken — ha forz penoñs —
On bet ez-veo eur veuzenn boud.

Koulz ar Faltazi

[v — v | v — v | v —]

Morailhou, potailhou, dor goz...
A mammig! nag ouzoh 'm-oa kas:
An heol dre toullig ar haz!
An alhouez e chakod ho proz!

Er jerdin oa bleuniet ar roz,
Er prenestr an oabl a oa glaz. —
Morailhou, potailhou, dor goz,
Mogeriou, nag ouzoh 'm-oa kas!

Er maeziou oa bleuniou er foz,
Aveliou oa nevez o blaz
Hag costou poultrennet ha kraz...
Hoh houarn a vloñse va boz,
Morailhou, potailhou, dor goz!

Sklërijenn ho treuziou mein glaz
En antre a hloaze va noz.
Ar voger oa teñval he raz;
Padal war an treuziou mein glaz
E pare an heol 'n e vraz...
Dor antre, na ganas da hroz
Pa skubez d'an treuziou mein glaz
Va hañvad dirazout a-boz.

Pell-zo int digoret, siwaz!
An doriou a brenne ken kloz,
Ha redet am-eus-me, paour-raz,
Da glask va 'fijadur... allaz:
An avel eo goular he blaz,
Ar jerdin eo gweñvet he roz...
Pell-zo eo distanet, siwaz,
Va hañvad a horez, dor gloz!

A Daemonio Meridiano

[v — | v — | v — | v —]
[— v | — v | — v | — v]

I

An devez-hañv e barr e vrud
Hed ar menez 'led e ludu.
Kuch ar pin ha korz ar brulu
A flah a-bez en amzer lug.

An oabl a flah war reun ar brug;
Lein ar menez ' hourvez lugud:
An devez-hañv e chalm e hud
War va ene strev e ludu...

An heol a bok da veg ar grug;
Plas-ar-Horn ha Menez-Krulu
'Skrij o bronnou ken diskurlu:
An devez-hañv war wrez o rud,
Devuz devuz strev e ludu...

II

Feulz ha didrouz, stenn o plava,
Eur sparfell rouz a stign e wall
E barr an oabl, heb loh na brall,
'Uz d'an dorgenn krog o vorza.

Kriz ha ganas, 'mañ 'n e vrava,
Aerouant mud an drougou dall.
'Dreuz an heol, a-zalh, o plava,
Ar sparfell rouz a zoug ar gwall.

Korv hag ene, 'mout o flaha
Gand tommder voug an curvez fall. —
Ha plava ra eur sparfell all:
Sav, va spered, poent eo loha,
'Mañ ar pehed krog o plava.

Padrig HELLEN.

Eun den maro ha ne goll ket e benn

C'HOARIADENN FARSUZ E TRI DIVIZ

gand

Per HELIAS

Tud ar c'hoari :

PASTIEN AN TOULEG, merour ;

VISANT AN TEILEG, kiger ;

YANNIG AL LOUSOUARN, ostiz.

DIVIZ KENTA

E ti Pastien an Touleg. Pastien a zo da vad o renka eun tamm hernaj koz bennag, pa zigouez ar higer, Visant an Teileg.

VISANT

Salud deoh, Pastien. Penaoz en em gavit e-touez ho tilhad? Hag an tiegez? Mad an traou abaoe ar wech diweza?

PASTIEN

Sell! Emañ digouezet ar higer. Petra emaoñ o klask, pôtr koz?

VISANT

Netra nemed kig beo, kig war bao da brena. Kig loened, evel just, rag ar hig tud ne vez ket hoaz debret er vro-mañ, daoust ma anavezant tud hag a zo loened awalh.

(C'hoarzadeg).

PASTIEN

Gwir eo. Hag ar gigerien n'emaint morse war-lerh ar re-all.

VISANT

Ar vicher eo. Arsa, brao an amzer hirio, neketa?

PASTIEN

Brao eo ha brao n'eo ket. Re domm, kalz re domm ha re zeh abaoe tost teir zizun zo. Ar pezh bihan ne deuiio netra vad diwarno.

VISANT

Kredi awalh a rafent. Seh an traou ha seh an dud. P'emaer o haloupad bro bemdez egizdon, ne heller ket padoud gand ar zehed, siwaz.

PASTIEN

Sched an dud a zo êz awalh da barea. Tostait ouz an dôl da ziskenn eur banne jistr bennag, ma ra plijadur deoh. Amañ, eman atao ar bluenn er varrikenn. M'ia vefe ken êz para sehor an trestou...

VISANT

Mond a rafe eur banne ganin, memestra. Med kaer a zo eva gand an amzer-mañ, atao e ya ar stal-zour d'an hesk. Korv an den a zo eur mekanik iskiz. A-boan m'ho-peus evet eur banne ha diskennet anezañ en ho stomok, ma teu kerkent er-mêz dre ho krohenn hag e hleb deoh ho roched. Poan gollet.

PASTIEN (o skarza dezañ eur werennad)

Ha koulskoude eo red dizehi ar gourlañchenn. Yehed mad deoh, Visant...

VISANT

Yehed d'an dud ha d'al loened mud en ti-mañ. (Eva a ra) Foul-tre, setu aze eur banne jistr hag a zo avalou ennañ. N'eo ket hennez eur banne bidrouilh diwar irvin skornet. Klevet am-eus atao e oa jistr mad ganeoh, Pastien. Ha gwir eo.

PASTIEN

Skarzom ar voutailh e-pad m'emaom ganti. Visant. N'eo ket ouspenn deom. Eur wech divontet ar voutailh, c'hwi oar mad, ar jistr n'emañ ket pell o vond du ha trenk.

VISANT

Memestra. Fresk eo an traou ganeoh. Pastien. M'eo kenkoulez al lêz hag ar jistr, al leueou bihan a dle beza maget kaer ha druz en ti-mañ.

PASTIEN

N'eus ket da glemm ganto. Med gand ar briz a zo da glemm. Ar gigerien a zo brasa laeron ar bed, Visant.

VISANT

Arsa, arsa, Pastien, n'eo ket gwir ar gaou-ze. Ar gigerien a ra ar briz a zo merket dezo. Na muioh na nebeutoh.

PASTIEN

Ta, ta, ta... klevit pezh a lavaran. Ar paourkêz labourer-douar ne oar ket morse pegement e werzo e loened. Med pegement e pren anezo, e oar mad, siwaz dezañ. Distôl a zo war al leueou bihan, am-eus klevet?

VISANT

Distôl n'eus ket. Ar memez priz eged ar zizun all. Med ar zizun da zond e vo distôl sertanamant. Kalz a zistôl. Rag-se, m'ho-peus eul leue da werza, Pastien, deut eo ar mare mad.

PASTIEN

Feiz sur am-eus eul leue da werza. Pegement al lur ganeoh?

VISANT

Naonteg real a ran d'ar re-all. Med, evidoh, Pastien, peogwir e ouzon a zo atao ganeoh leueou kaer, a zo nebeud a goll warno evid ar higer, evidoh e rin naonteg real ha daou.

PASTIEN

Ober goap a rit, Visant. Naonteg real ha daou... C'hwi a zoñj deoh e rin va leue d'ar mareou-mañ evid naonteg real ha daou dre lur. Kerzit da hwitellad.

VISANT

Feiz, paourkêz den, ne hellan ket ober muioh. Ha hoaz on êt dreist ar briz. Ar higer paour a dle ober beh d'e gorr evid kaoud e dammig bara.

PASTIEN

Kerzit atao, kerzit atao, Visant. P'am-mo amzer, me a glemmo ahanoh. Med da hortoz, me 'fell din kaoud ugent real deuz al lur.

VISANT

Ugent real. Siouaz 'ta. Klevet ho-peus biskoaz a zo bet pêt eul leue ugent real en eun tu bennag tro-war-dro? Koulskoude, me grede din e oah eun den a skiant-vad, eun den fur, Pastien. Med ugent real... C'hwi a zo sotoh eged va botez kleiz.

PASTIEN

Ugent real am-eus lavaret ha ne zislavarin ket. Ma n'ho-peus ket c'hoant kemered al loen, leuskit anezañ ganin. En ti-mañ, dre hras Doue, a zo lêz awalh evitañ.

VISANT

Selaou, Pastien. Ni a zo bet amezeien a-viskoaz. N'eom ket da glask fachiri evid eun dornad gwenneien rouz. Droug kalon a rafe din distrei d'ar gêr heb ober afer ganeoh. Ya, gwir, ne hellfen ket kousked em gwele an noz-mañ. Sell, lakom naonteg real ha tri. M'hen assur deoh, ne hounezin ket eul liart toull war al leue-ze.

PASTIEN

Ugent real.

VISANT

E peleh emañ ho penn ganeoh, Pastien paour?

PASTIEN

Ugent real.

VISANT

Ne dalvez ket din ar boan prena leueou kerroh eged na werzin anezo goude beza kemeret labour ganto ha kollet ma amzer.

PASTIEN

Ugent real.

VISANT

Diwall mad, Pastien. Honnez eo ar gomz diweza?

PASTIEN

Ugent real.

VISANT

Ma 'z an kuit deuz an ti-mañ, biskoaz ne lakin mui ma zreid dirazoh.

PASTIEN

Ugent real.

VISANT (*outañ e-unan*)

Boulien hurun an tanfoeltr, hemañ eo stard e grohenn war-nañ. Ha me am-eus eur friko warhoaz. Me rank kaoud eul leue bihan araog kreizteiz. Furchet am-eus ar vro hag ar hanton, netra. Red eo din c'hoari eun dro-gamm d'an den-mañ. N'eus ket da glask troiou. (*Sevel a ra, hag a vouez uhel:*) Ne dalvez ket ar boan kôzeal ganeoh, Pastien an Touleg. Mond a ran pelloh da glask eun den furroh.

PASTIEN

Kerzit, memestra. Ma leue a dalvez ugent real al lur. M'oh re baour da brena anezañ, leuskit anezañ er braou dindan ar vuoh. Ha skarzom ar voutailh epad m'emaom ganti, rag ne dalvez ket ar boan maga droug an eil ouz egile evid eul leue, nann.

VISANT

N'am-eus ket amzer, nann. Me rank beza abred e Pont-'n-Abad.

PASTIEN

Eun hanter munutenn ne zaleo ket abanoh peogwir emaoñ gand ar harr-dre-dan. Ahanta! Deuit da lipad eur werennadennig hoaz, ahendall me gredo a zo savet etrezom.

VISANT

Nann, nann, gwir. Prez a zo warnon. Eun interamant am-eus, an enderv-mañ.

PASTIEN

Eun interamant e Pont-'n-Abad? Sell 'ta! Piou a zo êt da anaon?

VISANT

Piou! Yann al Lousouarn.

PASTIEN

Yann... Yann al Lousouarn! An ostiz?

VISANT

Heñ e-unan.

PASTIEN

N'eo ket gwir, koulskoude. Disul diweza am-eus evet eur banne asamblez gantañ.

VISANT

Ha goude-ze! Amzer e-neus bet da vervel kant gwech abaoe disul.

PASTIEN

Gwir eo. Med koulskoude... Mervel heb chom war e wele eur boutadig!

VISANT

Et eo kuit en eun tól krak.

PASTIEN

Ma Doue 'ta! Ha n'e-neus kaset kelou da zen ebed war an tumañ?

VISANT

Penaoz e-nefe kaset kelou peogwir ne ouie ket e-unan e oa o vond da vervel.

PASTIEN

Hag e wreg? Gwir eo, ar vaouez-se ha ni n'om ket bet mi-goned morse. Med koulskoude! Oll familh Yann a zo war an tumañ. Heñ ha me a zo daou genderv tost... Penaoz 'ta!... Eun den ken mad. Biskoaz n'eus bet eur gomz a-dreuz etrezom. Ni en em gare e-giz daou vreur. Siwaz 'ta, paourkêz Yannig! Glabaret broust on. Trenka a ray ar jistr em stomok gand an displijadur. Maro Yannig paour! Piou e-nefe kredet kement-se. Pevar bloaz hag hanter-kant echu abaoe miz genver, ma n'eo ket eun drez. Ha da bed eur emañ an interamant gantañ?

VISANT

Da deir eur goude kreizteiz.

PASTIEN

Da deir eur goude kreizteiz, santez Vari! A-boan m'am-eus amzer da gas kelou d'ar hendirvi all. Mond a ran en hent dioustu. Ha goude-ze d'ar vourh da glask eur wetur-dre-dan evid kas ar hereñ-chou d'an interamant. Ma, souezet on. Petra lavaro ar wreg pa ouio an dra-ze. Eur rann-galon eo!

(*Leñva a ra doureg*).

VISANT

Ma! Kenavo, Pastien. Distrei a ran d'ar gêr, peogwir n'on-eus ket gelllet en em renka on daou.

PASTIEN

En em renka? Diwar-benn petra? A, ya, al leue bihan. Me ne ran forz ebed gand leueou bihan, na gand saout, na gand mob, na gand netra. Maro ma hamalad Yannig al Lousouarn, ma henderv, ma breur, koulz lavared. Kasit al leue ganeoh m'ho-peus c'hoant. Gand an diaoul, sell! Leueou awalh a zo war an douar, med n'am-eus anavezet den ebed ken mad ha Yannig, ken plijuz hag heñ, ken douget d'ober plijadur da beb hini, Doue d'e bardono, siwaz dezañ!

(*Leñva a ra hoaz*).

VISANT

Naonteg real on-eus lavaret neuze, n'eo ket 'ta?

PASTIEN

Memez tra, memez tra! Kasit al loen ganeoh, pouezit anezañ ha roit an arhant d'ar mevel. N'am-eus ket kalon awalh d'ober war-dro al loened da zeiz interamant Yann al Lousouarn. O, iaou 'ta!

Mervel da bevar bloaz hag hanter-kant, ha me kosoh evitañ. An den paour n'eo ket kalz a dra war an douar. Spontuz eo pa zoñjer. Arsa, dao eo din tenna ma jiletenn voulouz ha ma boutou-ler deuz an armel evid ober enor da Yannig al Lousouarn, Doue d'e bardono.

VISANT

Naonteg real al lur, Pastien. Grêt an afer.

PASTIEN (*droug ennañ*)

Ya. Kerzit gand an diaoul, kiger brein. Ma ne vijeh ket deut amañ hirio, marteze Yannig ne vije ket maro anezañ. Paourkêz, paourkêz, paourkêz Yannig! Aiou!!! Red e vo din lakâd ganeoh eur zelvich hag eun overenn evid deoh mond abretoh d'ar baradoz.

(*Visant a denn e dreid gantañ ha Pastien a dôl e benn war an dôl da leñva*).

EIL DIVIZ

E ti Yannig al Lousouarn. Goullo an ti, nemed ar helien. Setu emañ Pastien o tigeri an nor, goustadig, o sank a benn, hag o tond e-barz war beg e dreid, nehet awalh.

PASTIEN

Ooooo!! Peseurt interamant eo hemañ! N'eus den dirag an ti, na den ebarz!... na tamm liñser-kañv ebed nebleh! Souezuz eo. Marteze ar paotr Yannig e-neus en em lazet e-unan goude beza kouezet en dizesper! Marteze eo êt d'en em grouga, ha setu perag ne vo ket kaset d'an iliz hag e vo grêt eun interamant sivil gantañ! Koulskoude ne oa ket eun den d'ober sotoniou, nann. Med a-wechou n'ouzer ket. Paourkêz Yannig paour!! Eun druez eo. Ha den en ti! Kazi sur ar horv a zo bet pignet er gambr, d'al laez. Mond a ran betek ar gegin da weled penaoz...

YANN (*o tond tre*)

Sell 'ta! Ma mignon Pastien an Touleg! Penaoz, kenderv...

PASTIEN (*spontet*)

Santez Vari, mamm da Zoue, an hini maro a zo savet en e zav! Forz ma buhez. Nann, nann, nann, na dostait ket ouzon, ene Yannig al Lousouarn. O, iaou, o, iaou, ma horv benniget, pater noster!! Yannig kêz, chomit war ho kwele, ma mabig. Me a lako teir overenn ha tri zelvich ganeoh, evidoh mond d'ar baradoz war-eeun. O, ma Doue 'ta!

YANNIG

Petra zo peget ennoh, Pastien? Marteze ar wrez he-deus troet deoh ho penn? Gwir eo, tomm ruz eo er-mêz. Azezit e-kichen an dôl, ma evom eur bannig asamblez. Esâd a ray deoh.

PASTIEN

Nann, nann. Kerzit war ho kwele, Yannig kêz. O, iaou, n'eo ket mad deoh dond d'ober aon din. Ni a zo bet mignoned a-viskoaz. Yannig. Nann, ar re varo a dle chom e... rouantelez ar re varo.

YANNIG

Ar re varo? Piou ar re varo, Pastien?

PASTIEN

Pi... Piou? N'ho-peus ket mez, Yannig. Med c'hwi an hini a zo maro, hag a vezo intereset a-benn eun hanter- eur.

YANNIG

Me a zo maro! Ar henta kelou! Neuze on maro heb gouzoud netra. Koulskoude, boulhurun, e kav din on beo awalh.

YANNIG

Nann, nann, maro oh, peogwir on deut d'hoh interamant gand ma jiletenn kañv ha ma boutou-ler penn-da-benn.

YANNIG

Arsa, Pastien, c'hwi, n'hoh ket eun den da vond stardig war ar boeson. Med hirio, 'm-eus aon, a zo ganeoh eun dargeizad betek ma welit re varo endro deoh.

PASTIEN

Gortoz ma vo gwelet mad. Chomit fur, Yannig paour, la, la... Me rank lakâd ma dorn war ho chod da zantoud hag-beñ a zo gwrez ennoh. Ya, n'oh ket yen tamm ebed; ho taoulagad a zo bero hag ar gwad a red dindan ho krc'henn. Neuze oh deut beo endro, Yannig. N'eo bet nemed eur maro bihan. Gwell-a-ze! O, iaou! Peseurt kasa-denn! Pa ouio ar re all!

YANNIG

Pa ouio ar re-all... Piou, ar re-all?

PASTIEN

Piou? Ar familh a zo deut ganin da Bont-'n-Abad da interi ahanoh.

YANNIG

Ar familh?

PASTIEN

Ya, feiz. Er-mêz int chomet da hortoz. An eontr Visant, ar Vc'ereb Korantina, an nized hag an nizezed, hag an tad-koz Youenn Rouz, hag ar bendirvi. Deut int oll betek an hini diweza, dilezet o labouriou ganto evid dond da gondui ahanoh d'ar vered. Yannig paour. Rag eun den mad oh bet atao, ha leun a garantez evid ho familh. Setu den ne 'felle dezañ chom er gêr pa zo bet klevet e oah maro.

YANNIG

Mil bennoz deoh, Pastien paour. Plijadur vraz a ra din klevet pegen karet on gand ma familh, ya, plijadur vraz. Dond a ra an dour em daoulagad. Med c'hwi ho-peus en em zireket evid netra. Rag, evel just, n'am-eus tamm c'hoant da vervel hoaz.

PASTIEN

Yannig, sur oh da veza beo?

YANNIG

Bec, n'ouzon ket. Med, peuz ouzon mad, n'on ket maro, m'hen tou.

PASTIEN

Mad. Neuze ar higer brein-ze e-neus grêt goap ouzon.

YANNIG

Ar higer?

PASTIEN

Ya. Visant an Teileg. Heñ a zo deut du-mañ mintin mad da brena eul leue diganin, hag e-neus lavaret din e oah maro.

YANNIG

Kompren a ran, Pastien. Visant a zo maout war ar farserez. Ne gav netra gwelloc'h eged ober troiou sod. Anavezet mad eo e-giz-se. N'eo ket da fizioud ennañ.

PASTIEN

Eur farser marteze. Med ar farser-ze e-neus kavet an tu da gas gantañ ma leue bihan ha da bêa anezañ naonteg real al lur.

YANNIG

Nacnteg real al lur. Med ugent real eo ar briz, n'eo ket?

PASTIEN

Ya, sur. Med p'e-neus lavaret din e oah maro ha da veza interet an enderv-mañ, me en em gavas ken glaharet ma ne ouien ket mui petra rên, gand an displijadur. M'e-nefe kinniget din daou wenneg al lur am-mefe roet al loen dezañ, rag ne welen ket sklêr gand an dour a rede em daoulagad. Eur helou e-giz-se, soñjit 'ta!

YANNIG

Lopet oh bet gantañ, Pastien. Hennez a zo troiou en e gorr kement hag en eur gordenn geuneud. Med paka a ray e stal araog pell, m'hen assur deoh. Lakâd abanon da vervel e-kreiz ma brud!

PASTIEN

Ne dôlo ket e dreid em zi biken ken bremañ, ar higer-ze. Abendall e vo distaget ar chas war e lerh ha ne jomo ket eun dornad krohenn war e feskennou. Kenavo, Yannig. Peogwir oh beo, dre bras Doue, mond a ran da gas ar helou mad-se d'ar re-all, ha goudeze, d'ar gêr...

YANNIG

D'ar gêr! Penaoz 'ta! Ne 'z eer ket d'ar gêr goude eun interamant, heb debri eun tamm e ti an hini maro, hervez kiz ar re goz. Eur vez e vefe evidon leuskel abanoh da zistrei heb rei deoh eul lein a-zoare.

PASTIEN

Met peogwir n'oh ket maro...

YANNIG

Ta ta ta!!! Direket am-eus abanoh e-kreiz ho labour evid dond da interi abanon. Ne dalvez ket kement-se eur pred a genta klas? Hag ouspenn, plijadur vraz am-eus da veza en ho touez evid ar pred interamant-se. N'eo ket aliez e vez gwelet an hini maro o debri goude e interamant gand ar re a zo bet o kas anezañ d'ar vered, nann...

PASTIEN

Gwir eo. Eun dra iskiz awalh!

(C'hoarzin reont o-daou).

YANNIG

Kerzit buan da glask ar re-all. Lavarit dezo dond tre en ti, hardi.

PASTIEN

Mad. Mond a ran da lavared dezo. Med souezet e vint gand an tôle-ze.

(Pastien a ya er-mêz).

YANNIG

Fin, Fin. Jozefina! Da beleh ar gurun eo êt ar vatez.

(Dond a ra houmañ dirag he mestr).

A, setu emoh aze, plahig! Poent e oa deoh dond. N'ho-peus ket mez dilezel ar re varo e-giz-se! Eun druez eo! Selaouit abanon mad, bremañ: kerzit d'an daoulamm da di Visant an Teileg, ar higer, ha goulennit digantañ eur peuz tamm kig, evid pemzeg den d'an nebeuta. Nann, lakom ugent, ya, ugent den. Kemerit ivez e ti an Teileg, eur peuz tamm fourmaj rouz gouest da doufa eur rejimant. Buan! Gouzoud a ran ez eus kig leue fresk en e di. Ha lavarit dezañ penaoz me en em renko gantañ goudeze evid ar bêamant. A, louarn koz, c'hwi welo! C'hwi welo pegement e koust lakâd eun den da vervel araog ar mare.

(Ar vatez a zo o vond er-mêz).

Fina, gortozit hoaz! Goude m'ho-po bet ar hig hag ar fourmaj, c'hwi a raio eul lamm da gaoud Yannig Dall, ar biniaouer, hag a bedo anezañ da zond d'am zi gand e zab. N'eo ket evid eun eured, c'hwi lavararo, med evit eun interamant. Ya, interamant eun den a zo hoaz en e zav, sonn war e zivesker hag e-tailh dañsal ar jabadao.

(Ar vatez a zo adarre o vond er-mêz).

Fina, plahig, koulskoude, c'hwi a houlenno digand Yannig Dall gwiska e zah gand eun tamm mezer du. Red eo kas eun tammig kañv d'an hini maro, n'eo ket! Ha! ha!!

(*Ar vatez a skarz kuit, spontet*).

TREDE DIVIZ

E ti ar higer. Hemañ a zo da vad oh ober e gontchou.

VISANT

Daou vil seiz kant hag eur real war-nugent. Mad-tre! Hag hanter kant skoed am-eus da gaoud digand. Yann al Lousouarn, setu e ra daou vil eiz kant pemp hag hanter kant hag eur real. Ma, pôtr Visant, en-em dennet mad e-teus, gand leue Pastien. Ar Pastien-ze a zo bet leue awalh, heñ e-unan. Mad a zo grêt dezañ.

(*Yannig a deu en ti*).

YANNIG

Ahanta, kiger, emaoñ o konta ho laeradenn.

VISANT

Ma laeradenn! Se a zo komzou da lavared d'eun den onest e-neus roet deoh hanter-kant skoed marhadourez, hag a zo hoaz o hortoz e bêamant?

YANNIG

Hanter-kant skoed marhadourez da biou? Din-me? N'am-eus soñj ebed, nann feiz!

VISANT

Penaoz! Deh diweza, ho matez a zo deut amañ da gerhad eur pezh tamm kig evid eur friko bennag en ho ti, hag eul lur-war-nugent fourmaj rouz. Ar mestr en em renkane ganeoh, a lavar-as-hi.

YANNIG

Deh diweza? Se n'eo ket gwir, Visant.

VISANT

Penaoz, n'eo ket gwir?

YANNIG

Nann, ne hell ket beza gwir, peogwir deh me a oa maro.

VISANT

Ma... maro?

YANNIG

Ya, Visant, maro. Ha c'hwi hen goar mad-tre, peogwir c'hwi an hini a zo bet o kas ar helou d'am henderv Pastien an Toulleg, e Kerbirinig. (*Gervel a ra*). Pastien, deuit amañ 'ta.

(*Pastien a zigor an nor hag a zeu e-barz*).

PASTIEN

Ahanta, kiger, marteze hirio ez eus eun disterra kresk war briz ar moh bihan, n'eus ket?

VISANT

Devet on ganeoh, ma zud. Eun dro gamm am-eus c'hoariet, gwir eo. Med ne oa ken nemed eun tól farserez, c'hwi oar.

YANNIG

Eun tamm farserez, marteze. Pez a zo sur, ar gerent a zo deut d'an interamant.

PASTIEN

Gand eur wetur-dre-dan. Hag an tan a goust ker.

YANNIG

Hag am-eus ranket ober lein dezo dre ho faot deoh.

PASTIEN

Gand kig leue, naonteg real al lur war bao, med kalz kerroh pa zigouez war an dôl.

YANNIG

Rag-se, eur bern dispign ho-peus lakêt war ma hein, pa vez kontet ar bara, ar gwin, an amann, ar heuneud, ha me oar-me.

PASTIEN

Hag ar biniou.

VISANT

Ar biniou? Petra zo gand ar biniou?

PASTIEN

Evid kana an interamant, feiz. Eun overenn a genta klas he-defe koustet kerroh hoaz, gand an ograou.

YANNIG

Me zo kontant da vervel eur wech an amzer, Visant, ma ra plijadur deoh, med re ger e koust al lein interamant d'an deiz hirio, frei, kalz kerroh eged eul leue bihan naonteg real al lur. Hag eur pezh tamm kig n'eo ket awalh da bêa ar farserez.

PASTIEN

Dreist-oll pa vez prenet marhad-mad vil.

VISANT

Din eo da bêa, ne lavaran ket. Peogwir Yannig a zo deut adarre euz a varo da veo, marteze eo poent badeza anezañ endro. Petra lavarfeh, pôtrede, ma rafen eul lein badiziant evid Yannig al Lousouarn a-benn disul kenta?

PASTIEN

A. bremañ e kredan oh eun den. Visant. Me a zo ali.

YANNIG

Me a zo ali ivez. Nemed ne fell ket din e vefe lakêt eun tamm hollen din war ma muzellou, gand aon da baka eur zehed spontuz. Hañ!

(C'hoarzadeg).

PASTIEN

Ha ma ra diouer ar hig, kiger, me a werzo eul leue all deob. M'ed ar wech-mañ, c'hwi a bêo ar briz rik.

VISANT

Ar briz a vo pêet, Pastien, hag al lein badiziant a dalvezo al lein interamant.

(C'hoarzadeg).

— LIEN —

Per HELIAS.

Brehoneg Bro-Wened

Pennadeu savet ged skolaerion

Er wiz hag er gwenen

Draillet oè er hél ged er wiz koh pe oè degoèhet mamm d' hé bouitad, gwir é un tammig dévéhad.

Aveid wéh hellehè ket hi zapoud hé-unan, kar, sur hoalh ne oè ket chomet 'barh er hrèu anehi.

... Huchet oè de me zad, ha dein, med kaer oè klask tro-ha-tro d'er lojeris hag er leuriou, pé moh erbed ne gavem. En un taol, barh er verjé vihan de Bier Scoarnec, hag e zo hanter-kant metr bennag ardran en tiér, ni gléuas un trouz monj èl ma vehè bet en taol-gwéne achap doh ruchennieu potr Pier.

Ni de wéled kentèh.

Pèh a souéh pe oem degoèhet dirag en toull-karr!... E penn aral er verjé, léh ma ranjet er ruchennieu, oè er wiz koh 'furchal barh ou mesk ha dija oè chanjet penn de unan dohté. Du oè kein ha kestad er vamm-voh kementrel a wenen ag e oè arnehi. Klous-koudé, van erbed ne hré-hi, kaer oè geruel anehi...

Ged en eun ne vehè-hi bet flemmet ré, oè red moned d' hé hlah. Arlerh bout tapet é vanegeu ha laket ur sah ar é benn, me zad oè oeit de gerhad anehi...

Deit oè er pemoh getou endro, med buannoh oè deit kuit eid oè oeit, rag ma né hellè ket er gwenen flemmein krohen kalet er wiz koh, krontél ne oent ket in bet pell eid um fourrein 'barh mesk dilhad me zad...

Roger LE DUIGOU,
Skol er Vistri, Gwened.

(Gonezet getou ur Pevare Priz e Kenstrivadeg Yann Sohier
1958.)

Unan kollet... eih kavet !

Uisant e-nes kollet un hoh... Ur vitin, é voez e ié de gas bouid d'er moh. er wiz ne oé ken azé!

— Uisant, kollet é er wiz!

— Petra, kollet er wiz?

— Ya, deit de weled e-barh hé loñj; er portal zo chomet digor!

— Dam, ya, oeit é kuit.

Ha chetu Uisant de glask é wiz indro én ti, ér golveg, ér park, mes nebleh ne oé lon 'bed.

— Keit de glask tud ar er mezeu ha nezé hwi glasko er wiz pelloh.

... Ni oé eih a dud d'en achimant, aveit kavein er wiz. Uisant dés laret dem: « Kerhet d'i hlask ér oèh, ha marsé hwi hé havou.

— Digaset er hi genoh, ha, p' hé haveet, hwi hwitellou!

Arlerh pear pé pemp èr, n'es kavet er wiz barh ur fozell. Ni gleuè un dra bennag é krial, ha ni de sellad. Petra un-es-ni gwelet?...

Seih pé moh bihan é ivein léah ged er wiz!...

Un taol hwitell! Hag ur hard-ér arlerh é kasem er familh d'er gêr: ni or-boé pèb unan ar hun divreh...

Unan oeit kuit... eih kavet!...

Guy LE MARHOLLEG,

Lise Gwened.

Er hi paket er pej...

... Me glask, me glask, é sellad barh en toullou: ki 'bed ne gaven!... Me hucha: « Tobi! Tobi! », mes netra erbed! 'Barh peseurt toull 'n-eus gallet mond?... Me zou fached doh me hi, mes kaved anehoñ vo red. Me gar me hi ur bochad, goz eoñ hoari genein liès, ha koll anehoñ n'houlan ket gober...

Marse 'ma bet kavet ged eun den bennak, tapet pe lahet?... En noz a dosta...

'Barh ur fozell don un dra du a fich, a em laka de glemm... Ha me, blaohet, petra welan-me: me hi, tapet barh ur pej stennet aze eid tapein louarned, kounifled.

N'oh ket eid kompren pegen koutant oè me hi 'benn 'n-oè gwelet ahanon!... Ha pegen koutant oen-me... Me zistennas er pej ha chech me hi 'mèz. N'helle ket kerhed er lon paour. Red oè dein degas anehon d'er gêr ar me hein, mes ne vern ket: kavet 'm-oè anehoñ al kent!...

Tennet euz pennad Noël CAIGNEC,

5^e M, *Lise an Orient.*

(Gonezet getou un trede Priz e Kenstrivadeg Yann Sohier).

Brezoneg beo ar bobl

Fest-Noz

e

Groñvel

Kanaouennou-Pobl

dastumet

gand strollad

“ Fiseled Groñvel ”

« Fest-Noz e Gronvel »

(Pladenn Nn 3305, 33 T 1/3, Mouez Breiz, e ti Wolf e Kemper)

E-pad Skol-Hañv ar FALZ, dalhet e Gronvel e miz Gwengolo 1957, e oe bet souezet meurbed ha dudiet kenañ ar studieren gand ar Fest-Noz kinniget dezo gand an dud diwar ar miz. Eno e hellfont gweled en o haer dañsou Fañch ha Fisel, kleved ar ganerien hag an diskanerien o « teurel o mouez » evid lakaad an dud da zañsal. Beo-buhezeg eo kanaouennou ha dañsou ar bobl e Gronvel hag er parrezioù tro-war-dro d'ar Mene Du.

Eun niver braz euz an toniou a oe gellet o dastum gand ar magnetofon, e-pad an enklaskou greet gand ar Skol-Hañv. Ne oa ket awalh koulskoude arboell an danvez prisiuz-se evid eun nebeud tud hebken. Red e oa lakaad dirag an oll lod euz kaerderiou dispar ol lennegez pobl. Ha setu perag eo bet dibabet an 22 kanaouenn a gaver war ar bladenn embannet nevez zo e ti Wolf e Kemper. Al labour-ze a zo bet kaset da benn gand an ao. A. Ar Merser, mestrskol e Gronvel, a ra kement a-hend-all, evid deski brezoneg d'ar vugale hag evid dihuni eur spered breizeg en e barrez. Eur skwer eo evid an oll vistri-skol e Breiz.

Sañjet on-eus a vije mad embann komzou ar hanaouennou, diéz da gompen awechou, dre m'int distaget en eun doare rannyezel. Poan a zo bet aliez o klask kaoud ar homzou reiz. Meur a wech eo distreset ar gerioù ha n'eo ket sklér bepred ar ster. Savet diwar-benn darvoudou anavezet mad en o amzer, ar hanaouennou a zo bet distreset dre ma veze kollet an eñvor euz an darvoudou a oa meneget enno. Gwelet on-eus tud ha ne gomprenent ket ar pezh a ganent. Pa veze goulennet ganto diskleria tra pe dra, e respontent: « Evelse 'mañ! » Adskrivet on-eus ar hanaouennou en eur jom an tosta gwella euz an distagadur. Brezoneg Kerne-Uhel eo hini ar ganerien, nemed V. Riou a gan e gwenedeg (N'on ket gwall den...). Ar verbou a echu aliez gand « o » (gouelo), ed, añ. Deoh a vez distaget dah. Dezañ, anezañ, dezi, anezi a zo berraet: dañ (tañ), nañ, dei, anel... h.a. Meur a wech e kaver ivez roudou euz ar brezoneg « lennegezh »: warnezi... h.a.

Unan bennag euz ar hanaouennou a zo bet savet gand Filomela Kadoret ha Prosper Proux, « Ar Hog Klotour » gand Magourou. Aozerien eun niver braz anezo a zo dianav deom.

Emañ Jef AR PENVEN o notenni sonerez an oll ganaouennou dastumet e bro-Hroñvel. Gwall ger eo, avad, lakaad ober klichedou sonerez, ha n'hellom rei an taol-mañ nemed sonerez unan euz ar hanaouennou-ze, hini « Na seiteg de ha triweh miz ».

BRUD.

1

AR GEVIER

On da lared deoh eur ganaouenn
Pez hini 'mañ ket gwall hir;
Me ray ma goug da drohan
Ma zo barz eur poz gwir.

Disul vintin p'oen zavet
Oa ar hloh zon ar gousperou;
Me a lampas barz eur berenn
Ha da hijal ovalou.

Kêr 'm-oa hijal ha hijal
Ne gouil mann med mouilhi;
Erruet paotr ar berenn,
Na petra rit da ma brini?

Tapas eur mên en e dorn
Ha foueltas anean dre ma dal;
Benn pa oen bizitet mad
Oen bloñset en kov ma gar.

Kanet gand HENRY ha GILCHER (Gronvel).

2

PROSTERNET EO MA HALON

Na prosternet eo ma halon
En ho prezañs, Bretoned,
Vid goulenn intansion
Barz e momanchou zekred.

Evid disklerian vid gwirion,
Ar promesi fervant,
Hag ar separasion
Etre daou zen yaouank.

Ne fell ket din war ar poent-man,
Moned d'ambuzi paper,
Ha sujed a-walh a gavan
Heb astenn ar matier.

Eur re bennag matreze
A gemero an êr
Da veprizan ma buhez,
An dra-mañ esplikañ sklér.

Ni a zo daou zen yaouank
Hag e-neus koñsantet
Da gaved beb a blah yaouank
Din da vezañ karet.

Kanet gand HENRY ha GILCHER (Gronvel).

N'ON KET GWALL DEN PE DON FACHET

N'on ket gwall den pe don fached,
A mon tralura lalura lurene;
Mari Annig me hemeret!

Zave ran div teir eur raog en deiz
De rei lein d'em dous en gwele.

Ha c'hwi gousko deuz er beure
Ken baro 'n heol war ho kwele.

Ken baro 'n heol war en treujaou
Vid lied lasou ho potaou.

Pa oen dimeet hag eureujet,
Ar homzou kêr e-noe cheñchet.

A dôliou bah, a dôliou botaou,
Neuze ê Marian d'er hraou.

Zellet, pegen brao komzou er baotred,
Pen 'maint klask kavet er merhed.

Kanet gant V. RIOU (16 vloaz).

Kanaouenn a vro-Wened (Melioneg).

MARI-BLEO-MELEN

Ma gontin deoh bremañ
Eun darn euz ma buhez
Ho ne larin deoh netra
Nemed ar wirionez.

Talarperien demeuz beb bro
Teuas bremañ d'em goulenn.
Deuz a Elliant, Tourh, Kore,
Hag ive Rosporden.

Unan all e teuas hoaz
Demeuz parrez Erge.
Med re vraz oa e vragaou
Vid kaozeal ganin.

Re vraz oa e vragaou
Ha re verr e chupenn.
Evid galled kaozeal
Gand Mari bleo-melen.

Dre ma yêñ peñl deuz ar gêr,
An traou yê war falla
Me ne gaven ket netra
Med eun Itron Doue.

Droll e kavan ar pariant
Hag ar gwiskamanchou.
Teir ruban deuz o zok
Babez toull o henou.

Kanet gant PERON hag e verh

(18 vloaz)

Talarperien = Ar re a vez diwezat atao.
Babez = Babouz.

WAR-LERH AR ZOUBENN

Nag eun nozvez goud' ma hoan
N'ouzen da beleh moned;
Me a laka 'barz ma zoñj
Moned da Gerbiken.

Nag an amzer oa ken brao
Hag al loar a oa sklêr,
Ha me yeas en eur gana
Beteg lost al leurgêr.

Ha 'barh an ti pa on erru
Bonsoir am-oo laret;
Hag an dud 'barz an ti-mañ,
Hag int war o yehed?

O feiz ya zur, emezi,
Yah om braz ha bihan;
Didostit, paotr yaouank,
Deuz da lakaad an tan.

Didostit, paotr yaouank,
Deuz da lakaad an tan,
Med tanpir evid ho kov,
Amañ po ket ho koan.

Me n'on ket deut amañ,
Nesesite da zebri,
Med da garisi da ho merh,
Bremañg tuchant e lost an ti.

Med an hini goz
Tapoud eun dreujenn
Ha ' tond etrezeg din
Ha dispud da ma zantimant.

Me ho ped, paotred yaouank,
Pa it da glask merhed,
O! n'it ket da Gerbiken,
Eno 'ver bahatet.

Kanet gand PERON hag e verh.

LUSKELLEREZ (1)

Daou dadig he-neus ma merhig,
Daou dadig he-neus
Unan kamm hag unan treuz,
Daou dadig he-neus.

.....

Kouskit mad ho-taouig
E-kichenn ma merhig;
Kollet en e huñvreiou;
Kouskit, me zri boupig.

Oet e ho tad da labourad;
Chomet e ho mamm er gêr.
O, pegwir oh luskellet,
Kouskit, ma merhig, ge!

Kanet gand Marian GORR.

(1) Ne zere ket komzou an daou goublad diweza ouz ton ar ganaouenn hag e tleer selled outo evel ijinet... nevez zo. Er poz kenta, e kav deom e hellfe beza « daou droadig » ar homzou gwirion, ha n'eo ket: « daou dadig ».

DANS FISEL

Na baleet em-eus broiou
 Bet on pell deuz ar gêr.
 Na bet em-eus plijadur;
 Na bet em-eus mizer.

'Barh eur gêrig e oan bet;
 He ano oaren ket;
 Ha ma spered a oa berr;
 Ha talant n'am-oa ket.

Boud e rê 'barz ar gêr-ze
 Serten eur plahig yaouank
 A oa terrupl d'ar spered.
 Plijo rê d'am zantimant.

Mez allaz 'barh ar gêr-ze
 Oa kanfarded yaouank
 Neus debochet ma mestrez;
 Me ne n'on ket kontant.

War-bouez-se 'ta, tud yaouank,
 Me n'em-eus mann da lared,
 'Vid gweled ar plahig-ze
 Gand he muiañ karet.

'Vid gweled ar plahig-ze
 Gand dezir deuz he hoant.
 Me n'em em ziskonsolan ket;
 Me ho ped, tud yaouank.

'Benn pa vint dimezet o-daou,
 O-daou 'n eil gand egile,
 Na neuze 'ta, tud yaouank,
 Ni 'no on liberte.

Ni o-no on liberte,
 Dond d'an asembleou,
 Da choazan beb hini all
 Hervez on zantimanchoù.

Me am-eus choazet unan;
 Honnez oa kreiz ma halon;
 Ma 'h a gand eun all,
 Setu ar maleur 'vidon.

Kalz deuz ar merhed yaouank
 Ne zellont ket deuz o hoant.
 O! mez pa gavont an tu,
 Da douch eun tamm arhant!

Pa vez debret 'n arhant
 En ostaleriou,
 'Vez gwelet ar plahig-ze
 Na beb deiz o ouelo.


Karizet deoh 'ta, plah yaouank,
 Pa oah en oad da zimezi,
 Pas boud sellet deuz an arhant,
 C'hwï pefe bevet dizoursi.

Boud kemeret eur micherour,
 Na 'voned en devez,
 Keid ha pado al labour,
 Ne vez ket trididigez.

Kanet gand an Itronnez DURO ha GEDON.

BAL FISEL DOUBL

Kendoniet gand Jef AR PENVEN



Na sei-teg de ha tri-weh miz Gwel ru da la la ri dé no Na
 sei-teg de ha tri-weh miz Gwel ru da la la ri dé no Oa
 bet an Ao-trou en Pa-riz Gwel lu ri da lu ri don tran lour-dé
 Tra la la la la lé no Gwel ru da la la ri dé no Oa
 bet an Ao-trou en Pa-riz Gwel lu ri da lu ri don tran lour-dé
 Tra la la la la lé no Gwel ru da la la ri dé no
 (Kliched « Ar Falz »)

Na seiteg deiz ha triwech miz
 Oa bet an Aotrou en Pariz

Pen oa erru 'n aotrou 'barh gêr
 Oa cheñchamant 'barz ar maner.

Nag er hentañ tra 'n-oa goulennet
 Nag an Itron men ema oet?

.....

Ma aze er gambr uhellañ
 Tommad he mab an terruplañ.

Eur paotr bihan, glaz e lagad,
 Vez ket gouiet piou e e dad.

Vez ket gouiet piou e vefe
 Med hag ar miliner e ve.

Lez' ta hardi, miliner lèr,
 Me zo vond d'hen klask da gomper.

Na da gomper me ne n'an ket
 Kar 'ma ma milin valo bleud.

Kar 'ma ma milin war he zu
 ' Valo zegal ha gwiniz tu.

Ha ma hini all zo war he bord
 Ma ta da gouezal e vo torret.

Laret 'm-oa deoh, miliner lèr
 Vizeh ket bet tad ha komper.

Kanet gand an Itronezed DURO ha GEDON.

AR PARDONIOU

Ar pardonioù a zo grêt
Evid enori ar zent;
Mez allaz an dud yaouank
Nen ont ket d'o adori.

Pa vez echuet ar gousperou
D'ar honsord ve laret:
Me ho ped, degasit-me,
Ma gwir muiañ-karet.

Chomit ket ganti barz ar ru,
Degasit-hi d'eur gambr.
Enañ vo servijet dim
Petra vid on arhant?

Pa ve erru 'barz ar gambr,
Ganti ve goulennet:
Petra 'ta, ma mestrez koant,
Dezirit da gaved?

Me 'm-o bannah siroz ruz
Da velanji gand dour,
Vid diskouez deoh, paotred yaouank,
Kavan mad ar vermoud.

Kaved ran mad ar vermoud
Nag ivez ar mader;
Gwelloc'h hoaz, o' paotr yaouank,
Doned d'am has d'ar gêr.

'Benn pa 'h an d'he has d'ar gêr,
Ganti me ve deut mad.
Goulenn ran konsantamant
Digand he mamm hag he zad.

Kanet gand an Itronezed DURO ha GERON.

Nen ant: ne deont ket. Enañ: eno.

AR HOG KLOTOUR

'Barz eun ti glaz en bord an dour
Nag enañ zo eur hog klotour:
Eur hogig raz, eur hogig mad,
Ruz e glipenn, lemm e lagad.

Na kanan ra a vouez uhel,
En o stokan e diouaskell;
Med pez a ra gwasañ dezañ,
N'e-neuz ket pez a vanka dañ.

Ar polezi deuz a war-dro,
Zo charmet gantañ o kano;
Ar rens evid plijoud dezañ
A gageta deuz o gwellañ.

'N eul lochig plouz e korn ar hoad,
Zo eur bolez a gageta mad:
Ha klotour Yann p'e-neus klevet,
Zo ét ragtal, ya, d'he gweled.

Kar deuz al louarn, hennez rê spout mad,
Na p'en-ije daou pe ber draad.
Erru war-bouez kennebeud-se
Klotour 'h è hardiz da vale.

Dreist ar parkou, hennez gerze skañ;
Zavet mad e benn gantañ.
Ya, me a lar deoh, eun dra zur,
Bremañg tuchant vo plijadur.

Pa vize erru kichenn ar hlud,
Na klotour ra ket a vrud;
Ar bolez a anavez e vouez,
Hag a deus kerkent er-mêz.

Bet savet gand T. MAGOUROU.
Kanet gand GILCHER.

Enañ: eno; klotour: eur ouenn kigi, pluñv war o zreid, ha diampart a-walh,
aleze « eur paotr klotour, pe eur hlotour » eun den diampart; ar rens: ar re-ze;
hennet rê spout mad: ne rê forz; pe ber: pe bevar.

DIMEIT-ME MA MAMM

« Dimeit-me, ma mamm, bremañ pen on erru en oad
 O na, ma mamm, dimeit-me na d'eur braoig a zen
 O !
 Hag e laro bonjour bonsoir d'eur verh yaouank e pas
 O !

Na de ma eured-me, na penaoz dilhad em-mo-me?
 — Ma merh, hwi po eun dilhad du, eur re a gonsekañs,
 O !
 Ar gurunenn vo war ho penn vo unan a soufrañs
 O !

Na de ma eured-me, na penaoz botou em-mo-me?
 — Ma merh, hwi po re verniset chouriko war an douar
 O !
 Ha ken na lavaro an dud: honnez a oui bragal
 O !

.....

— Na deiz ma eured-me, na penaoz mouched em-mo-me?
 — Roet e vo deoh eur mouched gwenn em-mo-me?
 L'arit adieu d'ho karentaj, mond da gondou menci.

Na deiz ma eured-me, e pesort gwele e kouskin?
 — Hwi a gousko 'n eur gwele plunv, gwarniset rah e gwenn,
 Hag en tu dehou anezañ, eno vo ho koulenn.

Tri deiz war-lerh he fest, ni mond da dal toull dor he zad:
 « Ma zad, hwi peus ma dimezet r'ho d'eur braoig a zen!
 E ve noz ha deiz en davarn heñvel ouz eun evren!

— Ma merh, pa oah yaouank, hwi 'n em gaveh ket kontant
 O na ma merh, pa oah yaouank 'n em gaveh ket kontant,
 Ha bremañ pen doh dimezet, n'eo ket ho santimant.

Kanet gand Klaoda DURO (15 vloaz).

Eun evren: eun ever.

AR SKOLER BIHAN

Me a zo eur skolêr bihan
 Ganet kost ar hoajou;
 Vankan devez 'bed 'barh 'r skol;
 Roet ve din bonboniou.

Ha 'vid lak ma levrier,
 Ganin eur vuzetenn;
 An Dren vez lar din 'maan o vond
 Da gas kerh d'an azen.

Ha bremañ zo prenet din
 Gand mamm eur visikled;
 Hag eh an 'barh enañ gand houst;
 Toujust ma vezan gwelet.

Prometet a zo din hoaz,
 'Benn bloaz ma 'h in mad,
 In d'ar skol gand eun oto,
 Prenet din gand ma zad.

Koadlezahou a vo lesket
 An azen da zebri kerh.
 To to to a vo grêt dañ,
 Deus bremañ war ma lerh.

Savet gand BOUDOUIN
 evid e niz Yann-Erwan Gelleg (6 vloaz).
 Kanet gand BOUDOUIN hag e niz.

Gand houst: buan.

FRANSOAZIG HA PIERIG

PIERIG

Demad deoh, minorezig koant,
Fransoazig, o Fransoazig!
Demad deoh, minorezig koant,
Plahig dudiu, ma oll hoant.

FRANSOAZIG

Gwall-flour e kavan ho komjou,
Pierig, o Pierig!
Gwall-flour e kavan ho komjou,
Gwall-dener ho kourhemennou.

PIERIG

Tenerroh e ma neventi,
Fransoazig, o Fransoazig!
Tenerroh e ma neventi,
Deut on d'ho koul da zimezi.

FRANSOAZIG

Pell zo e vefen dimezet,
Pierig, o Pierig!
Pell zo e vefen dimezet,
Pavevet aon a wall-bried.

PIERIG

O! mar 'peus aon a wall-bried,
Fransoazig, o Fransoazig!
O! mar 'peus aon a wall-bried,
En an' Doue, ma hemeret.

FRANSOAZIG

Ma vefen zur ez oh gwirion,
Pierig, o Pierig!
Ma vefen zur ez oh gwirion,
Deoh, heb distro, ve ma halon.

PIERIG

Gwasañ komjou a larin-me,
Fransoazig, o Fransoazig!
Gwasañ komjou a larin-me,
E vo « ma dous », « ma harantez ».

FRANSOAZIG ha PIERIG

Dimezet int hag eureujet,
Fransoazig ha Pierig!
Dimezet int hag eureujet,
'Kreiz levezeg hag evrusted.

Savet gand Filomena KADORET
(Mouez Meneou Kerne, p. 71)

Kanet gand an Itronezed DURO ha GEDON.

DISUL PA 'H EN D'AN OVERENN

Disul pa 'h en d'an overenn
N'e ket enni me a zanje.

Ober eur zell dreist korn ma skoa,
Remerket eur vestrez koant ama.

Me wele anei kreiz an iliz,
Hag hi ken kêr 'vel flourdélis.

Eur vrozig wenn a oa ganti,
Brodet arhant war anezi.

.....
Fichet e oa ma mestrez koant;
Prest da zimezi p'he-do c'hoant.

Prest da zimezi p'he-do c'hoant,
Ma kavan den d'he zantimant.

Kanet gand PERON hag e verh.

KANERIEN AR MENEZ DU

Chelaouet, ma mignoned, ha c'hwi a glevo dioustu
Eur zon grêt gand ar ganerien zo e troad ar Menez Du.

Ar zan-mañ zo kompozet gand Kanerien Plevin;
O flijadur 'viskoaz e bet lak an dud da hoarzin.

Grêt e oe en o farroz eur gouel euz ar hêrañ
Oa ket bet hir an amzer d'an dud a oa enañ.

Gwelet e ve war 'r journaliou aliex o anoiu
Ha 'lipont ar maout partoud e-barz ar honkouriou.

.....
Savet gand BOUDOUIN,
ha kanet gantañ hag e hear, an Itron Gelleg.

AR FEST-NOZ

Ya, mond a rin, Marijan, 'benn ar yaou d'an noz;
Lar't zo din 'barh Plivin, vo grêt eur fest en noz.

Kêrroh hoaz am-eus klevet, konkour Kan ha diskan;
Kalz a blijadur a vo; mond a rin, Marijan.

Merhed Groñl a gonta mond evid ar honkour kan,
Ha kanerien Langoned, mond a rint, Marijan.

Dañs ar butun a vo grêt, vo evid ar bôtred,
Ha dañs ar mouchouerou vo evid ar merhed.

Ya, mond a rin Marijan, ni a 'h ay da zañsal,
'Barh dañs ar mouchouerou samez gand ar re-all.

Hag evid ar bôtred vad vo sachadeg baz yod
Sanker Groñl e-neus aon 'h é ar hog d'ar Resteloud.

Eur hog vo evid ar re yaouank, eun all vid ar re goz;
Ha hardi dezi, Marijan, traou d'an dro pad an noz.

Savet gand BOUDOUIN,

ha kanet gantañ hag e hoar, an Itron Gelleg.

Sanker: bandennad tud.

AL LEZVAMM

Me 'm-oa bet eul lezvamm
Hag a oa kriz ha kalet;
Diou teir eur raog an de
Na ganti vizen zavet
'Vid mond david dour
Da feunteun ar Vazale.

Ar feunteun a oa pell,
Hag an dour a oa troulbet.
Me rankontras eur havalier
O tizrei deuz an Naoned
Eur havalier yaouank
O tizrei deuz an Naoned.

Eñ a houle ganin:
Plahig, c'hwi zo dimezet?
Oan bet zod da lar'd deañ
Da lared dañ na oan ket
Oan bet zod da lar'd deañ
Da lared dañ na oan ket.

Eñ a grogas ma dorn
Ma cheñchas a Vazale
Ha voned d'e hodell
Hag ober din pemp kant skoed.
Kerzet d'ar gêr, plahig,
Ha lar't d'ho tud 'maoh dimezet.

Kerzet d'ar gêr plahig
Ha lar't d'ho tud 'maoh dimezet
D'eur havalier yaouank
O tizrei deuz an Naoned
D'eur havalier yaouank
O tizrei deuz an Naoned.

Pa oan vond ha toned war ruiou Langoned
Kleven ar zonerien, plahig, zoned ho eured.

MA HALON A ZO FRAILHET

Ma halon a zo frailhet
Dre nerz ma enkrezoù;
Ma daoulagad entanet
Ne skuilh mui a zae!ou.
Deut e siwaz an devez
Ma renkan dilezel
Leh kêr ma bugaleaj
Ma bro ger Breiz lzel.

Keno, ma zieg banal,
Kuzet 'barz an draanienn
Tachenn hlaz war behini
Bugel e hoarienn.
Gwez ivin kêr bodennet
En disheol ar beure;
E-pad tommder an hañvou
E kousken da greiste.

Keno, keno, mamm ha tad;
Bremañ n'esperit mui
Ma chomfe ho mab karet
Da harpan ho kozni.
Evid gonid deoh bara,
Vel m'ho-peus grêt dezañ;
Al lezenn ' zo didruetz;
Ho kuitaad a rankan.

Diwar Prosper PROUX.

Kanet gand an Itron Duro.

Tachenn hlaz war behini: a vez distaket « tachenn hlaz war beuzhani » (pe(seurt)hani) gand ar ganerez.

En disheol ar beure: setu pezh a zo kanet, gand an Itron Duro; med skrivet e oa bet **an disheol a bere** gand Proux.

YANNIG AR VIL VICHER

Me e Yannig ar vil vicher (diou wech),
Anavet mad gand ar vizer.

DISKAN

Hop, hei tra la la la la la la la
La la la la la la la la la la.

Brudet dre-oll war an douar,
Biskoaz n'em-eus kavet ma far.

Eur vestrez koant am-eus choajet;
Mond a ran aliez d'he gweled.

D'he gweled beteg ti he zad,
Eur hastell plouz e korn eur hoad.

Neuze, eur horn 'barz ma genou,
Me gonte dei deuz ma madou.

Me 'm-eus eur hogig hag eur yar,
Eur garrikell hag eur hoz karr;

Eur skabell-goad, eur bank-tosell,
'N eul lochig tro, prest da gouhel.

.....

Eur hi, eur haz hag eur havrig...
Gwell chañs ne gavi ket, plahig!

Setu aze roll ma madou,
Klevit bremañ ma micheriou.

Me a zo kloher ha sakrist,
Butuner mad ha lonker jistr;

Kemenerig, kêzeer flour,
Ha meliner, laer 'vel an dour;

Boutaouer koad ha kereer,
Dibuner neud ha pilhaouer;

Marhadour moh, marhadour zaout;
Da laerez kezeg 'h on eur maout!

Barner hag archer ' ven ivez,
Pa ne haloupan arôke.

Pa fell din bevañ euz ma rent,
Me glask ma boued e tro an hent.

Euz a beleh 'ta, Marivon,
Ho po gwell fortun evidon?

Savet gand Filomena KADORET

(Mouez Meneou Kerne, p. 161)

Kanet, da genta, gand Kristian Duro (11 vloaz)
ha war e lerh gand e ontr, Marsel Duro.

DANS FISEL

Disul ' barz an overn bred
Krena rês ma halon
E kleved an ordonañs
Lennet gand ar person

E kleved an ordonañs
Lennet gand ar hure
Na toud ar bôtred yaouank
Dond da zerviji ar roue

Da zerviji ar roue,
Da zouten an armo
Na ma dousig Fransizan
Er gêr ne rê med gouelo.

Tev, tev, Fransizan,
Tev, na ouelit ket.
'Benn eun daou pe eun tri bloaz,
Me ' teuy hoaz d'ho kweled.

'Benn eun daou pe eun tri bloaz
Pe eur ber d'an hirran,
Me a teuy hoaz d'ho kweled
Ma dousig Fransizan.

Tremen oa an drie bloaz,
Nag ar berved ive,
Nag ar martolod yaouank
Na zeue tamm da vale.

Ar plahig a oa yaouank,
Gave hir he amzer,

Ha 'n-oa lakêt 'barh 'n he zoñj
Da zimezi darre.

.....
Dimezet hag eureujet
Ouz an daol o koanion
Erruas ar martolod
En ti da houl lojan.

Demad deoh, matez vihan
Na hwi ma lojezfe?
Me zo eur martolod yaouank
Tistro deuz an arme.

Salokraz, emezi,
Amañ viot ket lojet;
Amañ zo folari braz,
Henoz, gand tud an eured.

Ar martolod oa eur paotr fin
Goûd ra an doare
Hag 'h eas da wel'd an dantin goz
'Barh eur gambr a-gostez.

Demad deoh 'ta, tantin goz,
Na c'hwi ma lojezfe?
Me zo eur martolod yaouank
Tistro deuz an arme.

O safud, krouadur, emezi,
Aman c'hwi vo lojet;
Samez gand tud an eured
Henoz e koanion.

Ne oa ket debret mad o hoan
Gand ar rummad kentan,
Er da houlen ar hartou,
'Vid en em zivertisan.

Salud, krouadur, emezi;
Biskoaz em-eus refuzet
Parland gand tud e-feson,
Ma ve din permetet.

Na peleh 'ma êt ho seizenn,
Nag o tiamanchou;
Ar re am-ou roet deoh
Bremañ zo seiz vloaz zo?

Na peleh 'ma êt ho kwalenn,
Nag ho pizou arhant;
Ar re am-ou roet deoh
Ouz taol ar zakramant.

Ar plah yaouank joentas he daouzorn,
Ha zellezas 'trezeg an neh:
« Beteg bremañ, ma Doue,
Me 'm-eus bevet dineh,

Beteg bremañ, ma Doue,
Dineh me 'm-eus bevet;
Me zonje din oan intanvez,
Ha setu din daou bried!

Kanet gand an Itronezed DURO ha GEDON.

An neiz labous

Ar zulvez-se an Aotrou Person e-noa lavaret er gador brezeg: « Ar vugale n'int ket koveset hoaz a ranko ar mammou o has diriaou da govez. »

Setu, d'an devez merket, e oa ar vugale dirag an iliz o hortoz an Aotrou Person hag an Aotrou Kure da zond. An eil warlerh egile ez ejont er gador-govez. Erru tro eur paotrig, seiz vloaz marteze:

— Hañ! ma mabig, petra ' teus da lavared din?

— N'ouzon ket, Aotrou Person...

— Mad! Me ' zo o vond da zikour ahanout. Hag ober a rez da Bater bemdeiz?

— Ne ran ket, Aotrou Person, dizoñjal a ran...

— Arabad, dizoñjal, ma mab! Da benn fall a rez awechou?

— Ya, pa vez droug ennon...

— Bremañ, ma mab, e rankez lavared din, da-unan, ar pez e-teus grêt hag ar pez a zo ganit war da goustiañs.

— Ya, Aotrou Person, med c'hwi a lavaro...

— Nann, te da-unan. Petra 'zo? Gweled a ran n'out ket trankil...

— Nann, Aotrou Person, med c'hwi a lavaro...

— O, paotrig diod, lavaret am-eus dit ne rin ket...

— Ma, Aotrou Person, med na lavarit da zen. Bet on bet hirio e liorz an Ti-Nevez o weled eun neiz. Lomig ar Vereuri hag e hoar a ouie ivez pelch e oa... Med oan am-eus e lavarfoh, Aotrou Person...

— Ne rin ket, paotrig...

— Pevar vi a oa ennañ, viou brao, ken brao m'am-eus digaset an neiz ganin...

— N'e-teus tra all da lavared din, ma mab?

— Nann, Aotrou Person.

— Mad! Lavar « dre ma faot » ha sko war da beultrin.

— Ha ya! A zoñj deoh, Aotrou Person? Hag e torrin ma viou en neiz!...

Ar Person a reas eun hej d'e skoaz hag a lavaras dezañ: « Kerz d'ar gêr! » D'al zul warlerh, ar Person a bignas er gador brezeg, droug ennañ: « Tadou ha mammou kristen, penaoz e kasit ho pugale da govez heb goud mod ebed? Poaniuz eo gweled an dra-ze. Diriaou a zo deuet amañ eur bugel da govez, ha pa 'm-eus goulennet gantañ petra a oa war e goustiañs e-neus lavaret din e oa bet o weled eun neiz e liorz an Ti-Nevez, hag... »

Ne hellas ket mond hirroh ar paour-kêz Person, rag diouste e-kreiz an iliz e savas eur paotrig en eur vlejaj an uhella ma helle: « Gweled a rez! Lavaret e-teus! Te 'toa prometet din ne tije ket grêt. Lavaret e-teus! Lavaret e-teus! »

An Aotrou Person a jomas mantret hag an dud en em lakeas da hoarzin. Ar paotrig paour a gemeras toull an nor hag a yeas d'ar gêr en eur ouela ' ziwar bouez e benn.

Kontadenn dastumet e Bro Pont-e-Kroaz
gand R. GARGADENNEC.

Fañch Boned Gwenn

Fañch a oa paotr er Meilhou Rouz. Bemdez e yê gand e varh hag e garr d'ar hêriou tro-war-dro, d'an tiegeziou braz ha bihan, da gas ar bleud d'ar gêr ha da zigemer an ed da zigas da vala d'ar veilh. Fañch e-nije atao amzer a walh. Mintin e yê deuz ar gêr, med noz e veze kazimant atao pa e teue en dro. Chom a rê da gaozeal, da goll e amzer, pe da zikour mestrez an tiegez da garga ar zah. Ar mestr hag ar vestrez e veze droug enno hag en em jale gand oan e c'hoarvezfe eun dra bennag gantañ pe gand ar marh. Aliez Fañch a zizoñje al letern hag e-nije gellet beza paket gand ar jandermiri.

Pa errue er gêr e lake ar harr dindan ar harri, ar marh er marchosi, a zehe ar hwez diwarnañ gand eun torch plouz, a roe dezañ eur banne gwe-lienn glouar, eun tammig mad a lann pilet, a 'foenn, hag a skuilhe plouz dindanañ. Neuze e teue da ziskarga e garrad ha da lakaad peb tra en e du: ar boued-loened en eur hoste, an ed en eur hoste all.

Pa veze erruet an oll dud er gêr, e veze lakêt koan war an daol. Diouste goude ar mañjer, Fañch a zave diouz taol, hag heb lavared netra, a yê d'ar vourh, da weled e vamm a oa o chom eno. Ne ouie morse an eur da zistrei d'ar gêr. An tiegez a veze êt da gousked. Ar vistri koulskoude ne hellent ket kousked, abalamour d'an nor chomet dibrenn. Kaer e oa ober rebechadou dezañ, ne zelaoue ket.

Eun abardaez ar vestrez a lavaras dezañ: « Goude da goan, Yann, te ' yelo d'ar vourh da gerhad eun dorz vara-zegal am-eus kaset d'an ti-forn ar mintin-mañ. Na jomi ket pell, rag c'hoant am-eus da gaoud eun tammig bara fresk araog mond d'am gwele. »

Ha Fañch a bak peg en eur zah hag a gemer ar hravaz. Kleved a reer anezañ o vond a bachou braz ha rod ar hravaz o wigourad.

Kaer e oa gortoz, tamm Fañch ebed. Eet e oa adarre da weled e vamm ha da gas dezi eul loñched mad a vara-zegal fresk evel beb sun. Ar vestrez en em zrailhe: « N'am-bo ket eun tamm bara fresk araog mond d'am gwele. Gweled a rez, Lan, n'eo ket eur paotr hennez, eun diod, ya! » — « Rait peoh, Matu-rin, me ' zo o vond da zresa an den-ze. Ro din eul liñser wenn, ma 'z in war e dro. »

Pa erruas ar mestr etre an daou hent, an hini a ya tremeg ar vourh hag an hent braz, en em guzas adreñ ar hleuz a droh an daou hent. Kleved a reas bremaig gwigour ar rod ha pacho Fañch o tond. Lakaad a reas al liñser en-dro dezañ hag a lammis war an hent.

Ar paotr paour a loskas eur vlejadenn hag a gemeras an hent en eur haloupad ar muia ma helle, med ar spes a rede, a rede atao war e lerh, ar hravaz a wigoure iskiz, lavaret e-vije bet karrig an Ankou, divisker Yann a skoe an douar e-giz freilhou, ar hwez a zivere outañ bilh-bilh ha pa daole eur zell war e lerh e wele atao ar mell den gand e liñser wenn.

Pa erruas e kichennig eur groaz a zo war lez an hent, ar spes a jomas

— Taol evez e ve eun toull e-kreiz ar haec, rag ledan eo, ha teo an drez warnañ. Sell mad dindan da dreid!

A-bouez selled e welas eun toull etre daou gae, e-touez an drez teo. Ha petra welas e-barz an toull?... Ar paour kêz Friket o selled outi, glaharig, ha n'oa ket evid distaga an disterra bleujadenn!

Red e oe mond da glask eur falz evid troha an drez koz. Dibrada a rejont ar haolig a-bouez he harniel ha, gand kalz poan, e feujont a-benn da lakaad anezi war an hent.

Sora reas eur pennadig war he divesker, mez dond a reas buan da zigourdia. Chom a reas eur pennad da zelled ouz an diou vaouez, ha dao! etrezeg he hraou da glask he hamaladexed.

Ar re-mañ a vleujas gand joa o weled an hini vud o tizrei en o zouez.

Me zoñj ar paour kêz Friket he-deus dalhet peul zoñj euz an nozvez-se.

Intañvez Y. COSQUER,
euz Porspoder, Brest.

LODENN ar re YAOUANK

Eun dro pesketa

Jakez a Gernod a oa eur hamalad braz din, rag aliez e vezem o pesketa asamblez e koste 'n aot. Eur zulvez goude an overenn vintin e oam ét da Borz ar Wreg da gerhad eun tamm boued 'vid mond da besketa goude. Ar mor a oa kaer dour. Tamm tarz ebed, tamm kroez ouz ar herreg.

« An dra-mañ n'eo ket eur gwall amzer 'vid pesketa! » eme Jakez etre diou vogedenn euz e gorn-butun atao gantañ istribilh ouz e vuzellou.

« Nann, eunn tammig lamm enni 'nefe grêt droug ebed. Deom da weled atao. » Kavoud a rejom dindan ar bili eur hrant bennag. Deut e oam a-benn ive da zastum eun tammig grehed en eur vouest houarn. Ha setu ni kroga da vond el laez hag erruet buan awalh war ar mene adarre.

« Da beleh ez aim, Jakez? »

« D'eur plas tostig diouz amañ, ha mad awalh 'vid pesketa. »

« Neuze e rankom mond da Veg ar Hougon Ruz. »

Ha ni en hent, rag dieguz e oa Jakez hag en devez-se n'oa ket kalz a houst ennañ. Koulskoude diskenn a rejom beteg Beg ar Hougon, ha goude beza lakêt eur hrogad mad a voued war an higenn e taoljom ol linenn er mor.

Didua a reas fas Jakez pa deuas el laez gantañ e wrañ genta, rag gweled a rê n'em-oa paket tra hoaz. Mez ma hini din-me a zuas, rag pesk ebed ne lakê e fri war ma higenn. Ne oan ket mui war zoñj ouz ma linenn. Jakez e-noa tapet adarre eur wrañ hag eur hastreg. Hag a-daol, ma linenn a filas dre ma bizied. Buan e pakis peg enni. Loskad a ris 'nezi da vond eun tammig hoaz, ha soudeni e ris beh eun taol reud warni. Kerkent e krogis d'he has el laez. Pounner e oa ar pesk hag a daoliou reud e rê beh. Koulskoude dond a reas er-mêz euz an dour. Eur pezh mell gwrañ e oa. Plijadur em-oa dija da veza paket eur seurt loen. Ha me da glucha war vordig ar garreg da baka peg er wrañ dre he brink, rag taoliou balanchenn kaled a roe, hag aon em-oa da weloud 'nezi o torrad al linenn hag o vond kuit. Peg oan enni, mez al loen koz a roas eun taol balanchenn eun tammig kreñvoh eged ar re all emichañs, a lakaas ahanon da goll ma hampouez. Riskia a ris war ar garreg, ha badadouilh, er mor a-stok ma horv.

Ne oan ket kouezet deuz uhel, hag ar mor a oa kaer, mez n'ouzon ket penaoz n'em-eus ket faoutet ma 'fenn war ar herreg. Daoust din da veza eun tammig badaouet e krogis er bezin. Jakez a daolas e zorn warnon hag a zavas ahanon war ar garreg... Savet e-noa ive ar wrañ, rag al linenn a oa chomet luet en-dro d'am breh.

Ha Jakez da zibouesa ar wrañ, eur mousc'hoarz gantañ e korn e hinou,
ha koulskoude e vouez eun tammig aviuz:

« An hini goz, gast goz, marteze, mez talvezoud a rê ar boan mond da
gerhad 'nezi, kê Youen! N'ema-hi ket pell ouz he hweh lur 'nezi! »

Distrei a rejom d'ar gêr. Gleb-dour-teil e oan. Yen du em-oa. Mez laouen
e oan, rag eur wrañg vraz a oa ganin em zah. N'ouzon ket mui pegement e
poueze, mez pez on sur eo a rê muioh 'vid pemp lur. Deuet e oa ganin, mez ker
awalh em-oa paët 'nezi.

✱

Evelse em-eus bet klevet gand ma zad-koz unan euz e daoliou kaer pesketa, pa
oa hoaz eun den yaouank o haloupad an aot.

P. VELLY (16 vl.).

Gouleier oh enaoui, goanagou o vervel

Dianav din lezennou striz ar glotenn, ne glaskan ket aoza rimadellou
A-hend-all, aliez int strobet gand geriou dibaot, kevrinuz, lakêt nemetken
da gloza o zidalvoudegez.

Pa gavan hir an amzer o rambreal, en em lakan da skriva an dra-mañ.
Kredi a ra din eo didalvez awalh dua paper. Kredi a ra din ivez n'eo ket
mad maha war eur galonad.

✱

Al lodenn vrasa euz an dud a râlo atô e-giz an alhweder. P'ema o pignad
e lavar pedennou: « Doue! Doue! Ne behin mui! Ne behin mui! », Ha p'ema
o tiskenn e teu gantañ touadellou: « Diaoul du! Diaoul du! ». Setu aze. N'eo
ket gwir kement-se? Kalz êsoh eo mond da heul ar pilpouserez eged dilenn
eun hent all.

An oll en-dro din 'oar n'em-eus morse lavaret an disterra pedenn. An
oll 'oar ivez n'em-eus klasket biken kloza war va zechou fall. N'ouzon
ket hag e hellfe beza eur Reiz pe eun Drugarez. Spi am-eus koulskoude,
abalamour on bet atô eun den didro. Petra eo ar gwella? Azeza dirag eur
werennad win ha burutella piz ar goustiañs, pe daoulina en eun iliz gand
eur galon prenet? Ne ran forz! Ne lakan ket beh war ma spered da houzoud
peseurt feur-eskemmo eo hini ar Mestr.

Arabad deoh ober fê war ar re en em vezv, rag siou all ho-peus, ha
niveruz zoken. M'ho-peus c'hoant tañva ar peoh, tôlit ho lagad war ar re a
zo gwallgaset gand ar vuhez, war ar beorien o klemm en dienez, ha neuze
en em gavoh stañvét. Bezit atô treh war ho kwall-froudennoù, ha dreist-oll
treh war ho kounnar. C'hoarzit laouen d'an Tonkadur a sko ouzoh didruet,
med na skoit gand den ebed. Pegwir n'hellit ket diluzia kudenn an Dazond,
klaskit ma vezo gwenn an devez hirio. Warhoaz a vezo marteze gwall-zu, ha
dindan bolz steredennet an noz, al loar a glasko ahanon en aner.

An dud a lenn awechou an Aviel, med piou a ra e vleud outañ bem-
dez-houlou. E strad peb gwerennad win ez eus eur furnez vraz, a ra deom
ankounahaad ar prederiou garo. Gouzoud a ran: evid va ene, va halon, va

dilhajou louz, n'eus aon ebed da gaoud na dirag ar fank, nag an dour,
nag an tan. Awalh eo kaoud nebeud amezien er bed-mañ. Araog starda
dorn unan bennag, diwall ne skofe ganit heb dale. Perag en em jala gand
warhoaz? Gouzoud a rez n'az-peus galloud ebed war da bianedenn. Mar
dout fur, kemer da eurusted bremañ. An Dazond, petra a zigaso dit?

Setu o tond an nevez-amzer dedennuz, leun a vleuniou kaer, a hweziou
mezevelluz. Ar halonou mall warno diglora a glask an digenvez. Peb bleunienn
a dôl he frond skañv en avel sin. Penaoz 'ta e hellfe da ene tridal dirag
sked trelluz an heol, kaerder ar mêziou, ma n'az-peus morse mezet da
galon en eur garantez didrehuz? Va yaouank a-bez a advleugn hirio. Eva a
rafen gwin dreist muzul! N'eus forz peseurt hini! N'on ket figuz! Med ar
gwella gour, kred ahanon, a gavin c'hwero e-giz ar vuhez.

En tu all d'ar bed, en tu all d'an Didermen e oan o klask ar Baradoz
hag an Ivern. Eur vouez dianav a lavaras d'in: « Ar Baradoz hag an Ivern,
en da greiz emaint! « Netra mui n'am zedenn. Diskarg din gwin, plahig
koant! Gwin ruz-tan 'vel da jodou, ha ra vezo va herseennou ken skañv ha
kuchennou da vleu rodellet!

Avel sin an nevez-amzer a floura goustadig dellouigoù eur boked roz.
Floura a rê ivez gwechall dremm va muia-karet e disheol al liorz. Ne
glaskin ket dizeha ar mor gand krogenn goulo eur vrennigenn.

— « Reunig, piou 'lavarô dit ez i warzu Bro ar Re Veo pe war eun tu
all? » A-hend-all petra 'fell dezo diskleria gand ar geriou-ze? Anavezoud a
reont 'ta unan bennag e-nefe darempredet ar broiou-ze?

Eun dra 'ouzon mad. Eun devez an Ankou a ziskaro ahanon. Hag en em
houlennan perag oh bet grêt, perag oh bet euruz, ha perag en vezoh mui
nemed ludu. Herreg 'vel doureier eur froud, 'vel avel ar menezioù, an deizioù
a dremen. Koulskoude a zo daou hag a lez ahanon dibreder-kaer: an hini
êt deh da get, hag an hini a zeuio warhoaz. Peur on ganet? Peur ez in kuit?...

Perag 'ta on nehet da veza kouezet ken aliez en abeg da wanderiou
ar hig hag ar spered? Da dristidigez da netra ne gas. Goude ar maro e
kavi an dizoñj. En ilizou en em zastum atô ar re zigadarn, o krena dirag
ar Bed-All. Neb a anavez madelez an Tad ne skuilh ket en e galon had fall
ar spont hag an aspardenn.

E doug an hañv ez an awechou da rambreal war an tréz, ha ne zoñjan
ket em zilvidigez pa hoarz laouen ouzin eur plah yaouank o tremen ebiou.

Oll skiantou an dud desket n'int nemed geriou diverzuz. Te da unan
n'out nemed eur skeudenn, hag en da benn da oll venozioù nebeutoh eged
netra. Lakom az-pefe diluziet kudenn orin ar bed. Lakom e vefes deut a-
benn da houzoud peleh ema ar wirionez. Ha pa vefes euruz kant bloavez
ha kant ouspenn ne gavi ket hent an divarvez. Lak don en da spered an
dra-mañ: eun devez da ene a guitaio da grohenn, hag e vezl rannet etre
ar bed anavezet hag ar bed dianad.

Gwechall-goz, tud dezo ar vrud da veza fur ha gouzieg, e-giz touriou
tan a sklerijenne o hantvedou. Eur ger bennag a zo chomet war o lersh,
hag int êt da get ken buan ha tra. Den n'hell intent kevrin an digompren-
nuz. Piou a zo gouest da weled ar pezh a zo kuzet a-dreñv an traou? On tiez-
ni a zo anezet evid eur predig hebken, beteg ma 'aim d'an ti diweza: an
douar yen. Ar vuhez a zo eur hoariadenn, 'leh az-peus daou dra sur da hounid,
douar yen. Euruz ar bugelig a vary d'e zvez kenta! Eursoh hoaz
ma ne zeu ket er bed-mañ! En eur dreuzi al leur-foar-mañ, arabad dit klask
na kenell na gwasked diarvar. Sonn da benn, digemer ar poaniou. Evid
da houliou ne gavi louzou ebed en-dro dit. C'hoarz d'an Anken, med na
hortozez mousc'hoarz a-berz den.

Ar Rod a dro dibreder-kaer ouz youl an dud. Diniveri ar stered ne dalv
da netra. Tôl meiz kentoh en diarvar-mañ: mervel a ri. Huñvreal ne ri
mui, preñved ar bez a grigno da gig.

C'hoant kousked am-oa. Ar Furnez a lavaras din: « Bleuniou an Eurusted morse ne daolont c'hez vad epad ar Housked, Breur ar Maro. E doug an Didermen e kouski da walh! »

Ar boan eo ar vrasa tell-gastiz e-neus lakët warnon ar Barner. Diweuz ruz 'vel gwad, pennadou bleo hir ken hoaluz, ped ahanoh a zo dindan an douar? N'hellan mui gweled an Neñv, re a zaelou em daoulagad. Tantadou an Ivern n'int nemed elfennoù dister e-keñver an tangwall a zev ahanon. Evidon ar Baradoz a zo eur predig a beoh. Kousk war an douar, kousk dindan an douar..., korvou astennet..., digenvez pebleh! Tud o tond, tud ail o vond! Bed koz treuzet d'an daoulamm gand marh gwenn ha du an Noz nag an Deiz, te eo ar palez doanuz leh o-deus huñvreet kant roue ouz kuriou kaer, 'leh o-deus huñvreet kant rouanez ouz koanteziou fero, evid dihuni en eur ouela!

Avel Gwalarn e-neus gweñvet ar rozenn kanet gand an eostig. War biou e ouelan? Pa 'no gweñvet ar Maro da jodou, merhig, bleuniou all a ziwano. Bez euruz! Keuz ebed! Netra da hortoz!

— « Er gwin va 'frazidigez! » Pa glevan unan bennag o komz diwar-benn an Eurvad a vezo e lodenn diwezatoch, awalh e kavan elgeria: « N'em-eus ket a 'fiziañs! Arhant dioustu, ha neket promesaou! » Ev gwin ha da lod a vezo ar peoh. Ar gwin n'eus nemetañ da zigas dit en-dro da yaouankiz. Kemer da waih e predig ken berr ar vuhez. Ev gwin, rag pell e kouski en douar, heb gwreg na kar! Ar bleuniou gweñvet biken n'adviegnint. Tôl pled ouz ar pri dindan da voutou, na voustres ket anezañ. Sell! Ar roz-aer-mañ a denn o ruz-der euz gwad eun uheliad sebeliet aze gwehall-goz. Ar melion-ze a gav o frond skañv e pennad bleo flour eur plah yaouank. Ar gremilh o krena e-touez ar vein, o gwriziou a zo sanket etre muzelloù eur vaouez dezi eur gened dispar gwehall. Ra vezo skañvig da droad war an tirienn: diwanet eo ar geot e ludu dremmou hoaluz, bet lirlin 'vel tulipez ruz. Taol da droad gand evez! An troñs-douar-ze emaut o paouez flastra, awechou e helife beza kalonig eur grennardez euz ar haerra. Abaoe kantvedou diniver, pennou ar roueed ha daouarn ar glaskerien-bara a zo bet kemmesket.

M'az-peus digoret da galon da vleunienn gaer ar gwir garantez, neuze pal da vuhez a zo bet mad. Pe m'az-peus klasket selaou mouez an Eurusted; pe zoken m'az-peus savet uhel da werenn en eur hoarzin d'ar vuhez. Med diwall, tremeniad! An hent ledan ma valees warnañ, diarvar n'eo ket. Kleze an Tonkadur a zo lemm. Ma kaves avalou ruz, na gutuilhes ket anezo. Kontamm a zo en o hreiz!

War an hent an uloh a nij en avel-dro. Ludu piou a nij evelse en avel? Kerz d'azeza hag ev! Kavoud a ri er gwin eul levenez dispar. Ennañ ema ar peoh gwirion, rag ar gwin a ziframm diouzom ar poaniou kriz.

Alliez e klevan: « Tonket int d'an Tan ar re a zo tomm d'o gwerenn! » Gwirioneziou diarvaruz n'ez-eus ket, med gevier splann a zo peurlies. Hag ospenn, mar deont oll d'an Ivern, karourien ar gwin, goull e tie beza ar Baradoz! War va hozni e valean goustadig. Va gwall-frouden evidout a zigas ahanon warzu ar bez, rag paouez ne ran ket da leunia ar werenn. Ar c'hoant, diboell evidout e-neus torret va skiant-vad. En abeg da ze, gand an Amzer Dall dizeliet eo didruzez va rozenn gaer.

Gand eun tammig kreun, eur veskennad dour fresk, disheol eur wezenn uhel ha da zaoulagad, n'eus Roue ebed eursoh egedon, paour-kéz ebed ken doaniet.

Da ene glan ha va hini, ra vezint unanet da viken. A-zioh on penn eur goloenn sklent a vezo astennet, hag eun devez bennag an touller a gemmesko da ludu ha va ludu.

Gwin din! Va halon glañv a houlen al louzou-ze. Gwin e frond mezevelluz Gwin a-liou gand ar gwad! Gwin evid mouga tantez va foan ha da vouez lirlin, va mui-karet! Abalamour eo digened e vefe tonket an den d'an distruj.

Kinnig da darz an deiz gwin da werenn, heñvel ouz roz-aer an nevez-amzer! Kinnig da vousehoarz eur plah yaouank gwin da werenn, heñvel-mik ouz he muzelloù! Ev ha dizoñj ema damserret ar Boan, dare da ziskar ahanout heb dale. War va bez e c'hoantaan bleuniou. Ha bleuniou o hwez ken krefiv ma vezo ar re oll a yelo ebiou, ha ra vezo eur peoh ken dispar en-dro dezañ ma n'helo den pellaad outañ.

Perag prederia? C'hoarzin a ran. Kemer ar werenn-ze hag evom en eur zelaou dineh peoh marzuz an douar. Er beure-mañ tarz an deiz e-neus leuniet an oabl a roz kaer. En abardaez-mañ e klevan en er skañv kanaouenn lirlin an diweza labousig. Frond ar gwin a zo skañvoh hoaz. Pegen flour oa da vleu, va halonig! Heb dale e yelo va yaouankiz da geja gand ar pez a zo maro. Nevez-amzer va buhez drant, mond a ra kuit 'vel eur wennili araog ar goañv du. Gortoz ar peoh amañ! Diboell!... Gortoz eun diskuiz hir! Diboell! Goude da varo ar housked a vo berr hag e vevi adarre en eur geotenn, da veza moustret, pe en eur vleunienn, da veza gweñvet dindan an heol bero.

N'em-eus netra din va-unan. Petra a jomo ouz va diler? Dibaduz eo ar vuhez 'vel eun tan: buan ankouët an tan gand an dud, buannoh hoaz dispahet al ludu klouar gand an avel.

Warhoaz marteze e savo war ar hériou eun heol spontuz ha dianav, a gaso da get kement tra. Ar gwin neuze a jomo da gousket da viken er bou-tailhou, ha ne vezo mui klevet c'hoarzedeg yaouankizou drant e skeud ar bodennou glaz.

N'em-eus ket goulnet beva! Va gwella a ran evid digemer heb sotez, heb drougpedenn ar pez a zigas din ar vuhez. Hag ez in kuit heb ober an disterra goullenn a-zivoud va iskiz a droiad war ar horn-douar-mañ.

Noz! Peoh! Difiñv 'vel va spered eo skourr ar wezenn. Eur rozenn, skeudenn da gened dibaduz o paouez dizella! Peleh emout bremañ? Te a halvan hoaz! Rozenn ebed ne 'n em zizell du-hont, hag e rankes dioueri an eurusted c'hwero a ouie mezvi ahanom on-daou.

Pa deuiu skeud an Ankou d'en em leda warnon, pa vezo liammet malan va deizioù, gervel a rin ahanoh oll, va amezeien garet. Pa vezin distroet d'ar pri, gand va ludu c'hwí a fardo eur podig, ha ganeoh a win e vezo leuniet. Neuze marteze e weloh ahanon oh adveva adarre. Gwenna a ra va fennad bleo. Warhoaz ne vo mui krefiv awalh va daouarn da gas eur werenn d'am muzelloù.

Peleh emaoch, keneiled hegarad? An Ankou e-nefe diskaret kement gour ahanoh? Peleh emaoch? Klevoud a ran hoaz ho kanaouennoù en ostalidi. Maro oh pe gousket mezo dall gand ar vuhez? Pa ne vin mui, evidon ne vo ken oh pe bleuniou na muzelloù ruz, na gwin fronduz, na beure nag abardaez, na levenez na poan. Beteg ar bed a-bez a steuzio, pegwir ouz on spered-ni eo diwanet e wirvoud end-eeun.

Ni eo peziou an abadenn gwezboell kevrinuz c'hoarizet gand ar Mestr. Goude on lakaad-dilakaad, on renka, on bounta hoaz, on stlapet gantañ a-unanou e boest distrad an Didermen. Bolz an Neñv a denn d'eur volenn troet war he genou, ha dindanni an dud a zo o kantreal en aner. Ra vezo da garantez evid da vuia-karet 'vel hini ar werenn evid ar gwin. Gwell! Diweuz ouz diweuz evid em ginnigot o gwad. Ar re ouizieg netra ne zeskint dit, med allazig malvennou hir eur jeorenn a raio dit tañva an Eurusted.

Kefridi ar gwin eo frealzi. Skuilha a ra dit e wrez. Skuba a ra latarenn skornet an Dazond. Terri a ra ar jadennou ha beuzi ahanout en eur sklerijenn dibar.

Dindan an oabl hedro e valean, n'on na fall na mad, na paour na pinvidig, ne zoujan na den na lezenn. Ne gredan mui er wirionez. Netra ne destenian mui. War an douar ez an, doaniet ha kaloneg. Araog-floura eun dremm heñvel ouz eur rozenn, ped drén em-eus tennet euz va bizied? Pa zigor d'an avel-veure bleuniou al liorzou, ar melion el lanneier o-deus klozet o malvennou. Va Doue,

daoulagad ho-peus roet deom, ha dezo an aotre da jom trellet dirag ar gened. Hag e fell deoh e nahfem kemer on gwalh e madou ar bed-mañ! Ken dihalluz eo kement-se evidom eged trei eur werenn war he genou heb fenna ar gwin, E-barz eun ostalidi em-eus goulennet eur wech gand eur hoziad ha kelou e-nefe euz tud am-oe anavezet gwechall. Hag heñ da lavared din: « Biken mui ne zizroint amañ! Setu pez a ouzon ha netra ken. Ev eur banne! »

Pa ne freuz ket ar galon, n'eo ket ar garantez eur gwir hini. Ha teurel a ra eur hlaouenn-dan gwrez eun tantad? Noz-deiz, hed ar vuhez, tud a zizeh war o zreid dre re a levez ha re a boan. Hellez Klask gourheda donder an deñvalijenn en-dro deom. Ne gavi ket he harzou. Pegen kriz eo bet ar pok kenta, pegwir edo an dihoanag e lodenn haro. Eva ' ran gwin, 'vel ma ev gwriou an elvezenn dour sin an eienenn. Ar gwin hebken a zihubo da spered. Degas en-dro a ra ar pez on-eus kollet: ar yaouankiz; ar pez a hortozom: ar peoh. Devi a ra e-giz eur wazredenn leskuz, ha freskaad evel dour fresk eur stivell, ar galloud dezañ da zougen ahanout etrezeg Bro an Dibreder.



GOULEIER O VERVEL, GOANAGOU OH ENAOUI

Ar gliz a ra soubla, o 'fennou d'ar bleuniou, med an heol o sevel a zizamm anezo euz o beh skeduz. Beb mintin ivez eo ponneret va halon, med ar feiz em-euz da adweloud ahanout en Tu-All, a zizamm anezi euz he anken.

Pegwir eo ken touelluz ar bed-mañ, perag prederia diehan a-zivoud da dammig stad dister? Lez an ene da goroll gand faltaziou an deiz o tremen. Skrivet eo da blanedenn, skrabadenn ebed netra n'helo kemma.

Eun ézennig a droiell en-dro d'ar rozenn. Petra eo? Eur roud euz he 'frond pe eur ouel bresk chomet warlerh al lusenn? Sofj am-eus euz da bennad bleo du war da jod, 'vel skerb an noz o paouez steuzia dirag da lagad. Dihun! Dihun! Malvennou skañv an deiz a zigor dirag ruzder an heol.

Skuiz-divi o houlenata al leoriou hag an dud, em-eus c'hoantët komz ouz ar werenn. Hag em-eus lakët va muzellou war he re. « Peur e varvin? Da beleh ez in? » Siwaz! Evet ganin oll win ar bed, ne vefe ket par va oll boaniou, kement a boaniou gouzañvet, kement da houzañv hoaz!

Deom d'azeza dindan eur wezenn e bleuñv gand eur werennad win em dorn. Ene ar gwin a zo ken skañv! Dibabom d'hel lakaad eun hanaf strink kizellet kaer, evid ma flouro ar bann-heol an ezez-se ken dispar.

Peoh d'an den e teñvalijenn ar bez!

Dre eun hentig emañ o vale, e-biou d'eur 'foenneg ez an. En he hreiz eur mell gwezenn a zo 'vel eun ezezenn er glazenn. Etre ar wenodenn a heulian ha skeud ar wezenn-ze ez eus marteze islonkou didreizuz. Azeza a ran dindanni koulskoude. Eul labousig a nij a-zioh. Da beleh ez a?

Setu heñ steuziet er glaz. Chom a ran en disheol sin da alvaoni. En-dro din balafennou mibin a goroll e-touez bleuniou ar prad.

Pa zoubles dindan beh ponner ar boan, p'eo èt da hesk eienenn an daelou, tro da spered warzu ar hlazenn o skedi goude eur barr-glao. Pa skuiz ahanout kaerderiou an deiz beteg gervel eun noz diziwez, sell ouz eur bugelig o tihuni en e gavell. Netra kaerroh, netra frealzusoh! Pegwir al labousig glozet en em guz evid mervel, kuzad a rin va 'fenn dirag an oll. War hent ar vuhez, kant ha kant antell a zo stignet. Pa gouezom awechou, perag atô ar giriegezh deom-ni? Desket am-eus kalz a draou, dizoñjet am-eus kalz a draou all a-ratoz-kaer. En devez em-eus stlapet pell ouzin kement tra, em-eus kavet ar peoh. Deut on da veiza n'heller gwaranti na nah netra.

Pegwir eo ar blanedenn gouzañv ha mervel, da heti eo e vefe ar horv kèz rentet d'an douar ar henta gwella. C'hwi a lavaro din: « Hag on ene

gortozet gand Doue da veza barnet hervez an oberou? » War an dra-ze e ran deoh va meno: Doue a zo kentoh eun Tad e galon dener eged eur Barner rust.

Mezo pe divezo ne glaskan nemed ar peoh. Echu ganin c'hoant gouzoud ar pez a zo mad, ar pez a zo fall.

Ne weler euz an traou nemed o stumm diavèz. Ar Mestr e-neus roet deom ar garantez 'vel m'e-neus goloet a zrein kriz bleuniou zo.

Mar dout doaniet, na jomes ket da vaga da anken ha ne houzañvi ket anezi. Mar deo re greñv, töl meiz en dreist-niver a dud o-deus gouzañvet en aner abaoe m'eo ar bed bed.

Klask eur baradoz war an douar a vefe an arvarusa tra, rag ne gavi gour ebed. Gouleier o vervel, goanagou oh enaoui, setu an deiz. Gouleier oh enaoui, goanagou o vervel, setu an noz.

Skoet out bet gand an taol dihortoz. Da vuia-karet he-deus kuitët ahanout. Pegen a-unan e oas o heulia anezi beteg ar vered! Kred ahanon! Eet eo kuit evid ma teufes daveti.

Setu torret va levezenn! Savet eur voger uhel etre he halon ha va hini. Va eost kaer moustret dindan an treid! Horjella a ran. N'eo ket ar gwin! Peoh va 'foan! Lez ahanon da glask eul louzou bennag. Red eo din beva, rag an Anaon a zo dilezet. A-dreñv va daoulagad kloz e fell din hoaz gweled he mouse'hoaz laouen. Kenavo! Kenavo emberr! Ne hortoz ket ahanon re bell mui!

Diweuz ruz, pennadou bleo flour, malvennou hir: c'hoariellou brevet gand an Amzer dall, c'hoariellou...

Trevell, gwanadur, digenvez ha pedenn: ludu, bruzunet gand an Amzer dall, ludu!...

R. BILIEC.

Notennou ar Furcherien

Diellou. Rollou-Madou

Ar paperiou koz a beb seurt a vez grêt *diellou* anezo, e galleg *Archives*. E-touez an diellou ez eus lod hag a zo rollou-madou bet roet d'eur manati, d'eun iliz, pe bet prenet, pe bet troket. Oil rollou-madou eun abati, manati, iliz, a vez grêt *Cartulaire* anezo.

Anoiou tud hag anoiou lehiou brezoneg a vez kavet er rollou-madou a zo renket amañ hervez al lizerenneg.

Levrlennadur rollou-madou Breiz a gaver e:

BESSE (DOM). — Abbayes et Prieurés de l'ancienne France. Province de Tours. Paris. *Ligugé*, 1920. — Landévennec, p. 270; Quimperlé, p. 271; Bon-Repos, p. 273; Loc-Maria, p. 275; Redon, p. 324.

DUPONT, Etienne. — Répertoire analytique des chartes intéressant la Bretagne (1024-1208). *Annales de la Société Historique et Archéologique de Saint-Malo*, 1911, pp. 177-191. *Eun diverra euz 200 roll pe wardro*.

CARTULAIRE DE BEAUPORT (Côtes-du-Nord). — a) *Istor dre vraz en « Anciens évêchés de Bretagne »* gand Geslin de Bourgogne hag A. de Barthélémy, T. IV, p. 45 h. a.;

b) Mots bretons dans les chartes de Beauport, *Revue Celtique*, III, p. 315; VII, p. 52 ha 200, *gant* Dottin *hag* Arbois de Jubainville.

HOSPITALIERS DE SAINT-JEAN ET TEMPLIERS. — Barthélémy (de). Deux chartes du xii^e siècle. *Mémoires de l'Association Bretonne*, 1873, p. 22-28.

C. DE JOSSELIN. — Noms bretons dans les chartes de Saint-Martin de Josselin. *Annales de Bretagne*, II, p. 516.

CARTULAIRE DE LANDEVENNEC. — *Bulletin du Comité des travaux historiques*, 1882. Rapport par A. Ramé.

— Documents inédits sur l'Histoire de France. *Mélanges historiques*, T.V. Le Cartulaire de Landévennec, pp. 538-600, *gant* Le Men *hag* E. Ernault.

— A. de la Borderie. Le Cartulaire de Landévennec. Rennes, 1888.

— *Mémoires de la Société Archéologique du Finistère et Bulletin de la Commission diocésaine de Quimper*. *Sellit ouz roll a pez a zo bet moulet war an daou zastumad-se* (Tables analytiques) *diwar benn roll-madou Landevennec*.

CARTULAIRE DU MORBIHAN. — *Revue historique de l'Ouest*, 1893, *gant* Rosenweig. *Revue Celtique*, XVIII, p. 394.

CARTULAIRE DE QUIMPER. — Ch. Ferville. Mémoire sur le Cartulaire de Quimper et l'Eglise de Cornouaille du xii^e au xvi^e siècle. Sorbonne, 1865.

CARTULAIRE DE QUIMPERLE. — *Bulletin de l'Union Régionaliste Bretonne*, 1937, p. 51.

— *Revue Celtique*, XVIII, p. 128; XXV, p. 361-365.

— *Annales de Bretagne*. *Embannet eo bet a dammou en Annales ha goudeze savet eul levr in-8^e*, 406 p., *gant* Léon MAITRE *ha* Paul de BERTHOU, 1904.

CARTULAIRE DE REDON. — A. de Courson. Paris, Imprimerie Impériale, 1863.

— *Annales de Bretagne*. II, pp. 234-378; V, p. 535; XII, p. 473.

— *Revue Celtique*. II, p. 404; V, p. 112, p. 321.

L. LOK.

AMAN HAG AHONT

C'HOARIVA BREZONEG RADIO-KIMERH. — Daou bez-c'hoari fentuz gand Per Helias, c'hoariet gand Per Trepos (Gwilhou) hag an oberour (Jakez). Pladenn 33 T. Nn 3304, Mouez Breiz, e ti Wolf e Kemper. Ar golo a zo skeudennet gand R.-Y. Kreston.

- 1) War eun dachenn Fobal;
- 2) Eun den divemor.

An diou abadenn da hoarzin-mañ a zo bet dibabet, ha dibabet mad, e-touez oberennoù ken niveruz Per Helias, ar strujusa skrivagner brezoneg e-neus biskoaz baleet war zouar Breiz. Perag ne skuizer ket o selaou divizou fentuz an daou gomper Gwilhou ha Jakez? Abalamour, e kred din, e kav enno peb hini eul liou breizeg nemetañ, eun dro-spered hag a zo dres on hini, disheñvel ouz ar pezh ez om boazet da glevet e galleg.

Peadra a zo amañ da hoarzin o klevet an darvoudou renket dreist evid ar hoariva gand eun den hag a oar e vicher, ennañ eun ijin-goapaad bepred o virvi. Meur a wech ivez ez a Per Helias pelloh ha donnoh eged ar farsadenn, beteg ar gomedenn wirion: klevit ar pezh a lavar Gwilhou diwar-benn « enor ar broliou lakeet bremañ en eur volotenn! »

Spi on-eus e hello heb dale Per Helias lakaad war bladennou e oberour pouezusa, evel an eil pe egile euz arvestou « Tan ha Ludu », bet embannet e niverenn genta « BRUD ».

LABOUSED GRONVEL. Kelaouenn Skol embannet gand bugale skol laik Gronvel. Niverenn miz Even a zo o paouez dond er-mêz. War wellaad ez a bepred ar gelaouennig kaloneg-mañ. Lenn a reer enni pennadou niveruz, e brezoneg beo ha yah « savet gand kred ha plijadur gand bugale Vreiz a zo hoaz ar brezoneg o yez ». Eul labour euz ar henta a ra or heneil A. Ar Merser en e skol hag en e barrez, evid ar brezoneg hag evid Breiz. Harpet e tile beza, evid ma kemero, niveruz, mistri-skol all skwer warnañ.

Nao Niverenn beb bloaz: 250 L. A. Le Mercier, Glomel (C.-D.-N.). C.C.P. 1819-12, Roazon.

KERVEZ... CE PARADIS, gand Leontin Drapier-Cadec, skeudennet gand Suzan Baron. Al levr-mañ a zo bet tostig tre da veza dibabet er penn kenta evid « Priz braz Roman Rannvroioù Bro-Hall ». Kaoud a reor ennañ danevellou fentuz pe fromuz tennet euz buhez eur vourhadenn er Menez-Are. Embannet eo gand an « Amitié par le Livre », 600 L. pe, war baper kaer: 1.000 L. Rakprena en eur gas an arhant da: « G.-M. Thomas, 5, rue Portzmoguer, Brest, C.C.P. 642-48, Roazon.

DA REIZA. E niverenn 4 « BRUD », p. 106, lenn a ranker: Jourdan de la PASSARDIERE.

ANOIOU-TUD - ANOIOU-LEHIOU. — Diwar dorn an Dr Laurent ez eus bet moulet e niverenn Mae-Mezeven gazetenn « Breiz », eur pennad leun a skiant hag a furnez anvet: « La transcription orthographique des noms propres ».

KANV. — Kelou a zo deut deom eo marvet, er Mayen, pell euz e vro himidig eta, — Kloharz, — Leon **PALAU**X, medisin, 75 vloaz, bet e skol Santez-Anna-Wened e-keid m'edo Bleimor er skol-ze. Mignoned oant ha Leon Paloux a zavas diwezatah diwar-benn e geneil al leor: « Jean-Pierre Calloc'h-Bleimor, sa Vie et ses Œuvres inédites », embannet e ti Ar Goaziou e 1926.

PLADENNOU

“ MOUEZ BREIZ ”

Nevez deut er-mêz :

C'HOARIVA BREZONEG RADIO-KIMERH :

**WAR EUN DACHENN FOBAL
EUN DEN DIVEMOR**

Daou bez-c'hoari savet gand Per Helias
ha displeget gand an oberour ha Per Trepos
(Pladenn “ Mouez Breiz ”, 33 T., Niv. 3304)

FEST-NOZ E GRONVEL

Kanaouennoù-pobl
dastumet en eur gouel Kan-ha-Diskan e skol Gronvel

(Pladenn “ Mouez Breiz ”, 33 T., Niv. 3305)

E gwerz e peb leh hag e ti **Wolf, Kemper**
Harpit an embannadurioù pladennnoù brezoneg

Eun nevezenti : Goloioù an 2 bladenn gaer-man a zo moulet
e diou yez, brezoneg ha galleg

Pemped Kenstrivadeg Yann Sohier

Beb bloaz koulz lavared, abaoe 1952, e vez savet gant « Ar Falz » eur Henstrivadeg brezoneg evid bugale ha tudou yaouank ar skoliou laik. Roet ez eus d'ar Henstrivadegou-ze ano Yann Sohier, ar stourmer a ziazezas araog ar brezel ar Honkour brezoneg kenta evid ar skoliou-stad.

Danvez ar Henstrivadegou a oe, da genta, etre 1952 ha 1954, Enklaskou diwar-benn al Laboused, ar Hirri, ar Prejou, ar Parkeier, an Hentichou, ar Hoefou, ar Bigi-dre-ouel. Bez o-doa ar genstriverien da glask respontou d'eun toullad goulennou diwar-benn anioiu brezoneg an dra-mañ-ara, an doareou-beva pe labourad, hag all, hag e houlenned outo ouspenn sevel eur pennadig-skrid e brezoneg pe trei eun nebeud frazennoù diwar ar galleg. Beb bloaz, e kreskas niver ar vugale a gemere perz er Honkourioù, betek 1956, red ma oe neuze chom heb sevel eur henstrivadeg ar bloavez-se, dre ziouer a arhant.

Adkregi a reas « Ar Falz » warlene gand he Honkourioù. Evid meur a abeg, ha daoust d'ar brud a oa savet endro dezo e broioù estren, e oe dilezet an Enklaskou « Tudoniez » (pe Etnografiez).

Eur pennad-skrid hebken a oe goulennet sevel ouz paotred ha merhed skoliou an Derez kenta hag an eil Derez. Da zibab o-doa etre diou destenn: « Eun taol-spont » ha « Boazioù Meurlarjez en ho parrez ».

E-kichen ar Henstrivadeg evid ar Skoliou e oe roet lañs d'eur Honkour-Pobl o tigemer pennadoù-skrid savet gand tud-deut pe yaouankizou er-mez a skol.

Ouspenn 500 pennad a oe dastumet en oll. Ar bloaz-mañ, danvez ar pennad da zevel a oa: « Al loen kollet ». Klozet eo bet ar Henstrivadeg e penn kenta miz mezeven. TOST D'EUR MIL A BENNADOU A ZO BET DIGEMERET AN TAOL-MAN.

Berz braz e-neus greet eta V^{ved} Kenstrivadeg Yann Sohier. Ha n'eo ket hebken e-sell niver ar « poelladennou » a zo bet kaset: e-leiz a bennadou a dalvoudegez a zo en o zouez, lod euz ar re wella o veza labourioù hir awalh hag a zo bet skrivet gand aked hag o tiskouez o-deus an aozerien eun anaoudegez braz euz o yez. Klasket e vo embann eun dibab euz ar peunadoù-ze, evel warlene, ma hell Oberenn al Leor'ou-Skol kaoud peadra d'en ober. Arroudennoù diwar eur pennad bennag a room amañ pelloh (e pajennou « Brehoneg Bro-Wened »).

Rollou goniderien ar Henstrivadeg a zo bet embannet, nevez zo, gand ar helaouennou-pemdez. Evid ar Hevrennoù C (ouspenn 15 vloaz) ha B (eil derez, betek 15 vloaz), eet eo ar maout gand paotred ha merhed yaouank euz Liseou Montroulez, an Oriant, Kemper, Sant-Brieg ha Gwengamp, euz Skoliou-Mistri Sant-Brieg, hag euz « Klasou Klokad » Plouared, Komana, Sizun, Kastel-Paol, Kallag, hag all...

Evid an Derez kenta (ouspenn 400 pennad resevet euz peb korn ar vro), ar honiderien a zo euz skoliou Trezien, Sant-Yann, Groñvel, Hanveg, Sant-Rivoal, Lanhouarne, Pleur, Plovan, Tremargad, Kerniliz hag all...

Eul labour dispar a vez greet evid ar brezoneg gand ar seurt konkourioù. Da genta o lakaad eur bern bugale da skriva e brezoneg... aliez awalh gand skoazell an tiegez a-bez. Red eo gouzoud e kemer perz er Henstrivadegou kalz skoliou ma ne vez ket hoaz kelennet ar brezoneg enno. Da eil, dre ma vez strewet eun tammig e peb leh dre ar vro eun niver braz awalh a leoriou brezoneg, a zalher dezo peogwir int bet gonezet (ha leoriou kaer int peurvuia)... D'an trede, dre ma vez kresket dre zeg brud ar Henstrivadegou e-touez an dud gand an embannoù greet er helaouennou.

Fiziañs on-eus e hello « Ar Falz » sevel eur Henstrivadeg all ar bloaz a zeu adarre, gand skoazell « Emgleo Breiz »: rouez eo al labourioù a daol kemend a frouez.

Kelennadurez ar Brezoneg

Eur Mennad-Lezenn nevez

Eul lezenn nevez a zo bet kinniget d'ar Gambr gand an Aotrou Tanguy-Prigent ha 21 kannad all euz departamantou Breiz, evid gwellaad kelennadurez ar « Yezou rannvroel ».

Poent pouezusa ar Mennad-Lezenn-ze eo e houlenn ma ve sellet ouz ar Brezoneg, an Okitaneg, ar Hatalaneg hag an Euskareg evel « eil yezou » e arnodenn ar Vachelouriez. Ne dalv ket ar boan diskleria pegen braz gonid a vefe d'ar Brezoneg ma tegemerfed al lezenn nevez kinniget: brud or yez a vefe kresket en eun doare eston, ken e-touez tud yaouank ar skolioù hag o helennerien hag e-touez ar bobl a-bez. Dreist-all, kroget e vefe stumma rummadou nevez a vistri barreg d'he helenn.

Danvez ar Mennad-Lezenn a oa bet prientet gand Kuzul Kelennadurez « Emgleo Breiz ».

Ar Gannaded o-deus roet o zinatour d'ar Mennad-Lezenn nevez, a-unan gand an Ao. Tanguy-Prigent, a zo an Ao. Ao. Pléven, Colin, Ihuél, Monteil, Bonnet, Cadic, Crouan, an Dl. Dienesch, an Ao. Ao. Dorgères d'Halluin, Guillou, Guitton, Jégorel, Le Strat, Mazier, Mao, Méhaignerie, Moisan, Orvoën, Pinvidic, Vignard ha Teitgen.

A-hend-all, eur hannad euz ar Hreizteiz, an Ao. A. Coste-Floret, e-noa kinniget, eur pennadig kentoh, eur Mennad-Lezenn all diwar-benn kelennadurez Yezou ar Rannvroioù. Disheñvel eun disterra ouz hini Kannaded Breiz, war poentou zo, tenna ra d'ar memez pal koulskoude evid pezh a zell ouz ar Vachelouriez.

Eur hannad all euz ar Hreizteiz, an Ao. Thamer, a oa bet karget gand « Kevrenn Deskadurez » ar Gambr da zével ar studiadenn diwar-benn kudenn ar « Yezou rannvroel ». Gand an darvoudou c'hoarvezet abaoe daou viz, diêz eo gouzoud avad peur ha penaoz e vo kaset war-raog labourioù « Kevrenn an Deskadurez ».

Darempredou stard a zo bet adskoulmet etre Bretoned hag Okitaniz, e-sell tizoud kaoud gwellaennou gwirion war dachenn kelennadurez o yezou. Dorn en dorn e talhint da gas o strivou war-raog betek ma vo sevenet o goulennou.

Ar heltieg degemeret evid al Lisañs

E miz c'hwevrer diweza eo bet embannet e vez diwar vremañ degemeret ar Studiù Keltieg evid unan euz ar Sertifikadoù LISAÑS (Aotreegez war al Liziri): krouet eo bet eun Testeni a Yezoniezh ha Lizeregouriez Keltieg (yezou studiet: kembraeg ha brezoneg).

EMBANNADURIOU "EMGLEO BREIZ"

BARZONEGOU :

1. - Barzonegou Reunan Ar Mougñ..... 220 lur franco
2. - Gand Red an Dour, gand Ropars Broudig. 220 " "
3. - Bleuniou Arvor, gand Mab an Dig. 220 " "

DANEVELLOU :

1. - Geotenn ar Werhez, gand Jakez Riou..... 385 " "
2. - Ar Roh Toull, gand Jakez Kerrien 385 " "

MOJENNOU BREIZ :

1. - Ar Mor, gand Per Helias..... 305 " "

BREZONEG GWENED :

1. - Dason ur Galon, gand Loeiz Herriou 670 " "
(embannet gand skoazell "Emgleo Breiz").

KAN :

1. - Kanom Uhel (Emb. Kendalc'h) ... 170 " "

KELENNADUREZ :

1. - Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg, gand an Dr Tricoire..... 325 " "
2. - L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne, gand F. Falc'hun (diviet)
3. - Geriadurig Brezoneg-Galleg ha Galleg-Brezoneg, gand Stéphan-Séité 365 " "
4. - Cent Textes Français à traduire en Breton, gand P. Trepos 285 " "
5. - Breiz Hor Bro (Emb. Kendalc'h) 170 " "
6. - Deskom Brezoneg, Stéphan-Séité 720 " "
7. - Le Pluriel Breton gand P. Trepos 1500 " "

LEORIOU SKEUDENNET EVID AR VUGALE :

1. - An Azennig bihan..... 235 " "
2. - Ar Honiklig Boudedeo 235 " "

Embannadurioù "EMGLEO-BREIZ" :
Editions "Emgleo Breiz", B, P. 17 BREST
C. C. P. 380-96 RENNES

=====

Ti-Moullerez an
" Télégramme "
Leurenn Wilson
— Brest —

=====

Ar Rener : Dr DUJARDIN



Ar Yez hag ar Vro

- EMGLEO BREIZ -

B. P. 17 BREST